



# Katekiz ar re vihan

Imbourc'h



Embannet gant **Imbourc'h**, ti-embann **Emglev An Tiegezhiou**, 29800 Trelevenez 02 98 25 10 72  
[eat@orange.fr](mailto:eat@orange.fr) <http://emglev.wordpress.com> ISBN 2-910493-31-8 EAN 9782910493318  
Aozet gant Turiav Ar Menteg ha Tepod Gwilhmod, 4<sup>th</sup> trimiziad 2016. Skoazellet gant Rannvro Breizh



## Rak-lavar

Pal pennañ al levr-mañ eo prientiñ ar bugel evit e Bask «bihan», e Bask kentañ. Evel-just e c'hell bezañ implijet evit bugale vrasoc'h, krennarded ha tud en oad zoken, hogen mat e vo dezho studiañ ivez da heul an Istor Santel en Testamant kozh, rak n'emañ ket en oberenn-mañ, o lenn «Bibl ar Vugale» hag ivez an Testamant Nevez en e hed, hag en em skrivañ d'ar c'hatekiz evit sakramant ar Gouzoumenn hag ar Pask bras, a verk an dibenn eus ar c'hatekiz.

Savet eo al levr evit ur bloavezh leun, ur gentel bep sizhun da skouer, met implijet e vo e-doug meur a vloaz betek ar gomunion gentañ. Ar c'hentelioù a vo gwelet bep bloaz ha donaet e vint a-feur ma koshaio ar bugel. Hervez e oad hag e zoare, ha diouzh an amzer-liturgiezh eus ar bloavezh kristen e vo ret lezel kentelioù 'zo a gostez rak gwelet e vint diwezhatoc'h, pe ez int bet gwelet dija hag e kavo deoc'h ne vo ket dav o adwelout.

Dreist-holl evit ar vugale etre 4 hag 8 vloaz eo savet ar c'hentelioù eta. Penndalc'hel eo ar bloavezhioù-se : dizoleiñ a ra ar bugel e «vMe», kemer a ra plegoù mat pe fall, hag e ra e gresk oc'h en em zigeriñ d'ar vuhez, buhez e gorf o kreskiñ, ha buhez e spered ma c'hwezh ennañ Gras Doue. En ur sellout ouzh ar skeudenoù e vo aes komz en un doare eeun ha diardoù gant ar bugel, hag e vo piket e galon glan a vugel, ha broudet e c'hoant-gouzout.

Kement-mañ ne vo ket tra-walc'h : ar bedenn bemdeziek ha reoliek gant holl izili an tiegezh a zo a-bouez bras, ha skouer vat ar gerent en o buhez pemdez ivez ha dreist-holl. Un ene en deus ar bugel. Un deiz e vo treuzkemmet e ene da vezañ damheñvel ouzh Doue da c'hellout arvestiñ outañ fas-ouzh-fas, en e c'hloar. Kement-se a c'hoarvezo mar plij gant Doue, gant ma vezo desket a-zoare gant e dud, Tad ha Mamm, e gatekizerien, hag ar veleien.

Ar bannoù «Gwirionezioù da c'houzout» «Emzalc'h» «Kuzulioù» «Goulennoù» a zo evit sikour ar gatekizerien : n'int ket da vezañ lennet gant ar bugel. E dibenn ar gentel e c'heller kinnig d'ar bugel livañ an tresadennoù. Evit-se hag evit chom hep distresañ al levr e vo talvoudus pellgargañ al levr aze : <http://emglev.wordpress.com/katekiz> . Tu zo ivez da bellgargañ al levr evit bannañ ar skeudennoù dre luc'hvannañ, evit ur c'hlasad da skouer.

Santez Anna, patromez ar Vretoned, Mamm-Gozh Jezuz d'ho sikouro en ho labour, hi hag a zo deuet ken mat a-benn da gatekizañ he merc'h war he barlenn, hag he deus diskouezet skouer vat dre he buhez uvel a vamm da Vari. Netra n'hell erlec'hiañ an diorreadurezh ez-vihan-se a zleomp reiñ d'ar vugale, a zo alies-tre ouzhpenn-se e penn-orin kalz a c'halvidigezhioù relijiel-rik (leaned, leanezed, menec'h, manac'hezed, beleien, eneoù emouestlet) ha kalz a diegezhioù kristen gredus.

**T. Gwilhmod**

## TRIMIZIAD KENTAÑ

N'eo ket evit sankañ anaoudegezhioù e penn ar bugel eo bet savet ar c'hentelioù-mañ, evit tizhout e ene hag e lakaat e darempred gant Doue ne lavaromp ket. N'emaomp ket war dachenn al labour-skol hogen war an dachenn speredel... Ul labour ene-ouzh-ene e rank bezañ. Emaomp o vont da zigeriñ ene ar bugel ouzh karantez an Aotrou Doue. Setu aze perak e rankomp hon-unan diwall da gaout un ene glan, ur feiz vev, ur garitez virvidik, un esperañs divrall.

Pediñ 'zo ret a-raok prientiñ pep gentel. En ur brientiñ ur gentel, derc'hel mat soñj da biv emac'h o vont da gomz, evit kavout an dro da dizhout e ene evit kreskiñ e feiz. Ar frouezh a vo gwelet en e emzalc'h pe en e respontoù, komzoù, pedennoù bihan. Krogomp bep tro gant ur bedenn vihan ivez, a vezo degaset e liamm gant ar pezh emañ ar bugelig o vevañ pe o paouez ober. Mont a reot tre ho taou er bedenn o sioulaat, ober sin ar groaz ha lavarout da skouer «*Na madelezhus ez oc'h Aotrou Doue da vezañ roet deomp ur c'horf evit bale, redek, c'hoari a-raok ar gentel*» m'en deus baleet, redet pe c'hoariet, «*Fiziout a reomp ennoc'h Erwan a zo klañv*» ma 'z eus unan klañv en-dro d'ar bugel, «*Hiziv e vo hirik ar gentel, roit deomp skoazell evit ober anezhi diouzh hor gwellañ*» ma santomp ez eo skuizh. Ha kanañ ar c'hantik d'ar Spered santel

Na lennomp ket hon testenn. Bev ha gwirion e rank bezañ an diviz etrezoc'h hag ar bugel. N'eo ket dav 'kargañ betek re' gant re a skouerioù. Ma santomp e tigresk e evezh eo

gwelloc'h krennañ ar gentel, arabat dezhañ enoeiñ rak e mar e vefed neuze da zigreskiñ e c'hoant da glevout komz hiroc'h diwar-benn an Aotrou Doue. An diviz war-lerc'h al lennadenn a zo e stumm goulennoù da lakaat ar bugel da brederiañ ha da ezteurel an traoù gant e c'herioù-dezhañ, d'en em fiziañ ennomp ez leal ma c'hellimp e sikour da zoonaat e feiz e-pad an nebeud bloavezhioù katekiz en devo en e yaouankiz tenerañ. Pep hini a rank anavezout ar bugel a zo fiziet ennañ d'ober al liamm etre ar pezh a zo da ziazezañ don en e galon, hag ar pezh a vev er vuhez-pemdez.

## Kantik d'ar Spered Santel da zigeriñ ar gentel (ton : @)



♩=80

Spe - red San - tel, Spe - red a skle-ri - jenn, Pli - jet ga



- neoc'h en - nomp bre-mañ dis - kenn A skle-ri - jenn kar



- git hor spe-re - doù A ga - ran - tez tom - mit hor c'ha-lo



- noù

2. An Ebestel,  
en ur sal unanet,  
a dan ho kras  
hoc'h eus gwechall nerzhet  
Bet evidomp  
hevelep madelezh,  
hepdoc'h ned omp  
nemet sempladurezh

3. Gwerc'hez Vari,  
esparañs ar pec'her,  
pedit Jezuz, ho Mab  
hag hor Salver.  
Grit d'hor spered  
kompren komzoù Doue  
ha d'hor c'halon  
o mirout goude-se

## Rak-Kentel gantañ PEGEN KAER EO !

Sell ouzh ar skeudenn. Emañ Pêr hag Onenn gant o c'hi o vamañ dirak an dremmwel... Kuzhet eo an heol a-dreñv ar menez.... Bourbouilh bihan al lenn... pesked 'zo, laboused ivez, ha bleunioù er parkeier...

Kuzulioù :

Goude un herrad hir e lavar Onenn da Bêr :

Piv en deus graet kement-se holl : ar menezioù, al laboused, an heol ?

A-raok pep kentel e ranker pediñ, ar Spere Santel pergen.

Ha Pêr da respont :

**An Aotrou Doue eo eveljust, gouzout mat a rez ! Pep tra zo bet graet gantañ !**

Gwirionezioù da c'houzout :

A-gevret, lavaromp : TRUGAREZ ha BENNOZH DA ZOUE !

Lavaromp : MEULEUDI DA ZOUE en deus graet pep tra.

Gant ar rak-kentel-mañ e vez lakaet ar bugel da zizoleiñ ez eus un Doue-krouer a-us da holl gaerderioù an natur.

**Ar c'hentelioù-mañ 'zo 'vont da ziskouez dit an oberoù kaer en deus graet Doue evidomp.**

**Na karet omp gantañ !**

Emzalc'h :

Meuliñ ha pediñ an Aotrou



### Kuzulioù :

Ar gentel gentañ-mañ a rank bezañ dreist-holl un diviz gant ar bugel d'e lakaat da arvestiñ ouzh traoù kaer an Aotrou Doue, evit ma teuo war e vuzelloù komzoù trugarekaat evit an Aotrou Doue, e dad eus an Neñv.

Gant pep kentel nevez, kregiñ gant un diverrañ eus ar gentel gent en ur respont d'ar goulennoù a zo merket gant ur steredennig.

Kemer a amzer a zo ezhomm, hervez evezh ar bugel.



## Rak-kentel 2 DOUE A ZO ANEZHAÑ A-HOLL-VISKOAZH Goulennoù :

Serrit ho taoulagad : Un dra bennak a welit ?

NE WELAN TRA EBET !

Pell-pell 'zo ne oa netra !

Tad ebet,  
mamm ebet,  
bugel ebet,  
na vleunienn,  
nag heol ebet... **Netra ebet en holl.**

AN AOTROU DOUE A OA ANEZHAÑ KOULSKOUDE

**An Aotrou Doue a zo anezhañ a-viskoazh  
hag e vo anezhañ da viken.**

Peurbadel eo.

N'heller ket skeudenniñ an Aotrou Doue er bed-mañ  
**rak den ne c'hell gwelout anezhañ, ken kaer ma-z eo !**

- Petra 'zo war ar skeudenn ?

- Petra a lavar Pêr hag Onenn o sellout ouzh an dremmwel ?

- Piv en deus graet an heol ? Hag ar menezioù ? Hag ar bleunioù, hag ar parkeier ?

- Daoust ha gwelout a reomp pa serromp hon daoulagad ?

- Daoust hag ez eus bet a-viskoazh mammoù, tadoù, bugale vihan, gwez, bleun, loened, heol ?

- Ne oa netra ? (*Nann, ne oa netra*)

- Ha Doue, daoust hag e oa anezhañ ? (*Ya, bez e oa anezhañ*)

- A-viskoazh ? (*Ya, a-viskoazh*)

**Pedomp :**  
**Va Doue ,**  
**na pegen bras**  
**ez oc'h !**  
**C'hwi eo an**  
**hini en deus**  
**graet**  
**pep tra.**  
**Trugarez**  
**deoc'h,**  
**o va Doue.**



## Kentel 1 KEMENT TRA 'ZO A ZO GRAET GANTAÑ

A-raok, ne oa netra !...

Ha neuze en deus lavaret Doue :

« KROUIÑ A FELL DIN ! »

Ha neuze e voe an deiz hag e voe an noz, dourioù ar stêrioù hag ar morioù, bleunioù al liorzhoù, gwez ar c'hoadegoù, al loened, bihan ha bras, ar re a vev en oabl, ar re a vev er mor pe war an douar,

KEMENT TRA 'ZO

A ZO BET KROUET GANT AN AOTROU DOUE !

Lavaromp a-gevret :

**An Aotrou Doue en deus krouet pep tra,**

ar pezh a dalvez da lavarout :

An Aotrou Doue en deus graet pep tra  
diwar netra !

DOUE EO : OBER A RA PEZH A BLIJ DEZHAÑ !

**Bihan-bihan omp dirak Doue, a zo ken bras !**

Gwirionezioù

da c'houzout :

An Aotrou Doue en deus krouet pep tra abalamour ma-z omp karet gantañ.

Emzalc'h :

Dizoleiñ ez omp karet gant Doue : el levez e tizoolomp hor c'har, hag e ra deomp bezañ anaoudek outañ : « Trugarez deoc'h, va Doue ».

Kuzulioù :

A-bouez-bras eo adwelout buan ar gentel gent evit ma eñvoro mat ar bugel ar pezh a zo bet gwelet endeo.

Seul vuanoc'h e rank bezañ graet an adweladenn-se ma-z eo yaouank-yaouankig ar bugel. Hiroc'h e c'heller bezañ gant ar vugale a zo gouest da chom war evezh.

Bezef pe vezef e rank mirout bewech an amzer a vo ret evit ar gentel a zo da reiñ.

Meur a stumm a c'heller reiñ d'an adweladenn : pe ur sell prim war ar skeudenn gent, pe sevel ar goulennoù a gaver er bajenn da heul, n'eo ket evit barn war ar pezh en deus dalc'het ar bugel en e eñvor, hogen war ar pezh en devo komprenet.



## KEMENT TRA 'ZO A ZO GRAET GANTAÑ (kendalc'h)

Ha neuze e lavaras an Aotrou Doue :

**Fellout a ra din** kaout mignoned :  
an tadoù, ar mammoù, ar vugale vihan, an holl dud !

Emaon o vont d'o lakaat en ul liorzha bras ha kaer  
gant gwez, bleunioù, frouezh, laboused :  
an holl a gano,  
pep tra 'vo kaer,  
hag an holl a vo evurus.

KEMENT TRA A BLIJ DEZHAÑ A RA AN AOTROU DOUE !

**Graet en deus an Aotrou Doue ac'hanomp  
evit ma 'z aimp un deiz d'an Neñv gantañ  
ha ma vimp eürus-tre !**

Goulennoù :

- Ha graet eo bet pep tra gant Doue ? (*Ya.*)
- Neuze en deus graet an oabl, a douar, da dad, da vamm, ar bleunioù, ar gwez, al loened ?
- Perak ?
- (*Peogwir omp karet gantañ*)
- Neuze e c'hell ober pep tra ?
- (*Ya ; an Aotrou Doue a c'hell ober kement tra a fell dezhañ*)
- Penaos en deus graet an Aotrou Doue evit krouiñ an Douar, an heol, an dour, ar bleunioù, an noz ?
- Evit piv en deus krouet kement-se-holl ?
- Neuze ne oa netra ? Nag an deiz, nag an noz, nag ar mor, nag ar c'hoadegi ?

**Pedomp :**  
**Va Doue ,**  
**Laouen bras**  
**on da**  
**c'houzout ez**  
**eo c'hwi en**  
**deus krouet an**  
**holl bleunioù**  
**evidomp.**  
**Trugarez**  
**deoc'h,**  
**o va Doue.**



## Kentel 2 DOUE A GROUAS AR GWEZ HAG AR PLANT

Plijout a ra ar c'herez deomp-holl.

Piv en deus krouet ar c'herez ? **An Aotrou Doue an hini eo.**  
Lavaret en deus : FELLOUT A RA DIN...  
hag ez eo deuet ar gwez kerez kentañ  
hag ar c'herezennoù-se a ro deomp kerez a zebromp.

Ha se n'eo nemet un draig vihan :

Doue a lavaras :

Gwez bras ar c'hoadegoù a fell din, ha bleunioù al  
liorzhoù, ha geot ar parkeier.

Pegen marzhus eo ! **Kement-se holl a zo kaer ha mat.**

Ret eo lavarout hon anaoudegezh vat da Zoue, a zo ken mat hag  
a ro deomp kement-se holl.

Holl a-gevret, lavaromp :

**Bennozh deoc'h, Aotrou !**

### Gwirionezioù da c'houzout :

Ar Grouadelezh n'eus ket  
bet anezhi adalek an deroù.  
An Aotrou Doue eo an hini  
ez eus anezhañ a-viskoazh.  
Krouet en deus pep tra.

### Emzalc'hioù :

Krediñ (pe 'akt a feiz') e  
hollc'halloudegezh an  
Aotrou Doue.



Kuzulioù :

Aes e vo er gentel-mañ. A-bouez-bras eo adwelout buan ar gentel gent evit ma eñvor mat ar bugel ar pezh a zo bet gwelet endeo.

Seul vuanoc'h e rank bezañ graet an adweladenn-se ma-z eo yaouank yaouankik ar bugel. Hiroc'h e c'heller bezañ gant ar vugale a zo gouest da chom war evezh.

Bezef pe vezef e rank mirout bewech an amzer a vo ret evit ar gentel a zo da reiñ.

Meur a stumm a c'heller reiñ d'an adweladenn : pe ur sell prim war ar skeudenn gent, pe sevel ar goulennoù a gaver er bajenn da heul, n'eo ket evit barn war ar pezh en deus dalc'het ar bugel en e eñvor, hogen war ar pezh en devo komprenet.



## DOUE A GROUAS AR GWEZ HAG AR PLANT (kendalc'h)

E pep kerezenn ez eus ur graoñenn.  
Ma vez plantet e c'hell dont da vezañ ur wezenn gerez, ur gerezenn.

Pêr a ra ur bouloudenn douar ha ma plant anezhi,  
ha ma tour anezhi bemdez,  
ne savo NETRA EBET...

Hogen ma plant ur graoñenn wirion e kresko ur wezenn.

Rak n'eus nemet had an Aotrou Doue  
a gresk d'ober plant, a ro had d'he zro.

**Bennozh deoc'h, va Doue,  
evit an holl frouezh,  
ar bleunioù  
hag ar gwez...**

Goulennoù :

- Ha plijout a ra dit ar c'herez ?
- Piv en deus graet ar gerezenn gentañ ?
- Penaos e kresk ar c'herezennoù ? (*gant ur graoñenn*)
- Neuze e vo atav kerezennoù ?
- Hag an dervennoù bras ? (*gant mez*)
- Ha gwez ar c'hoadegi, geot ar pradoù ? (*gant o greun*)
- Petra a ra Pêr ?
- Daoust hag eñ ez eo deuet a-benn gant e vouloudenn douar ?
- Perak ?
- Neuze 'eus nemet greun an Aotrou Doue a ro frouezh ?
- Daoust ha mat eo trugarekaat ?

**Pedomp :**

**Va Doue ,  
krediñ a ran  
n'oc'h eus  
ezhomm a  
netra evit  
krouiñ ar  
plant.  
Trugarez  
deoc'h,  
o va Doue, evit  
ar c'herez, ar  
prun, hag ar  
frouezh mat.**



## Kentel 3 DOUE A GROUAS AL LOENED

Doue a c'hell ober kement-tra a fell dezhañ. A-walc'h eo dezhañ lavarout « ME 'FELL DIN ! » hag e teu an traoù da vezañ, hervez e gomzoù.

Lavaret en deus Doue : LOENED A FELL DIN.

### **En oabl, er mor ha war an douar ez eus bremañ loened :**

en hon tiez, kizhier, chas, yer...

en hor pradeier, kezeg, saout, moc'h, balafenned...

en hor gwez, laboused...

er stêrioù hag er mor, pesked... re vihan ha re vras,  
hag ar balumed !

### **Kompagnuned an dud ez int, o mignoned.**

Anez da se e vefe trist ha goullo an douar.

Petra 'rafemp-ni neuze ?

**BENNOZH DEOC'H,  
VA DOUE !**

### Gwirionezioù da c'houzout :

Peogwir e kar an  
Aotrou Doue  
ac'hanomp en deus  
krouet al loened.

Emzalc'h :  
Anaoudegezh-vat :  
Mat-kaer eo an Aotrou  
Doue, evidomp en  
deus rakwelet pep tra.  
An Aotrou Doue ez  
eo.

Kuzulioù: Pal ar gentelmañ a zo taolenniñ e spered ar bugel argerzh ar Grouadelezh hervez ar Bibl. An Aotrou Doue eo en deus krouet ar wezenn gentañ, ar marc'h kentañ, ha neuze e kendalc'h ar grouadelezh dre an engehentiñ.

Sikouret kalz e vo ar bugel ma vez roet kalon dezhañ gant e dud, hag harpet gant gerioù evel « Mat eo ! Mat-kaer : Komprenet mat ec'h eus ! »

Neuze ez int laouen hag e talc'hont gant o striv.



## DOUE A GROUAS AL LOENED (kendalc'h)

Ar mintin-mañ hoc'h eus evet pep a vanne laezh marteze.  
Ha debret ur jelkenn mat a vara-amann.

**Piv a ro al laezh ?  
Hag an amann ?  
Hag ar bara ? Hag all, hag all...**

Hep saout n'eus ket a laezh, nag amann...  
Hep gwenan n'eus ket mel...

**Nag a draoù mat !**

Ha piv en deus graet ar c'hizhier ?  
Hag ar chas ?  
Hag ar c'hanaried, an turzhunelled ?

**Bennozh deoc'h, Aotrou Doue,  
da vezañ bet roet deomp kement-se-holl !**

Goulennoù :

- Petra 'zo c'hoarvezet p'en deus Doue lavaret « Me e fell din kaout laboused en oabl » ?
- Lavar din pe re a blij dit ar mmuiañ.
- Petra 'zo c'hoarvezet p'en deus doue lavaret : « Me e fell din kaout pesked er mor hag er stêrioù » ?
- Petra 'zo c'hoarvezet p'en deus Doue lavaret : « Me 'fell din kaout loened » ?
- Lavar din pe re a blij dit kalz.
- Piv a ro al laezh ?
- Piv a ro ar mel ?
- Gant petra e vez graet amann ? Hag ar bara ?
- Kement-se holl a blij dit kenañ. Daoust ha dont a ra dit da soñj trugarekaat pa 'z ez ouzh taol ? ... pa savez diouzh taol ?

**Pedomp :**  
Bennozh  
deoc'h, va  
Doue ,  
da vezañ bet  
roet deomp al  
loened. Dre  
ma'z int bet  
krouet  
ganeoc'h ne  
fell ket din  
bezañ drouk  
ganto.



## Kentel 4 DOUE A GROUAS AN HEOL, AL LOAR HAG AR STERED

Ar Mestr eo an Aotrou Doue.

Gourc'hemenn a ra d'an Neñv ha d'an douar.

Diwar e youl eo ez eo deuet pep tra da vezañ

evit ma rafe **e holl vugale o mad** eus se :

ar re « vat »... koulz hag ar re « zrouk ».

An Aotrou Doue eo en deus graet an deiz hag an noz,  
hag ar stered a-viliadoù a sked en oabl.

Doue eo en deus graet an oabl !

O, na pegen madelezhus eo an Aotrou Doue :

**An deiz** a ro deomp evit redek, labourat, c'hoari ;  
**hag an noz** evit diskuizhañ !

An Aotrou Doue eo en deus graet **an heol kaer hag al loar**.

**Bennozh deoc'h va Doue !**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

**Ar Mestr eo Doue.** Eñ eo a ren en Neñv hag ar Grouadelezh. E c'hoant eo e servijfe e Grouadelezh d'an holl dud, ar re zrouk hag ar re vat.

Emzalc'h :

Azeulidigezh :  
estlammiñ ouzh e  
hollc'halloudegezh.

Sujidigezh :  
Dre ma-z eo ar **Mestr**  
e rankomp sujañ  
dezhañ ; klask plijout  
dezhañ a-raok pep tra.





Kuzulioù :

An arvesterezh ouzh a  
Grouadelezh a ra deom  
kompren ez eo pep tra suje  
ouzh Doue dre ma-z eo a  
Mestr, hag ez eo bezant  
pep lec'h, zoken en ego  
divent ar stered. Mat eo  
lakaat ar bugel da arvestiñ  
ouzh se gant ur spered a  
garantez hag a  
anaoudegezh vat, ha n'eo  
ket gant aon rak an Aotrou  
Doue.

## DOUE A GROUAS AN HEOL, AL LOAR HAG AR STERED (kendalc'h)

Diouzh an noz pa gouskomp, e sav en oabl **al loar hag ar stered** diniver, ha neuze e tiskennont hag ez eont diwar wel ha warc'hoazh pa zihunimp, en devo savet **an heol** hag e pigno uhelmat en oabl, ha d'abardaez ez aio da gousket. Hag evel-se adarre... pep devezh ha pep nozvezh, bemdez ha bemnoz....

Kement tra zo en Natur a sent ouzh lezennoù  
Krouadelezh an Aotrou Doue : bras eo, kaer eo, galloudus eo !

Me ivez, a rank sentiñ ouzh Doue, peogwir ez on un tamm eus e Grouadelezh, hogen ivez, **sentiñ a ran dre garantez, e pep frankiz, peogwir ez eo mat, kaer, galloudek ha dreist-holl dre ma kar an dud ha m'en deus roet dezho un dra ouzhpenn : frankiz o deus !**

An Natur a ro gloar da Zoue dre he c'haerder, ha ni a zo bet lakaet e penn uhelañ ar Grouadelezh gant frankiz d'e garout pe da zisentiñ outañ.

**Pebezh prof !**

**Pebezh fiziañs !**

### Goulennoù :

- Sellet ec'h eus dija ouzh an oabl gant devezh ?
  - Petra a weler pa vez deiz ?
  - Piv en deus graet an heol ?
  - Ha petra a weler pa vez noz ?
  - Piv en deus graet al loar hag ar stered ?
  - Ha kavout a rez brav kement-se-holl ?
  - Petra a lavarer da Zoue evit e drugarekaat ?
  - Daoust ha sentiñ ouzh Doue a ra an heol, al loar, ar stered ?
- (roet en deus Doue lusk d'e Grouadelezh, a ya en-dro hervez lezennoù fizik termenet gantañ, n'hellont nemet sentiñ)*
- Daoust hag eñ e rankomp sentiñ ?
- (Ya, peogwir ez eo mat an Aotrou Doue hag en deus graet un Natur a sent ouzh e lezennoù. Ni avat hen gra gant ar frankiz en deus fiziet ennomp. Diouzh ar sav-boent-se, ez eo pouezus-tre hon oberoù evit Doue, dre ma n'he deus ket an Natur ezhomm d'ober ur gread a garantez evit E servijañ.*

**Pedomp :**  
Bennozh  
deoc'h, va  
Doue ,  
da vezañ bet  
krouet an  
noz evit ma  
tiskuizhimp,  
hag an deiz  
evit labourat  
ha c'hoari.



## Kentel 5 ADAM HAG EVA

Pell-pell 'zo, ne oa nemet an douar, ar plant, al loened....

**An Aotrou Doue, pa c'hell ober kement tra a blij dezhañ,  
en deus krouet an Den.**

Roet en deus dezhañ ur c'horf, a vez gwelet  
hag ur spered, na vez ket gwelet.

**Adam eo anv an den kentañ er Bibl.** E-unan edo en ul liorzh kaer : ar  
Baradoz, a oa bet graet a-ratozh-kaer evitañ.

Hogen enoeiñ a rae,  
neuze e voe roet dezhañ ur bried gant Doue :  
**Ar vaouez kentañ eo, Eva.**

Ha Doue a lavaras dezho :  
Kalz a vugale ho pezo.

**Hor c'herent kentañ eo Adam hag Eva...**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Peurbadel eo an  
Aotrou Doue. Evel  
Tad, en deus krouet an  
dud dre garantez, evit  
ma kemerint perzh en  
e evurusted ; roet en  
deus dezho ar galloud  
da dreuzkas ar vuhez.

Emzalc'h :

Trugarekadenn evit  
roadenn ar vuhez.  
Karantez vabel.



Kuzulioù :

Komprenet en deus  
ar bugel er gentel  
gent ez eo an Aotrou  
Doue Mestr war bep  
tra.

En ur grouiñ an den,  
ez eo deuet da vezañ  
Tad, hag e laka  
anezho kerkent e  
liorz kaer ar  
Baradoz.

## ADAM HAG EVA (kendalc'h)

Piv en deus krouet Adam hag Eva ?

**An Aotrou Doue an hini eo.**

Pa c'hoarvez ganeomp ober un dra bennak,  
ez eo deomp-ni an dra, mistri ez omp warnañ.

Er ster-se e c'heller lavarout ez eo Doue **Mestr** war Adam hag Eva  
p'en deus krouet anezho.

HOR MESTR EO DOUE.

**Madelezhus** ha **galloudus** ez eo ! **Kaer-tre** eo kement tra en  
deus graet !

An oabl,an heol, ar stered, ar plant, al loened,  
holl ez int krouet evidomp !

O, na dellezek eo Doue da vezañ karet !

**Hon Tad eus an Neñv eo**

**...hag e vugale ez omp.**

Goulennoù :

- An den kentañ war an douar a oa  
..... e anv. *(Mat!)*
- Ar vaouez kentañ a oa .....
- (Mat-kaer!)*
- Piv en deus o c'hrouet ?  
*(Komprenet oc'h eus mat-tre!)*
- Bugale o deus bet ?
- Kalz ?
- Ha c'hwil bugale da Adam hag Eva  
ez oc'h ? *(Ya, bugale vihan ar  
memes natur-den hon eus)*
- Al liorzhaer ma choment ennañ a  
veze anvet.... « *(Baradoz an  
Douar)* ».
- Kalz a draoù a oa el liorzhaer.  
Petra da skouer ?
- Piv en deus graet pep tra ?
- Ha graet en deus Adam ?
- Ha graet en deus Eva ?
- Neuze ez eo dezhañ Adam hag  
Eva ?
- Ha te, dezhañ ez out ?
- Ma-z eo an Aotrou Doue da dad  
eus an Neñv, daoust ha bugel  
dezhañ ez out ?
- Neuze ez eo dav e garout ?
- Penaos ? *(eus e holl galon).*

**Pedomp :**  
Bennozh  
deoc'h, va  
Doue ,  
da vezañ bet  
c'hoantaet  
reiñ ar vuhez  
din. Gouzout  
a ran am  
c'harit hag  
ez on ho  
pugel bihan.



## Kentel 6 UR C'HORF HAG UR SPERED ZO GANIN

Hen gouzout a rit, p'en doa Doue krouet an den, en doa roet dezhañ **ur c'horf hag ur spered**.

Ar c'horf a zo ar penn, an divrec'h, an divesker, an daoulagad (o *diskouez gant an dorn*).

An holl ac'hanomp hon eus ur c'horf. E welout a reomp, stekiñ a reomp outañ.

Pa binsan ac'hanout e kriez dre ma pinsan da gorf.

Ar chas, ar c'hizhier, daoust hag eñ o deus ur c'horf ?

Ya. O gwelout a ran, stekiñ outo a c'hellan ober. M'o finsan e krient. Neuze ez int eveldomp ?

N'int ket. Un dra n'o deus ket. Pa gomzes ouzh Bisig, ne gompren ket.

Harzhal a ra Kiki, met ne gomz ket.

Te, ma komzan ouzit-te, e komprenez hag e c'hellez respont din.

Perak ? Dre m'ec'h eus un dra ha n'o deus ket al loened : **ur spered**.

Al loened o deus ur c'horf ha n'o deus ket ur spered eveldomp. Dit-te en deus roet Doue **ur spered hag ur c'horf ; evel da Adam ha da Eva**.

Gwirioneziou  
da c'houzout :

Peurbadel eo an Aotrou Doue. Evel Tad, en deus krouet an dud dre garantez, evit ma kemerint perzh en e evurusted ; roet en deus dezho ar galloud da dreuzkas ar vuhez.

Emzalc'h :

Trugarekadenn evit roadenn ar vuhez.  
Karantez mabel.



Kuzulioù :

Amañ n'eus ket anv da ober ur gentel drabedoniezh. Ret eo d'ar bugel stadañ ez-eeun ez eus ennañ ur c'horf hag un ene, tra ma n'o deus ket al loened un ene par d'an Den. Un Den a c'hell pediñ, ul loen ne c'hell ket.

A-bouez : Tro o devo ar gerent da zisplegañ ar pezh a zo kinniget amañ. Ar bugel a rank gouzout respont d'ar goulennoù-mañ :

- ur c'horf peus ? - Ur spered peus ? - Hag ar c'hazh, ur c'horf en deus ? - Hag ur spered ? - Hag Onenn a dalvez muioc'h eget Bisig ? - Ma n'az pije ket a spered, daoust hag ul loen e vijes ? - Sed aze d'ar pezh a gas ar skeudenn. Ar gentel-mañ a gloz eta gant ur bedenn-drugarekaat laouen :

Bennozh deoc'h, Aotrou Doue, da vezañ bet roet din ur spered.



## UR C'HORF HAG UR SPERED ZO GANIN (kendalc'h)

Trugarekaat a rankomp an Aotrou Doue, **hon Tad eus an Neñv.**

Roet en deus deomp : daoulagad evit gwelout, divskouarn evit klevout, un teod evit komz, divesker evit kerzhout...

Roet en deus deomp ivez ur spered evit e garout, e selaou, komz outañ ha mont d'an Neñv.

Sellit ouzh ar skeudenn, Pêr eo, a zo o pediñ.

Ne wel ket Doue hogen gouzout a ra emañ an Aotrou Doue aze gantañ, e wel anezhañ o pediñ, ha Pêr a gomz outañ.

Gant an dorn dehou e ra sin ar groaz.

Kiki ha Bisig o deus ur c'horf hogen n'o deus ket ur spered gouest da bediñ, ne c'hellont ket komz ouzh an Aotrou Doue, n'hellont ket E anavezout. Al loened ne c'hellont ket pediñ.

Gant hor spered, e c'hellomp lavarout holl a-unan :

**Bennozh deoc'h, Aotrou Doue,  
evit va c'horf, evit va spered.  
Ho karout a ran, o va Doue.**

Goulennoù :

- War ar skeudenn, kont pet korf a gaver ? Pet spered ?
- Diskouez din da gorf, da benn, da zivrec'h...
- Daoust ha gwelout a rez da gorf ?
- Daoust ha stekiñ outañ a c'hellez ?
- At c'hizhier, ar chas, daoust hag eñ o deus ur spered ?
- Sell ouzh Pêr, Petra emañ oc'h ober ? (*komz a ra ouzh an Aotrou Doue*)
- Ar c'hizhier, ar chas, daoust ha gouest int da gomz ouzh Doue ?
- Perak ?
- Da betra e servij  
da zaoulagad,  
da zivesker,  
da zivskouarn,  
da deod ?

**Pedomp :**  
**Bennozh**  
**deoc'h, va**  
**Doe ,**  
**Evit va**  
**c'horf, evit**  
**va spered.**  
**Ho karout a**  
**ran, va**  
**Doe.**



## Kentel 7 AN AOTROU DOUE A GROU AN AELEZ

En Neñv emañ an Aelez,  
kaer-eston ez int,  
hag e welont Doue.

N'eus ket bet anezho a-viskoazh, met un deiz en deus lavaret  
an Aotrou Doue :

*« Fellout a ra din kaout Aelez d'am servijañ »*

Hag e voe Aelez a vil-miliadoù,  
kement ha m'eo bet plijet gantañ ober.

Daoust hag eñ ec'h eus gwelet un ael endeo ?

N'ec'h eus ket dre ma n'o deus korf ebet evel hor re.  
Ur spered eo, hag ur spered n'hen gweler ket.

Kalz bravoc'h egedomp ez int, buanoc'h egedomp ez eont  
kalz a draoù a ouzont, **hag e welont an Aotrou Doue.**

Gwirioneziou  
da c'houzout :

**Speredoù eo an Aelez :**  
n'heller ket o gwelout,  
met int a wel an Aotrou  
Doue.

Krouet en deus an Aotrou  
Doue an Aelez hervez e  
c'hoant, kement ha m'eo  
bet plijet gantañ ober. O  
c'hrouet en deus Doue  
evit e servijañ.

Emzalc'h :

C'HOANTAAT SERVIJAÑ  
AN AOTROU DOUE ha da  
sentiñ outañ a galon vat  
evel m'hen gra an aelez .

LEVENEZ o c'houzout ez  
eo ken kaer, ken niverus an  
aelez, ha sentus ouzh an  
Aotrou Doue.



Kuzulioù :

Gant ar gentel-mañ e tizolo ar bugel bed marzhus an Diwelus. Gant-se hon eus un nor a zigor evit arvestiñ ouzh an Neñv, ur c'halvadenn kinniget gant an Aotrou Doue d'e holl grouadurien..

## AN AOTROU DOUE A GROU AN AELEZ (kendalc'h)

Sellit ouzh ar skeudenn gaer-mañ !  
Petra a weler warni ?

### Un Ael.

Ha perak ez eo bet treset daoust ma'z eo ur spered ?  
D'hor sikour da veizañ emaint ganeomp en hor c'hichen, ez eur boas  
d'o zresañ gant eskell, dre m'o c'haver e pep lec'h, dre ma'z eont  
buan-tre...

Un dremm gaer a dreser dezho ha ma-z int kaer-tre da welout...

Ha pa lavar an Aotrou Doue dezhañ : «*Kae da sikour Erwan-bihan*»  
ez a kerkent, sentiñ a ra diouzhtu hag ez a ken buan ma vije  
lavaret ez eus eskell gantañ !

Er bajenn a-raok hon eus gwelet penaos en em zalc'h an aelez  
dirak an Aotrou Doue :

**Pediñ a reont, ha komz ouzh an Aotrou Doue.  
Krouet en deus an Aelez evit m'e azeulint,  
evit ma kanint e C'hloar,  
ha m'e servijint  
en ur sentiñ outañ a galon vat.**

### Goulennoù :

- Daoust hag eñ a-viskoazh ez eus bet aelez ?
  - Piv a grou an aelez ?
  - Brav ez int ? Galloudek-tre ? Gouiziektre ?
  - Ur c'horf o deus ?
  - Gellout a rez o gwelout ?
  - Pelec'h emaint o chom ?
  - Daoust hag eñ e welont an Aotrou Doue ?
  - Sell ouzh ar skeudenn. Gwelout a reer un .....
  - Perak ez eus eskell gantañ ?
  - Daoust hag eñ ez eus eskell gantañ evit gwir ?
  - Petra a ra an aelez ?
- (*gwelout a reont an Aotrou Doue, E azeuliñ a reont, komz a reont outañ,, sentiñ outañ a reont pa'z eont dre holl d'e servijañ*)

**Pedomp :**

**Va Doue, me  
ho ped d'am  
sikour da  
sentiñ atav  
ouzh va zud,  
va mistri-  
skol ha  
buan-tre,  
evel ma sent  
an aelez  
ouzhoc'h,  
dre ma'z eo  
ho polontez.**



## Kentel 8 KOUEZHADENN AN AELED FALL

Pa grouas an Aotrou Doue an aelez e oant holl kaer-tre ha mat-kenañ.

**Karout a raent an Aotrou Doue, ha sentiñ outañ.**

Un deiz ez eus bet aelez a nac'has sentiñ pelloc'h ouzh an Aotrou Doue. Lavaret o deus :

*« Ni an hini eo ar vistri hiviziken.*

***Fellout a ra deomp bezañ ken bras ha Doue. »***

Daoust hag eñ e oa gallus an dra-se ?

Ne oa ket, dre ma'z eo an Aotrou Doue en deus graet ac'hanomp,

**Eñ eo ar Mestr.**

Petra a oa c'hoarvezet ?

Dre ma oant deuet da vezañ drouk, ne c'hellent ken chom e sklerijenn gaer an Neñvoù,  
e-lec'h ez eo kaer pep tra,  
e-lec'h e sent an holl ouzh an Aotrou Doue.

Dre m'o deus lavaret « Ne fell ket deomp sentiñ » o deus kuitaet an Aotrou Doue,

**...ha dre o gwall ez eo kouezhet an aelez fall d'an Ifern !**

Gwirionezioù da c'houzout :

Un deiz, dre lorc'hentez, e nac'has un darn eus an aelez servijañ an Aotrou Doue, da sentiñ outañ ha d'E anavezout evel o mestr. En em zisrannet o deus diouzh Doue. An Ifern eo lec'h o chomadur, tra ma-z eo an Neñv hini an aelez vat. An aelez vat a zo eürus en Neñvoù hag a zo laouen o welout an dud o sentiñ ouzh an Aotrou Doue. Speredoù fall eo ar re a glask diheñchañ an dud diouzh hent an Neñvoù.

Emzalc'h :

EN EM ERBEDIÑ ouzh an Aotrou Doue, ma sikouro ac'hanomp da chom fidel outañ. Va Doue, sikourit din da sentiñ ouzhoc'h e pep degouezh ... ha da chom hep selaou morse an Droukspered.





Kuzulioù:

Gant ar gentel-mañ e  
tizolo ar bugel bed  
marzhus an Diwelus.  
Gant-se hon eus un nor  
a zigor evit arvestiñ  
ouzh an Neñv, ur  
c'halvadenn kinniget  
gant an aotrou Doue  
d'e holl grouadurion...

## KOUEZHADENN AN AELED FALL (kendalc'h)

Kaer e oant ha deuet ez int da vezañ divalav.

Mat e oant, ha deuet int da vezañ **an Aelez fall.**

Dre bep hent e klaskont hon disrannañ diouzh an Aotrou  
Doue evit hor sachañ d'o Ifern.

Sellit ouzh ar skeudenn :

eskeñ a zo bet lezet dezho dre ma'z eont buan-tre dre holl,  
evel a-raok, met divalav-tre ez int,

**divalav evel diaouled.**

Kalz divalavoc'h eget war ar skeudenn  
ez int evit gwir !

Skeudennet e vezont alies dindan tresoù **erevent** ha **naered**.  
Dont a reont da silañ soñjoù fall ennomp.

Er c'hontrol, an Aelez all **a gar an Aotrou Doue,**  
**derc'hel a reont da sentiñ outañ,**  
**hag ez int eürus-kenañ gantañ en Neñvoù.**  
**An Aelez vat an hini eo.**

Goulennoù :

- Daoust hag eñ e sente an holl  
aelez ouzh an Aotrou Doue ?

- Petra o deus graet an aelez  
fall ? (*disentet o deus*)

- Daoust ha chomet int en  
Neñvoù e sklerijenn gaer an  
Aotrou Doue ?

- Kouezhet int en .....

- Hag ez int (*divalav*)-tre ha  
(*drouk*).

- Displeg din penaos e  
skeudenner an aelez fall  
kouezhet en Ifern ?

- Gouzout a rez anavezout an  
aelez ; ar re o deus sentet e reer  
anezho ..... hag ez int  
.....-tre ; ar re o deus disentet e  
reer anezho ..... hag  
ez int .....-tre ha .....  
-tre.

- Ret eo selaou an Aelez .....  
hag argarzh an Aelez .....

**Pedomp :**

**Va Doue, grit  
ma ne zeuin  
morse da  
vezañ  
orgouilhus ha  
drouk evel an  
aelez fall.  
Gouzout a ran  
ez oc'h an  
Aotrou Doue  
hag e fell din  
sentiñ  
ouzhoc'h dre  
ma 'z oc'h  
peurvat.**



## Kentel 9 UN AEL MAT 'ZO GANIN

An Aotrou Doue hag a zo peurvat a gar kalz ar vugale vihan,  
a lak en o c'hichen un tad, ur vamm  
evit ober war o zro.

Da bep bugel bihan gwitibunan en em gav war an douar  
e ro ivez un ael da veilhañ warnañ,  
evit e wareziñ,  
**an ael gwardian an hini eo,  
pe an ael mat.**

Ur babig en deus un ael a zeu eus an Neñv.  
Ho tad, ho mamm o deus peb a ael mat.  
C'hwi ivez hoc'h eus un ael, degaset gant an Aotrou Doue,  
da ober war ho tro,  
hag ho kas d'an Neñvoù.

**Morse n'hor c'huita,  
nag en deiz nag en noz.**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

**Da bep hini en deus roet  
an Aotrou Doue un ael  
mat,** evit hor gwareziñ  
hag hon heñchañ war-zu  
ar Baradoz.  
*«An neñvoù, Aotrou, a  
ganmeul ho purzhudoù,  
bodadeg an Aeled a  
embann ho fealded.»  
(Salm 90, 6)*

Emzalc'h :

ANAOUDEGEZH VAT  
OUZH AN AOTROU  
DOUE en deus roet  
deomp peb a ael mat.  
FIZIAÑS EN HON AEL  
MAT, a bed dibaouez  
evidomp.



Kuzulioù :

Ar gentel-mañ a zeu dre natur da heul an hini a-raok. An Aotrou Doue a ro E c’hras deomp hag e ro da bep hini un ael d’hor c’has war hent an Neñvoù.

## UN AEL MAT A ZO GANIN (kendalc'h)

Ya 'vat, hoc'h Ael mat a vez dalc'hmat en ho kichen.

Petra emañ oc'h ober en ho kichen ?

Hoc'h ambroug a ra, diouzh an deiz ha diouzh an noz,  
pa labourit, pa c'hoariit.

A-hed an amzer e vez an Ael mat o pediñ evidoc'h,  
evit m'ho skoazello da virout hoc'h ene glan-razh hag hollgaer,  
ha n'eo ket aes atav.

Bugale 'zo o deus aon pa vezont o-unan,  
dre ma ne ouzont ket o deus un Ael en o c'hichen ;  
un Ael kreñv-tre, galloudek-tre, herrek-tre,  
a wel pep tra, a selaou pep tra.

C'hwi a oar ez eus un Ael ganeoc'h. Pa savo aon ennoc'h e lavarot :

**Va Ael-mat, va mirit, va gwarezit.**

**Trugarez deoc'h, va Doue,**

**da vezañ bet roet deomp un Ael-mat.**

### Goulennoù :

- Penaos e anver an ael a zo treset war ar skeudenn ?
- Perak en deus roet an Aotrou Doue un ael mat da bep den ?
- En da gichen e vez dalc'hmat ?
- Ha da dad, daoust hag eñ ez eus un ael mat gantañ ? Ha da vamm ?
- Pa gomzez outañ, daoust hag eñ e klev ac'hanout ?
- P'ac'h eus aon, petra 'zo d'ober ?

**Pedomp :**  
**Bennozh**  
**deoc'h,**  
**Aotrou Doue,**  
**da vezañ bet**  
**roet deomp**  
**hon Ael mat.**  
**Va Ael mat,**  
**va gwarezit**  
**rak fellout a**  
**ra din mont**  
**d'an Neñvoù.**  
**Ho karout a**  
**ran a greiz va**  
**c'halon hag**  
**ho trugar-**  
**ekaan evit**  
**kement tra a**  
**rit evidon.**



## Kentel 10 VA GWELOUT A RA AN AOTROU DOUE, VA GWELOUT A RA AN AELEZ.

Laouen-holl eo Pêr hag Onenn o c'houzout ez eus un Ael mat ganto en o c'hichen. Pêr a lavar d'e vamm :

*«Ha pa vezan va-unan, ma'z eo serr an holl dorioù, va Ael am gwel, hogen daoust hag eñ am gwel an Aotrou Doue ?»*

*«Ya da, Erwan, an Aotrou Doue az kwel hag a wel pep tra,  
e-pad an deiz hag e-pad an noz,  
da welout a ra pa savez,  
pa rez da bedennoù diouzh ar beure  
ha diouzh an abardaez ;  
da welout a ra pa zebrez, pa labourez ha pa c'hoariez.  
Amañ bremañ az kwel, da glevout a ra  
ha va c'hlevout a ra.  
Netra n'hell bezañ kuzhet dioutañ.»*

**Gwelout a ra en hor c'halon zoken,  
gouzout a ra e garomp.  
Eñ ivez hor c'har kalz.**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

E pep lec'h emañ an Aotrou Doue. Gouzout a ra pep tra, an traoù kuzhetañ zoken ; hor soñjoù sekretañ.

Emzalc'h :

Ar C'hoant da ober bepred ar pezh A BLIJ D'AN AOTROU DOUE, ar pezh emañ c'hortoz diganeomp, pe gwelet pe kuzhet diouzh an dud e vezomp.

BEVAÑ dirazañ e pep degouezh.





Kuzulioù :

A-bouez eo ar gentelmañ. Ma respont ar bugel d'ar goulenn «Pelec'h pediñ ?», «e-pep lec'h», e talvez en deus komprenet emañ an Aotrou Doue e pep lec'h, hollveziadelezh Doue, hag e c'hellomp goulenn skoazell digantAÑ e pep degouez, forzh pegoulz hag e pep lec'h.

## VA GWELOUT A RA AN AOTROU DOUE, VA GWELOUT A RA AN AELEZ (kendalc'h)

Hec'h-unan er gêr emañ Onenn. Lontek eo.  
Ur gouign chokolad a zo er ganastell.

Lavarout a ra outi hec'h-unan :

*« Emaon o vont da gemer un tamm bihan anezhañ,  
den ne welo... »*

An naer vil ha gaouiat eo a lavar dezhi kement-se.

Buan e serr Onenn ar ganastell ha ne sent ket ouzh an droukspered.

**Ar plac'hig he deus sentet ouzh an Aotrou Doue  
ha d'hec'h Ael-mat,  
o deus gwelet anezhi hag a zo laouen-tre ganti.**

Goulennoù :

- Hag hon gwelout a ra hon Ael mat atav ?
- Ha pa vez noz ha te da-unan ez kambr ?
- Daoust hag eñ e wel an Aotrou Doue da galon, da soñjoù donañ ?
- Pa'z pezh c'hoant bezañ drouk, hag e oar da Ael-mat ?
- Lavar ar pezh a welez war ar skeudenn.
- Petra en deus hiboudet an droukspered e kalon Onenn ?
- Daoust hag eñ ez eo bet laouen-tre an Aotrou Doue hag hec'h ael-mat ?
- Ha te, pa skoez gant da c'hoar vihan, da Ael-mat a selaouez, pe an droukspered ?
- Hag e rankez trugarekaat an Aotrou Doue evit bezañ roet dit un Ael-mat ?
- Petra 'ra an Aelez-vat evidomp ?  
*(An Aelez-vat a zamant deomp, hon gwareziñ a reont, hag hon deren d'ar Vad. Pep hini ac'hanomp en deus un Ael-mat.)*
- Petra 'ra an diaouled enep deomp ?  
*(Klask a reont hon dougen d'ar pec'hed dre an temptadur)*

**Pedomp :**

Va Doue, fellout a ra din bezañ fur, sentus, labourat mat, zoken pa vezan va-unan, pa n'am gwel ket Tadig, Mammig, pe va mistri. Rak gouzout a ran mat am gwel bepred an Aotrou Doue, hag e pep lec'h ha n'eo ket mat ober an droug. A-greiz va c'halon e fell din ober diouzh ar soñjoù mat hag ar mennadoù mat a ro din va Ael-mat.



## Kentel 11 ADAM HAG EVA E BARADOZ KAER AN DOUAR

Un dro bennak, Pêr en doa poan en e benn ; soñj a zeuas dezhañ eus ar pezh en doa klevet gant e vamm, diwar Adam hag Eva p'edont en o liorzha kaer.

«Ha poan-benn o deveze Adam hag Eva ?», emezañ.

«N'o deveze ket avat !», a respontas ar vamm.

Biskoazh n'o deveze poan en o fenn,  
biskoazh n'o deveze poan e neblec'h,  
ne veze na tomm na yen dezho.

El liorzha kaer, brav e kreske pep tra :

hep skuizhañ, Adam hag Eva a c'houneze o douar.

Loened, evned, holl e sentent ouzh Adam,

**peogwir e sente Adam ouzh an Aotrou Doue.**

E Baradoz an douar e oa **eürus-tre** Adam hag Eva.

PEP TRA A OA EN URZH.

### Gwirionezioù da c'houzout :

Dre ma oant bugale an Aotrou Doue, dre m'o doa resevet promesa an Neñvoù, dre ma ne c'houzañvent ket ha ma ne varvfent ket, dre ma labourent el levenez, e rene an urzh er Grouadelezh.

### Emzalc'h :

KARANTEZ BUGALE  
DOUE : Va Doue, hon Tad  
ez oc'h.

Levenez, dre m'emaomp war  
hent an Neñvoù.



Kuzulioù:

Kenderc'hel a ra ar gentel-mañ ar gentel 5 war ar garantez a zleomp da Zoue evel Tad. Karantez eo Doue, ha Doue 'fellas dezhañ aozañ ul liorzh kaer evit Adam hag Eva.

## ADAM HAG EVA ER BARADOZ KAER (kendalc'h)

**Eürus** e oa Adam hag Eva dre ma oant bugale an Aotrou Doue ;  
**kaer-holl** ha **glan-holl** e oa o eneoù.

Lavaret en doa an Aotrou Doue dezho :

*«Ma'z oc'h sentus ouzhin ho kemerin un deiz ganin  
er Baradoz, **va gwelout a reot bepred ha da viken.**»*

Pegement ez int karet gant an Aotrou Doue !

E Baradoz an douar, Adam hag Eva ne vezent na skuizh na klañv  
ha **ne oa ket merket dezho mervel !**

Ne vezent morse enoeet, ha ne veze tabut ebet etrezo.

Pep tra a oa en urzh rak **pep tra a zeue eus an Aotrou Doue.**

**MADELEZHUS-KENAÑ EO AN AOTROU DOUE !**

Goulennoù :

- Ha poan-dent pe poan-benn o doa Adam hag Eva a-wechoù ?
- Ha brav e oa da Adam hag Eva ?
- Eürus e oant, eürus-tre ?
- Hag pep tra a oa sujet dezho ?
- Al laboused, ar plant hag al loened ivez ?
- Neuze, pep tra a oa evito ?
- Enoeiñ a rae Adam hag Eva er Baradoz ?
- Hag eñ e oant skuizh pe klañv ?
- Ha mat e oa an Aotrou Doue outo ?
- Da belec'h e oant da vont goude Baradoz an douar ?

**Pedomp :**  
Hon Tad a zo en  
Neñv, ho pugel ez  
on-me. Ho karout  
a ran kalz.  
Evidomp hoc'h  
eus graet an holl  
draoù kaer war an  
douar.  
Bennozh deoc'h,  
Aotrou Doue.



## Kentel 12 SIWAZH ! DISENTET O DEUS ADAM HAG EVA

An tad kentañ, **Adam**, hag ar vamm gentañ, **Eva**,  
a oa eürus bras, **brav e oa dezho**.

Bevañ a raent e-touez ar bleuñv hag ar gwez hag al loened  
a bep seurt. Pa 'z int bet lakaet er baradoz kaer-mañ en doa  
an Aotrou Doue aotreet dezho debriñ frouezh an holl wez,  
war-bouez unan : an hini a oa e-kreiz al liorz.

**«Mar debrit diouti e varvot»**, en doa lavaret.

An diaoul, avat a oa droug ennañ pa welas Adam hag Eva  
o sentiñ atav ouzh an Aotrou Doue ha ne felle ket dezhañ  
ez afent d'ar Baradoz. Ez it da c'houzout peseurt gevier en doa  
livet evit o zouellañ.

**« Nann ne varvot ket ! Debrit, debrit,  
evel Doue e vezot, ken bras, ken gouiziek hag eñ... »**

Gaouiad eo an diaoul, gouzout a ra n'eo ket gwir.  
Eva a selaou anezhañ avat. Gant Adam e tebras ar frouezh  
difennet o tiseniñ ouzh an Aotrou Doue.

**Kaset int bet kuit diouzh Baradoz an douar !**

Gwirionezioù da c'houzout :

An Aotrou Doue eo ar Mestr.  
Difennet en doa un dra d'an den  
dindan boan a gastiz. «*Eus  
gwezenn anaoudegezh ar mad hag  
ar fall ne zebri ket diouti, rak an  
deiz ma tebri diouti e varvi*»  
(Geneliezh 2, 17).

Spered an droug, an diaoul, en deus  
temptet an den. An den, dindan  
lusk an ourgouilh a zo kouezhet en  
temptadur hag en deus pec'het, o  
tiseniñ ouzh an Aotrou Doue a oa  
bet ken mat evitañ.

Emzalc'h :

**Pa vezer temptet**, EN EM  
ERBEDIÑ OUZH AN AOTROU  
DOUE : «Va Doue, deuit d'am  
sikour ! Fellout a ra din derc'hel da  
vezañ ho pugel, ne fell ket din en  
em zispartiañ diouzhoc'h.

E pep degouezh, chom unanet ouzh  
an Aotrou Doue en ur gomz outañ :  
«Va Doue, ho pugel ez on-me, va  
gwarezit diouzh an diaoul».



Kuzulioù :

Dre m'eo deus en emsavet aelez 'zo ez int kouezhet en dizesper. Amañ emañ ar bugel o vont da gompren an heuliadoù spontus eus kement disentiñgezh ouzh an Aotrou Doue evidomp-ni an dud. Doue 'zo karantez, n'heller ket disentiñ outañ hep kouezhañ en dizurzhioù.



## SIWAZH ! DISENTET O DEUS ADAM HAG EVA (kendalc'h)

M'o dije Adam hag Eva pedet kreñv-tre en o c'halon ha m'o dije goulennet digant Doue skoazellañ anezho, neuze n'o dije ket disentet...

Evit chom hep sentiñ eo mat lavarout :

« *Va Doue, mar plij ganeoc'h, va sikourit,  
fellout a ra din bezañ fur.*

*Va sikourit da sentiñ atav ouzhoc'h  
evit diskouez deoc'h ho karan.»*

Disoñjet o deus e selle an Aotrou Doue outo, selaouet o deus an diaoul, disentet o deus ouzh an Aotrou Doue a oa bet ken mat outo !

### **Pebezh gwalleur !**

Alies e ro an diaoul soñjou fall deomp :

- chom hep sentiñ,
- chom hep respont d'e vamm o c'hervel,
- skeiñ gant e c'hoar vihan...

Bep tro eo ret lavarout :

« **Va Doue, me ho ped, fellout a ra din bezañ fur.  
Va sikourit da sentiñ atav ouzhoc'h  
evit diskouez deoc'h ho karan.»**

### Goulennoù :

- Piv eo an tad kentañ ? Hag ar vamm gentañ ?
- Petra en doa lavaret an Aotrou Doue da Adam hag Eva pa oant bet lakaet e Baradoz an douar en ur ziskouez dezho ar gwez ? (*Na zebrit ket eus ar frouezh difennet*)
- Selaouet o deus an .....
- Pelec'h e oa kuzhet an diaoul ?
- Perak ne oa ket laouen ?
- Petra en deus lavaret an diaoul da Eva ?
- Ha petra o deus graet Adam hag Eva ? (*debret o deus eus ar frouezh difennet, n'o deus ket sentet ouzh an Aotrou Doue, touellet int bet gant an diaoul*)
- Piv o deus selaouet ?
- Petra o dije ranket ober ?
- Petra o dije ranket lavarout d'an Aotrou Doue ?
- Penaos e vez anvet ar pec'hed kentañ-se ? (*ar pec'hed orin*)



**Pedomp :**  
Va Doue, fur e fell  
din bezañ. Va  
sikourit da sentiñ  
ouzhoc'h bepred,  
evit diskouez  
deoc'h ho karan.

## Kentel 13 KASTIZET EO BET ADAM HAG EVA

Un druez eo ar pezh a zo c'hoarvezet gant Adam hag Eva.

A-greiz ma oa brav dezho, setu int reuzeudik  
dre m'o deus disentet ouzh an Aotrou Doue.

Pa zisenter ouzh an Aotrou Doue... e pec'her.  
Disentet o deus ouzh an Aotrou Doue... pec'het o deus.

**N'int ket mui mignoned da Zoue  
N'hellont mui mont d'an Neñvò.**

Glac'haret kenañ ez int, gouelañ a reont...  
Sell pegen trist ez int !

An Aotrou Doue a lavaras da Eva :

**«Gouzañv a ri kalz».**

Ha da Adam :

**«Ret e vo dit labourat an douar  
hag un deiz e varvot.»**

Pa lavar an Aotrou Doue un dra bennak,  
**ez eo gwir atav !**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Adam hag Eva a voe kastizet, kondaonet e voent da c'houzañv, betek mervel, ha da ober labourioù tenn.

**N'int ket mui mignoned da Zoue ha n'hellont ket mont d'an Neñvò.**

Emzalc'h :

Disfiziout diouzh hor gwander ha diouzh an diaoul, a dempt ac'hanomp. Dibaouez, goulennomp skoazell an Aotrou Doue dre ar bedenn.

Kuzulioù :

Goude enkadenn an disentidigezh ouzh an Aotrou Doue e tiskouez ar gentel-mañ petra eo justis an Aotrou Doue. Ar pec'hed an hini eo hon disrann diouzh karantez an Aotrou Doue hag a ranko bezañ dic'haouet, dasprenet.



## KASTIZET EO BET ADAM HAG EVA (kendalc'h)

Dre m'o deus disentet ouzh an Aotrou Doue,  
ez eo bet kaset kuit Adam hag Eva diouzh Baradoz an douar.

Aet e oant da guzhat, dre m'o devoa mez h ;  
met an Aotrou Doue a wel pep tra hag o gwelet en deus.

Dilezel a rejont neuze Baradoz an douar :

War un douar spern ha mein en em gavent eta, na oa ket  
bet hadet c'hoazh gant an dud.

Met gwashoc'h c'hoazh a oa : n'hellent mui mont d'an Neñvoù...

Ha c'hwi ? C'hoant hoc'h eus da sentiñ ouzh an Aotrou Doue, atav !  
Setu amañ daou ali mat :

**Klaskit *derc'hel soñj e wel pep tra an Aotrou Doue*, atav.**  
**Ha taolit mat evezh da *chom hep selaou an droukspered* !**

Lavaromp a-greiz-kalon d'an Aotrou Doue :

**Me ho ped, va Doue,**  
**Hor sikourit da sentiñ ouzhoc'h atav,**  
**zoken pa vez diaes.**

### Goulennoù :

- Ha chomet e oa Adam hag Eva e Baradoz an douar ?
- Piv en deus o c'haset kuit ?
- Petra en doa lavaret an Aotrou Doue da Adam ? Ha da Eva ?
- Pa gomz an Aotrou Doue, ha gwir e vez bepred ?
- Perak eo tristidik Adam hag Eva ?
- Perak ne c'hellent ket ken mont d'an Neñvoù ? (*Dre m'o doa...*)
- M'o defe kounaet e selle an Aotrou Doue outo, daoust hag eñ o dije disentet ?
- Ha me, petra en dije graet ?
- Pa vez disentet e reer ur ..... .
- Ha dilezet e voe an dud gant an Aotrou Doue goude pec'hed Adam hag Eva ? (*Ne voent ket dilezet, ur Salver a brometas dezho*)
- Ha deuet eo ar Salver prometet d'an dud ? (*Ya, Mab Doue en em c'hraet den eo, Jezuz Krist*)

**Pedomp :**

Va Doue, just ha mat ez oc'h : evel un Tad e teskit deomp pegen tristidik e vezer pa ne selaouer ket ouzhoc'h. Pa dro warnomp ober traoù fall, va skoazellit, mar plij, da ginnig deoc'h va c'hoant evel aberzh, evit ober kentoc'h un dra bennak mat.



## Kentel 14 JEZUZ A VO AR SALVER

Pa reer an droug, n'heller ket bezañ mignon da Zoue.

Disentet o doa Adam hag Eva p'o doa selaouet an diaoul,  
setu aze perak n'hellent ket mont d'an Neñvoù  
gant an Aotrou Doue, nag o bugale kennebeut.

Pa vezit trist, pa ouelit, p'hoc'h eus keuz da vezañ bet  
graet an droug, petra 'ra ho mamm ?

Ho frealziñ a ra !

**Evel-se, dre ma kar an Aotrou Doue Adam hag Eva kement,  
en deus bet c'hoant o frealziñ.**

Gwelout a rae Adam hag Eva o ouelañ  
hag o keuziañ da vezañ bet disentet.

Neuze, dre **ma'z eo madelezhus-tre**, en deus divizet Doue  
kas ur Salver d'an dud,  
evit digeriñ an Neñvoù dezho.

**Jezuz an hini eo a vo ar Salver.**

Gwirionezioù da c'houzout :

An Aotrou Doue, abalamour da  
geuzidigezh Mab-Den, a  
brometas ur Salver. E Vab Jezuz  
eo ar Salver, hag ez eo deuet  
war an douar da rapariñ an  
droug a oa bet graet d'e Dad.  
Evel-se e vo digoret en-dro dor  
an Neñvoù, ha ni advabet da  
zont en-dro da vezañ Mibion da  
Zoue.

Emzalc'h :

TRUGAREKAAT an Aotrou  
Doue evit karantez hon Tad eus  
an Neñv a zo bet fellet dezhañ  
reiñ a-nevez deomp ar pezh hor  
boa kollet. Ni ivez, a-drugarez  
d'ar Mab a zo bet kaset gant an  
Tad, e c'hellomp mont d'an  
Neñv.



Kuzulioù :

Gant promesa ar Salver e tizoomp a-evez madelezh an aotrou Doue e-keñver E grouadurioù hag ober dezho dont en-dro e kerc'henn E garantez. Ar bugel a rank kaout amañ un anaoudegezh vat virvidik hag hec'h ezteurel gant trivliadoù a garantez evit an Aotrou Doue.



## JEZUZ A VO AR SALVER (kendalc'h)

Prometet en doa an Aotrou Doue da Adam hag Eva  
kas ur **Salver** dezho.

Pêr hag Onenn a oar mat piv eo ar Salver-se.  
**Mab Doue eo,**  
**Jezuz** eo e anv.

Kement e kare Jezuz Adam hag Eva  
m'eo bet fellet gantañ dont da zic'haouiñ en o lerc'h.

Un deiz ez eo deuet Mab Doue war an douar : Jezuz.  
Lezet en deus ar soudarded d'e dachañ war ar groaz  
(*diskouez ar grusifi d'ar vugale*)

hag en deus kinniget e aberzh bras d'an Tad.

**Roet en deus e vuhez** evit ma vo pardonet pec'hedoù  
an dud, evit ma teuint en-dro da vezañ e vugale  
ha ma c'hellint mont gantañ d'ar Baradoz.  
Lavaromp holl a-unan :

**Bennozh deoc'h Aotrou Doue da vezañ bet  
kaset deomp ur Salver ;  
evel-se eo digor bras dor an Neñvoù deomp.**

### Goulennoù :

- Ha glac'har bras o deveze Adam hag Eva ?
- Perak ? (*Kaset e oant bet kuit diouzh al liorzhaer a oa bet fiziet enno gant an Aotrou Doue*)
- Ha truez en deus bet an Aotrou Doue outo ?
- Petra en doa Doue prometet dezho neuze ?
- Pe anv eo ar Salver ?
- Pa gomz an Aotrou Doue, ha gwir e vez bepred ?
- Penaos en deus Mab Doue salvet ac'hanomp ?
- Perak ez eo marv ?
- M'o defe kounaet e selle an Aotrou Doue outo, daoust hag eñ o dije disentet ?
- Ha me, petra am dije graet ?
- Pa vez disentet e reer ur ..... .
- Ha dilezet e voe an dud gant an Aotrou Doue goude pec'hed Adam hag Eva ? (*Ne voent ket dilezet, ur Salver a brometas dezho*)
- Ha deuet eo ar Salver prometet d'an dud ? (*Ya, Mab Doue en em c'hraet den eo, Jezuz Krist*)

**Pedomp :**  
**Bennozh deoc'h,**  
**va Doue, na pegen**  
**mat ez oc'h bet o**  
**kas Jezuz deomp !**  
**Heptañ**  
**n'anavezfemp ket**  
**an hent da vont**  
**d'ar Baradoz.**  
**Bennozh deoc'h**  
**Aotrou Doue.**



## Kentel 15 AR GEMENNIDIGEZH

Sellomp mat ouzh ar skeudenn : Gwelout a reomp ar Werc'hez Vari, ha dirazi un Ael.

Petra eo anv an Ael-mañ ? An Ael Gabriel eo (*un arc'hael ez eo, da vezañ resisoc'h*).

Soñj hoc'h eus ez eo an aelez servijerien an Aotrou Doue ?

Un deiz e kasas an Aotrou Doue an Ael Gabriel da di ar Werc'hez Vari da lavarout dezhi e oa bet dibabet da vezañ mamm Jezuz.

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Pa zegouezhas e ti Mari, e lavaras dezhi :

**Me ho salud Mari, leun a c'hras an Aotrou Doue 'zo ganeoc'h...**  
ar pezh a dalvez da lavarout :

Kaer-holl eo hoc'h ene, glan-holl,  
leun-barr gant gras Doue,  
dibabet oc'h bet a-douez an holl gwragez  
evit bezañ mamm Jezuz.

En em c'hraet den eo ar Mesiaz bet prometet d'an dud e kof ar Werc'hez Vari, kerkent ha ma asantas da vezañ Mamm Hor Salver pa respontas da gemenn an Ael Gabriel.

Strafulhet un tammig e voe ar Werc'hez Vari o welout an Ael ;  
diouzhtu e kemennas an Ael dezhi :

**N'ho pezet ket aon, ur mab ho pezo,  
hag e roiet dezhañ Jezuz da anv,  
Mab Doue e vo, ar Salver e vo.**

Emzalc'h :

TRUGAREKADENN :  
Bennozh Doue deoc'h,  
Gwerc'hez Vari, da  
vezañ bet asantet da  
vezañ Mamm Jezuz.

Kuzulioù :

Gant dibenn an trimiziad emamp... emañ Gouel Nedeleg o tostaat. Etre Promesa ar Salver (kentel a-raok) hag ar Gemennidigezh emañ pirc'hirinadenn hir an Denelezh a zo danevellet er Bibl. Gwech ha gwech all e c'hell ar gerent lenn d'o bugale, lod eus an danevelloù-se a zo kaer-tre da lenn, hogen studiañ a raimp diouzhtu donedigezh Jezuz Krist, an hini a oa bet prometet evit hon daspreañ, an hini a salv ac'hanomp.

Neuze emañ ar Salver prometet o tont e istor an Denelezh gloazet gant ar pec'hed a-drugarez d'ur vaouez n'eus nemeti, dinamm ha benniget a-douez an holl gwraez : ar Werc'hez Vari.



## AR GEMENNIDIGEZH (kendalc'h)

Ha gouzout a rit ar pezh he deus respontet ar Werc'hez Vari ?

Lavaret he deus :

**Me 'zo servijerez an Aotrou.**

Da lavarout eo :

Ya ! Ober a rin ar pezh a fell da Zoue  
asantiñ a ran bezañ mamm Jezuz.

Gwelout a reomp ez eo sentus ar Werc'hez Vari.

Karout a ra kement an Aotrou Doue m'he deus lavaret «Ya» diouzhtu.

Dellezek eo da vezañ karet kalz p'eo hi he deus roet Jezuz deomp !

Pa garer evit gwir an Aotrou Doue, a-greiz e galon,

**e responder «Ya !» bep tro a galon vat.**

Lavarout «Ya !» 'zo sentiñ.

Evit ma c'hellimp sentiñ atav, goulennomp skoazell digant ar Werc'hez Vari :

Lavaromp dezhi alies pedenn gaer an Arc'hael Gabriel :

**Me ho salud Mari leun a c'hras, an Aotrou Doue zo ganeoc'h,  
benniget oc'h dreist an holl gwraez.**

Goulennoù :

- Piv a weler war skeudenn ?
- Pe anv eo an Ael ?
- Petra a lavar d'ar Werc'hez Vari ?
- Displeg hiroc'h petra a dalvez ?
- Perak e plij kement-se ar Werc'hez Vari d'an Aotrou Doue ?
- Ha n'he deus ket bet un tammig aon ar Werc'hez Vari p'he deus gwelet an ael ?
- Petra he deus respontet ?
- Petra a dalvez ar c'homzoù-se ?
- Ha rankout a reomp karout kalz ar Werc'hez ?
- Daoust hag eñ e rankomp atav lavarout «Ya» da Zoue ?
- Peseurt pedenn a lavarer evit enoriñ ha pediñ ar Werc'hez Vari ?

**Pedomp :**  
**Me ho salud Mari**  
**leun a c'hras**  
**an Aotrou Doue**  
**a zo ganeoc'h,**  
**Benniget oc'h**  
**dreist an holl**  
**gwragez.**

An holl vugale a zeu da garout ar Werc'hez Vari, a fizi enni o holl drubuilhoù, bras ha bihan. E vuhez'pad hag evit e silvidigezh e raio e vad ar bugel eus ar garantez-se evit ar Werc'hez Vari a zo bet hadet ennañ en e vugaleaj. D'ar gerent eo deskiñ d'o bugel karout ar Werc'hez Vari.



## Kentel 16 MARI HA JOZEF A YA DA VETLEEM

### Gant sant Jozef edo Mari o chom.

Madelezhus e oa ; karget e oa bet gant an Aotrou Doue  
da veilhañ war ar Werc'hez Vari, d'he gwareziñ.

E kêr vihan NAZARED edont o chom.

E-pad ar goañv o deus ranket mont e hent da vezañ marilhet  
e ti-kêr BETLEEM.

Hir-tre e oa ar veaj.

Ret e oa dezho mont war droad :  
da neuze ne oa na kirri-tan, na trenioù, na kirri-nij !

War e droad edo sant Jozef,  
ha Mari a oa war un azen bihan.

A-benn meur a zevezh e oant en em gavet e Betleem, skuizh-mat.

**Krog e oa da noziñ.**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Doujus, sentet o deus  
Mari ha Jozef oc'h ober  
ar pezh o doa d'ober.  
Asantet o deus da  
c'houzañv da vezañ pell  
diouzh ar gêr, dido ha  
dibourvez evit lakaat  
Jezuz er bed.

Emzalc'h :

Trugarekadenn hag un  
akt a garantez.





Kuzulioù :

A-bouez bras eo ar gentel-mañ. Paour eo Jozef ha Mari, e-touez ar beorion. N'o deus ti ebet. Er baourentez emañ Hor Salver o vont da c'henel.

## MARI HA JOZEF A YA DA VETLEEM (kendalc'h)

Kalz a dud a oa deuet da Vetleem da vezañ marilhet en ti-kêr.  
Leun e oa an holl ostalerioù.

En holl diez ma yae sant Jozef, e veze respontet dezhañ :  
Kit pelloc'h, n'eus plas ebet amañ.

Diwezhat-tre e kavjont ur c'hraou er-maez eus kêr,  
ul lec'h ma vez lakaet ar saout hag an ezen e-pad an noz.  
N'eo ket brav al lec'h, tamm ebet !

Ar Werc'hez Vari ha sant Jozef a zo laouen-tre evelkent dre m'o doa kavet  
ul lec'h da dremen an noz, ha **trugarekaet o deus an Aotrou Doue**.

Hag ni, daoust hag eñ hor befe lezet er-maez ar Werc'hez Vari ?  
Ha soñjet hor befe reiñ degemer dezho ?  
Ha da reiñ dezho ur pallenn ?

P'hon eus c'hoant da gaout ar plas gwellañ, an tamm gwastell brasañ,  
e soñjot er Werc'hez Vari ne oa netra ganti, hag e lavarot dezhi :

**Va sikourit da chom hep mirout ganin an traoù gwellañ !**

### Goulennoù :

- Gant piv e oa Mari o chom ?
- E peseurt kêr ?
- E peseurt kêr e oa ret mont da vezañ marilhet en ti-kêr ?
- Penaos o deus graet Mari ha Jozef ar veaj ?
- Ha degouezhet int e Betleem ?
- Diouzh ar beure pe diouzh an noz ?
- Perak e oa leun an holl ostalerioù e Betleem ?
- Ha Jozef en deus kavet memestra ur plas en ostaleri evit ar Werc'hez Vari ?
- Pelec'h int chomet a-sav a-benn ar fin ?
- Ha brav ha naet e oa al lec'h ?
- Ha Jozef ha Mari o deus ginet gant al lojeiz-se ?

**Pedomp :**

Gwerc'hez Vari,  
na glac'haret e  
ranke bezañ bet  
sant Jozef pa ne  
gave ti ebet pa  
oac'h c'hwi ken  
skuizh ! O ! Na  
laouen e vijen bet-  
me d'ho lakaat da  
zont-tre em zi.  
Hiziv e lezin ar  
plas gwellañ gant  
va c'hamaladed  
evit plijout deoc'h.



## Kentel 17 NEDELEG : DONT A RA JEZUZ D'HOR SALVIÑ

Mari ha Jozef n'o deus kavet netra nemet ur c'hraou da lojañ.  
Ne glemmont ket avat.

Bremaik eo bras-tre o levez :  
**Emañ Jezuz o paouez genel e-pad nozvezh Nedeleg !**

Na pegen dous eo ha mousc'hoarzhus !  
Na kaer eo !  
N'eus ket kaeroc'h bugel egetañ !

Hag ar Werc'hez Vari ne oa kavell ebet ganti da c'hourvez  
he babig bihan.

Sant Jozef, neuze, en deus lakaet plouz el laouer a servije  
evit an azen hag an ejen, d'ober ur c'havell da Jezuz.

Sellomp ouzh Mari o c'hourvez Jezuz el laouer  
hag o vont war he daoulin dirazañ.

Perak eo aet ar Werc'hez Vari war he daoulin ?

**Dre ma'z eo Jezuz Mab Doue, ha Doue e-unan.**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Ganet eo eus ar  
Werc'hez Vari ar Salver  
bet prometet d'an dud.

**Mab Doue eo, ar Verb  
en em c'hraet den :  
Jezuz Krist.**

Deuet eo da zigeriñ an  
Neñvoù deomp. Fellet eo  
bet dezhañ genel en ur  
c'hraou.

Emzalc'h :

LEVEZ o soñjal e  
donedigezh ar Mesiaz.  
Levez o c'houzout  
emaomp war hent ar  
Baradoz.

TRUGAREKADENN  
d'an Tad eus an Neñv en  
deus roet deomp e vab.  
FEIZ e Jezuz-Doue.

Kuzulioù :

Ganedigezh Jezuz er c'hraou en amzer Nedeleg a rank bezañ prientet gant karantez gant ar gerent hag ar vugale. Ar mare eo evit aozañ ur c'hraouig er gêr ha d'en em vodañ dirazi bep beure ha bep abardaez evit pediñ a-gevret. Ar pedennoù-se a rank reiñ o flas d'ar re vihanañ eus an tiegezh, koulz ha d'ar re vrasoc'h.



## NEDELEG : DONT A RA JEZUZ D'HOR SALVIÑ (kendalc'h)

Pa vezomp en hor gwele e vez brav deomp.  
Tomm eo deomp, ha blot eo ar vatarasenn.

Kavout a ra deoc'h e oa brav da Jezuz er c'hraou yen, lous ha flaerius-se,  
bronduet ma oa ouzhpenn, marteze, gant broudoù plouz al laouer ?

Perak ez eus bet fellet da Jezuz an dra-se  
pa 'z eo-eñ hollc'halloudek,  
ha m'en dije gellet genel en un ti kaer,  
gant ur c'havell brav ?

Ha neuze :

evit **hor salviñ** eo,  
ober pinijenn en hor plas  
hag ober deomp dont en-dro  
da vezañ bugale an Aotrou Doue.

Adalek e c'hanedigezh e felle dezhañ gouzañv  
evit ma tigorfe deomp an Aotrou Doue hent ar Baradoz.

**Gwelit pegement e kar ac'hanomp !**

Goulennoù :

- Pegoulz eo bet ganet Jezuz ? (*en amzer ar Romaned*)
- Hag ur c'havell he do ar Werc'hez Vari da c'hourvez he bugelig ?
- Petra en deus graet sant Jozef ?
- Perak ez eo aet ar werc'hez Vari d'an daoulin dirak ar Mabig Jezuz ?
- Hag en ur balez-kaer ez eo bet ganet Jezuz ?
- Ha brav e oa dezhañ er c'hraou ha war ar plouz, hep pallen ?
- Daoust hag eñ en deus c'hoantaet gouzañv ?
- Perak ? (*O vezañ ma'z eo Doue ez eo mestr war bep tra ha war gement tra 'zo c'hoarvezet gantañ war an douar*)



**Pedomp :**  
Mabig Jezuz ker,  
gouzout a ran ez  
oc'h va Doue,  
hoc'h azeuliñ a  
ran, ho  
trugarekaat a ran  
da vezañ bet deuet  
war an douar evit  
digeriñ deomp dor  
ar Baradoz.

## Kentel 18 AR BASTORED A AZEUL JEZUZ

Tostik-tre diouzh al lec'h ma oa bet ganet Jezuz  
e oa pastored a ziwalle deñved.

Lod anezho a veilhe e-pad an noz d'o diwall diouzh ar bleizi  
a c'helle dont da dagañ o loened.

A-greiz-holl e welas ar bastored ur sklerijenn hollgaer en oabl  
hag e-kreiz ar sklerijenn edo un ael.

Spontet bras e oant, met an ael a lavaras dezho :

«N'ho pet ket aon, dont a ran da gemenn deoc'h ur c'heloù mat :

**E Betleem eo ganet Jezuz  
gourvezet eo en ur c'hraou ;  
kit buan d'e welout !»**

Kalz a aelez a oa deuet, hag holl a-unan  
e kanjont ur c'hantik kaer-tre en enor da Jezuz.

Ha perak e oa ur c'heloù mat ganedigezh Jezuz ?

**Dre ma teue d'hor salviñ an hini eo.**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Doue eo Jezuz, hen  
diskleriet o deus an  
aelez.

Emzalc'h :

AZEULIÑ A REOMP  
Jezuz ha DONT a reomp  
dezhañ dre m'eo deuet  
betek ennomp d'hor  
salviñ.





Kuzulioù :

Ur skouer eus an azeulidigezh a zleomp d'Hor Salver eo donedigezh ar bastored er c'hraou da azeuliñ ar Mabig Jezuz.

## AR BASTORED A AZEUL JEZUZ (kendalc'h)

An Ael en doa lavaret d'ar bastored mont buan da welout Jezuz.  
Neuze ez int aet diouzhtu d'e welout.

Tud vat e oant, degaset o doa ganto profoù evitañ :  
o deñved bravañ, laezh, keuz,  
ar pep gwellañ o devoa.

Degouezhet eno e rejont evel Mari ha Jozef :  
war o daoulin ez int en em lakaet dirazañ evit e **azeuliñ**.  
Perak ? **Dre ma'z eo Jezuz Doue e-unan**.

Ha ni, peseurt profoù a c'hellomp kinnig da Jezuz hag a raio plijadur dezhañ ?  
N'hellomp ket reiñ deñved pe keuz,  
hogen aberzhoù bihan, da skouer :

Sentiñ diouzhtu da Vammig,  
Bezañ jentil ouzh e c'hoar vihan pe e vreur bihan,  
Debriñ ur madig hepken e-lec'h daou,  
Reiñ ur gweneg bennak hag a zo deomp d'ar beorien...

**evit ma vo plijet Jezuz.**

### Goulennoù :

- Piv a ziwalle deñved e-kichenik al lec'h m'eo bet ganet Jezuz ?
- Petra 'zo c'hoarvezet en noz-hont ? Displeg din.
- Kalz a aeled all zo bet ?
- Perak e oa ganedigezh Jezuz ur c'heloù mat ?
- Gortozet o doa ar bastored , pe ez int aet diouzhtu da welout ?
- Peseurt profoù o doa degaset da Jezuz ?
- Perak ez int aet war o daoulin dirazañ ?
- Ha te, peseurt profoù a c'hellez ober da Jezuz ?

**Pedomp :**

Jezuz ker, laouen  
bras on, evel ar  
bastored peogwir  
ez oc'h deuet  
evidomp war an  
douar da zeiz  
Nedeleg. Fellout a  
ra din reiñ  
plijadur deoc'h,  
evel ar bastored.





## EIL TRIMIZIAD

En eil trimiziad-mañ emañ o vont da heuliañ Jezuz en e veajoù e Palestina. Kelenn a raio, hag ober burzhudoù. Dizoleiñ a raimp madelezh divent an Aotrou Doue a-drugarez da Jezuz o kelenn hag o tiskouez deomp dor an Neñvoù.

An traoù-mañ a rank bezañ «bevet dre an diabarzh» gant feiz, esperañs ha karantez, a zo vertuzioù a zo da greskiñ e kalon ar bugel.

Mat e vo adlenn ar ger digeriñ e penn-kentañ al levr. Ur bugel yaouank a zo aes-tre dezhañ deskiñ traoù nevez hogen disoñjal a c'hell ken buan all. Abalamour da se e ranker lavarout hag adlavarout meur a wech an hevelep traoù betek ma vezint anavezet ervat gant ar bugel. Setu perak e ranker adwelout dre vras ar c'hentelioù bep bloaz.

Adwelet e vo ar c'hentelioù pe dre sellout ouzh ar skeudenn, pe gant ar roll «Goulennoù».

Adalek bremañ e ranker kregiñ ar c'hentelioù gant an destenn «Sellomp ouzh ar skeudenn» a zo dindan ar skeudenn.

## Kentel 19 AZEULIÑ JEZUZ A RA AR VAJED

Pell-mat diouzh Jeruzalem e oa **tri den pinvidik-tre ha gouiziek-tre** :  
abaoe e vezont anvet « An Tri Roue » pe « **Ar Vajed** ».

Gouzout a raent e welfent **ur steredenn** en oabl, brasoc'h  
ha skedusoc'h eget ar re all.

An dra-se a oa da vezañ **ar sin a c'hortozent** e vefe bet ganet ar Salver.

Hag un deiz e weljont ar steredenn nevez-se...  
Hag int en hent neuze !

Sell, emaint o veajiñ gant o c'hañvaled hag o zraoù,  
**hag ez eont da heul ar steredenn.**

En em gavout a reont e Jeruzalem  
hag eno e lavar ar roue Herodez dezho :  
*«Kit da Vetleem da welout Jezuz, hag ez in-me ivez.»*

Drouk-tre e oa Herodez,  
ne felle ket dezhañ azeuliñ Jezuz, tamm ebet,

I lazhañ anezhañ ne lavaran ket !

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Ar Mesiaz en em ro da  
anaout d'an dud. **Evit an  
holl dud ez eo deuet.**  
Diskouez a ra ez eo  
Doue. An dud, dre  
hanterouriezh ar Vajed, a  
anavez ez eo Jezuz ar  
Mesiaz.

Emzalc'h :

AZEULIÑ. Doue eo  
Jezuz.  
KINNIG hor buhez a-  
bezh dezhañ.

### Kuzulioù :

En arroud-mañ e rank ar gerent lodañ d'o bugel from ha levez ar Vajed, evel pa vije eñ e-unan o tont da weladenniñ Jezuz. Adalek bremañ ez eo abouez-tre kreskiñ ennañ ar gred evit an akt a azeulidigezh, hag ivez ar skiant evit a nesañ, bezañ war evezh outo, kenlodañ e beadra.

Ar gerioù **azeuliñ, azeulidigezh** a ranker ober ganto dirak ar vugale evit ma chomint garanet en ur c'horn eus o memor da c'hortoz ma vint koshoc'h ha gellout kompren Petra a dalvezout ez-resis.

Ar jestr avat, an emzalc'h, «en em ober bihan dirak Doue hag a zo bras», a sko o spered hag a ro dezho skiant an azeulidigezh. Evit poent ez eo trawalc'h rak donoc'h eo eget anavezout an traoù dre ar poell.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : O sell Erwan, na pegen kaer eo ar c'hañvaled !

Erwan : Ba, me a wel ur steredenn vrav dirazo.

Mamm : Ya, war ar c'hañvaled ez eus Majed a zeu a bell-vro, hag ar steredenn an hini eo a ziskouez an hent dezho.

## AZEULIÑ JEZUZ A RA AR VAJED (kendalc'h)

Ha pa guitaas ar Vajed Jeruzalem ec'h adkavjont ar steredenn,  
war-raok ez a dirazo hag e chom a-sav a-us d'un ti...

Diskenn a reont diouzh o c'hañvaled ha mont en ti.  
Eno e kavjont Jezuz etre divrec'h e vamm  
ha sant Jozef.

**Kerkent e yeas ar Vajed war-benn o daoulin.**

Perak war o daoulin ?

**Dre ma'z eo Jezuz Doue !**

Ya, **Mab Doue** ez eo.

Azeuliñ a rejont Jezuz, ha reiñ profoù kaer-tre dezhañ :

**aour, ezañs c'hwezh vat-tre dezhañ, ha mir.**

Goude-se ez int distroet d'o bro.

Goulennoù :

- Perak ez eo deuet ar Vajed da Vetelem ?
- Petra o deus gwelet en oabl evit o heñchañ ?
- Petra en deus lavaret ar roue Herodez dezho ?
- Ha c'hoant en doa ar roue Herodez da vont da azeuliñ Jezuz ?
- Perak ez eo aet ar Vajed war-benn o daoulin dirak Jezuz ?  
(..... o deus anezhañ)
- Pa fell deomp reiñ plijadur da unan bennak, petra a reer ? (*kinnig profoù dezhañ*)
- Peseurt profoù a zo bet kinniget da Jezuz ?



**Pedomp :**

**Va Jezuz, va Doue, n'eus prof brav ebet ganin da ginnig deoc'h evel ar re kinniget gant ar Vajed, met ho karout kalz a ran, hoc'h azeuliñ a ran ha kiig a ran deoc'h (*amañ a lavar pep hini en e galon ar pezh en deus graet d'ober plijadur da Jezuz*).**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : O ! Gwelout a ran ar Vajed dirak Jezuz hag e vamm.

Erwan : Tri 'zo anezho, hag ar c'hentañ a zo o vont war e zaoulin

Petra a zo ganto en o daouarn ?

## Kentel 20 AN DEC'HADENN D'AN EJIPT

E-pad an noz ez eo deuet un ael eus an Neñvoù da lavarout da Jozef :

*«Sav ha kae buan d'ur vro all, d'an Ejipt,  
gant ar Mabig Jezuz hag e vamm,  
rak ar roue drouk Herodez  
a glask Jezuz evit e lazhañ.»*

Daoust hag eñ en deus lavaret Jozef :

« Skuizh on, c'hoant kousket 'm eus, du eo an noz,  
n'anavezan ket an hent... ?»

N'en deus ket ! **Diouzhtu ez eo savet sant Jozef.**

Gwelit pegen sentus eo bet !

Distaget en deus an azen bihan, ha setu-int kuit, e-kreiz an noz !...

Gwirionezioù  
da c'houzout :

**Gant fiziañs e Doue** o deus sentet Mari ha Jozef.

Emzalc'h :

Fiziañs e Doue, a zo RAGEVEZHIEK, a daol evezh ouzh e vugale, evel m'en deus beilhet war e vab Jezuz.

### Kuzulioù :

Evit reiñ da gompren gwelloc'h ar skeudenn e c'heller displegañ d'ar bugel e vez tomm an amzer er broioù-se, setu perak e kousk an dud war pondalezioù an tiez a servij da doennoù, ha n'eus ket gweleoù hogen kourtinennoù.

Evit lakaat ar bugel da vrasaat e vrokusted ez eo mat lavarout dezhañ : «Ha gouest e vefes te ivez da gousket evel-se evit Jezuz ?» Ma'z eo troet d'hen ober, e c'heller neuze lavarout dezhañ e rank bezañ gouest da zilezel e c'hoarioù pe ar pezh emañ oc'h ober pa vez galvet gant e dud. Evel sant Jozef eo mat respont «Ya !» diouzhtu.

Sentiñ diouzhtu 'zo sentiñ div wech : d'ar gerent ha d'an Aotrou Doue ivez. Pa dermer evit sentiñ emañ aze an diaoul evit lavarout deomp gortoz c'hoazh, ha chom hep sentiñ a-benn ar fin.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

O. : Gwelout a ran un ael eus an Neñv.

E. : Ha me un den o kousket.

M. : O, sellit, sant Jozef a selaou an ael ez eo, war pondalez an ti.

## AN DEC'HADENN D'AN EJIPT (kendalc'h)

Ya, aet eo kuit Mari ha Jozef, emaint war hent an Ejipt.  
N'o deus ket grozmolet daoust ma'z aent kuit e-kreiz an noz.

E-keit-se e lavare ar roue Herodez :

*«Fellout a rafe din kas Jezuz d'ar marv !»*

Met gouzout a rit ez eo Doue kreñvoc'h ha galloudekoc'h eget Herodez.  
Pep tra a zo en e c'halloud hag e taol mat evezh ouzh Jezuz,  
ouzh e vamm hag ouzh e dad.

**Ouzhimp-ni ivez e taol evezh dre ma'z omp e vugale.**

Ha setu ar pezh a zo degouezhet :  
Ar roue Herodez kriz a lakaas d'ar marv  
holl vugale vihan Betleem e plas Jezuz.

D'an Neñvoù eo aet war-eeun ar vugale diantek-se.

**Ha n'eo ket bet lazhet Jezuz.**

Goulennoù :

- Petra 'zo degouezhet e-pad an noz, pa gouske Mari ha Jozef ? (*deuet e oa un Ael...*)
- Ha sentet en deus sant Jozef ?
- Ha gortozet en deus ma vije deiz ?
- Ha gortozet en deus n'en dije ket mui ezhomm da gousket ?
- Petra eo ar vro m'en deus tec'het an Tiegezh santel war-zu enni ?
- Petra en deus graet ar roue Herodez e Betleem ?
- Da belec'h eo aet ar vugale a oa bet lazhet ?



**Pedomp :**

**Va Doue, taolet mat  
evezh ouzhin-me,  
evel m'hoc'h eus  
taolet evezh ouzh ar  
Mabig Jezuz. Bugel  
deoc'h ez on me  
ivez.**

**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Emañ sant Jozef o kerzhout en ur zerc'hel an azen.

Erwan : Hag ar Werc'hez Vari a zo war an azen gant ar Mabig Jezuz.

Mamm : Ya, hir eo ar veaj, dek devezh da vihanañ. Emaint o treuziñ ar gouelec'h, tomm-tre eo ar gouelec'h.

## Kentel 21 JEZUZ E NAZARED

Un deiz e lavaras Ael an Aotrou da sant Jozef :

**«D'ar gêr e Nazared e c'hellit distreiñ  
rak marv eo ar roue Herodez,  
n'ho pet ket aon ken !»**

Neuze ez int distroet d'o zi bihan.

**Kreskiñ a rae Jezuz**, a oad ganit e oa.  
Ha petra 'rae ?

**Sikour a rae e dad** a oa kalvez, labourat a rae ar c'hoad.  
Ha Jezuz a zegase dezhañ e ostilhoù :  
ar morzhol, an tachoù...

Alies en defe karet marteze mont gant ar vugale all,  
hogen laouen e oa da rentañ servij  
ha d'ober sakrifisoù bihan  
**evit reiñ plijadur d'e dad ha d'e vamm.**

Gwirioneziou  
da c'houzout :

C'hoantaet en deus Jezuz tremen dre holl stadoù ar vuhez **evit ma kemerimp skouer warnañ.**

Emzalc'h :

Er skol gant Jezuz, uvel er sentidigezh, klaskomp ober bemdez en hon holl oberoù pemdeziek bihan ar pezh a vez gourc'hemennet deomp, pe goulennet.

### Kuzulioù :

A-bouez-kenañ eo buhez ur bugel en e diegezh. Diwar 33 bloaz e vuhez en deus tremenet Hor Salver tregont vloaz a vuhez kuzh gant Mari ha Jozef. Fellet ez eus bet dezhañ bevañ ur vuhez familh yac'h, gant ur vuhez a bedenn, a labour hag a sentidigezh. Tu 'zo deoc'h tennañ ho mad eus ar gentel evit studiañ reolenn vuhez ho familh-c'hwil adalek ar poent ma saver diouzh ar gwele betek ma 'z aer da gousket. Ar reolenn-vuhez-se en tiegezh eo a ra diazez pemdeziek buhez ho pugel. Tamm-ha-tamm e rank ar bugel sentiñ evit plijout da Jezuz.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz a welan, emañ o sikour e dad.

Erwan : Un tach emañ o reiñ da sant Jozef.

Mamm : Ya, ha gwelout a ran-me ar Werc'hez Vari o labourat ivez.

## JEZUZ E NAZARED (kendalc'h)

Sellit pegen mat e oar Jezuz ober kefridioù e vamm !

Ha te ?

Ha gouzout a rez rentañ servij d'az mamm, sevel an daol...?

Jezuz ne c'hroz mole morse **pa rente servij.**

Ne fulore ket ,

n'en em ganne ket gant e gamaladed vihan,  
**sentiñ a rae buan pa veze galvet.**

Perak e rae Jezuz pep tra da reiñ plijadur d'e dad ha d'e vamm ?

Dre ma roe bep beure e galon da Zoue e Dad ;

bep beure e kinnige e zevezh :

e bedennoù, e labour, e c'hoarioù, e sakrifisoù.

**Evel Jezuz e raimp.**

Goulennoù :

- Lavar din ar pezh a rae Jezuz e Nazared.  
*(da gentañ e kinnige e vuhez)*
- Ha fuloriñ a rae a-wechoù ?
- Ha pa veze galvet gant e vamm, sentiñ a rae diouzhtu ?
- Peogwir en deus Jezuz skoueriet ac'hanomp dre e vuhez, lavar ar pezh a c'hellfes ober evit ober eveltañ er gêr.





**Pedomp :**

**Va Doue, taolet mat  
evezh ouzhin-me,  
evel m'hoc'h eus  
taolet evezh ouzh ar  
Mabig Jezuz. Bugel  
deoc'h ez on me  
ivez.**

**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Gwelout a ran an daol ma tebre an tiegezh santel outi.

Erwan : Jezuz eo, a gav din, a welomp o tegas un dorzh vara.

Mamm : Ya, emañ o sevel an daol evit ar pred.

## Kentel 22 JEZUZ KOLLET HAG ADKAVET

Pask a oa ur gouel bras-tre e Jeruzalem, kalz a dud a yae di da bediñ e ti an Aotrou Doue en amzer Jezuz : **Templ Jeruzalem**.

Ha bremañ penaos e anver **ti an Aotrou Doue** ?  
**An iliz an hini eo.**

En ur gerzhout war an hent e pede an dud,  
hag e kanent kanoù kaer en enor da Zoue.  
Degouezhet e kêr Jeruzalem ez eas Mari, Jozef ha Jezuz  
war-eeun d'an Templ e-lec'h ma yae an holl da bediñ.

Jezuz ivez, en em ro d'ar bedenn,  
evit e vamm, evit e dad, evit an holl dud...  
**En e vleud en em gave Jezuz en Templ,  
e ti an Aotrou Doue, e Dad.**  
Moarvat e serre e zaoulagad  
evit soñjal gwelloc'h ennañ.  
**A-greiz e galon e komze outañ.**

Gwirionezioù  
da c'houzout :

Aze ivez en deus  
diskouezet Jezuz a-nevez  
**ez eo Doue**. « N'ouzoc'h  
ket em eus da vezañ gant  
traoù **va Zad** ? »

Emzalc'h :

ESTLAMMIÑ ouzh  
«furnez» Jezuz-Doue, a  
estlamme «feizoniourion  
an ampoent»

Kuzulioù :

Penndalc'hel eo ar poent-mañ war ar bedenn, muioc'h a-bouez eget pep tra all. Ar pep pennañ eta 'zo reiñ d'ar bugel ar spered a bedenn. Sikour dezhañ da bediñ gant komzoù, ha dreist-holl **komz ouzh Doue gant e galon.**

En-dro d'ar spered a bedenn eo ar gentel-mañ, da lavarout eo bezañs Doue a gar ar bugel hag a zo gant ar bugel, hag a garfe bezañ karet gantañ. Dazont speredel an ene a vo hervez an darempred a vo skoulmet dre ar bedenn etre an ene ha Doue.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz, Mari ha Jozef eo a zo o sevel diri u ti bras.

Erwan : Tud all 'zo, a zo o kerzhout sioul.

Mamm : Ya, an Templ eo. An tiegezh santel a zo en em gavet e Jeruzalem.

## JEZUZ KOLLET HAG ADKAVET (kendalc'h)

Echu eo ar gouel. Mari ha Jozef a guita kêr Jeruzalem hep merzout **n'edo ket Jezuz ganto** er garavanenn. Pelec'h 'ta e c'hell bezañ ?

Ha pa verzont n'edo ket ganto ez ejont war o c'hiz,  
hag e c'houlennjont digant an holl dud a gejjont ganto :  
*«Ha gwelet hoc'h eus Jezuz ? Dianket hon eus hor bugel !»*

Den ebet n'en deus e welet ! **E-pad tri devezh e klaskjont anezhañ...**

Pediñ start a rae Sant Jozef hag ar Werc'hez Vari  
evit adkavout Jezuz !

**En diwezh hen kavjont en Templ.**

En ur sal leun a dud edo Jezuz o komz, hag an holl a selaoue outañ !

Eno edo tud desket-bras a veze anvet «Doktored war al Lezenn»

ha **Jezuz a zisplege dezho kalz a draoù war an Aotrou Doue.**

Ur bugel 12 bloaz o tisplegañ traoù an Aotrou Doue  
da dud desket-bras ?

**Ya ! Doue eo Jezuz, pep tra a oar.**

**Gouiziekoc'h eo eget an «Doktored war al Lezenn».**

Neuze, gant e dud laouen-holl da vezañ e adkavet ez eo aet Jezuz  
en-dro d'ar gêr **ha kendalc'het en deus da sentiñ outo.**

Goulennoù :

- Pa oa Jezuz 12 vloaz, da belec'h e oa aet gant e dud ?
- Perak ez ae kalz a dud da Jeruzalem ?
- Penaos e veze anvet ti an Aotrou Doue d'ar poent-hont ? (*an Templ*)
- Ha bremañ, penaos ez anvomp ti an Aotrou Doue ? (*an iliz*)
- Hag aketus e oa Jezuz da ober e bedennoù ? (*Ya, mat-tre o rae, gouzout a rae e komze ouzh Doue e Dad*)



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Tud a zo o komz kenetrezo.

Erwan : Me, e kav din ez eo Jezuz a zo o komz en e sav dirazo.

Mamm : Ya, displegañ a ra Jezuz kalz a draoù d'an dud-se a veze graet anezho an «Doktored war al Lezenn». Souezhet bras ez int o welout Jezuz o komz ken mat outo eus traoù an Aotrou Doue.

**Pedomp :**

**Jezuz karet, deskit  
din pediñ mat evel  
m'hoc'h eus graet.**

## Kentel 23 BADEZIANJ JEZUZ

**Yann-Vadezour a gare kalz an Aotrou Doue,**  
ur bern tud a yae d'e gaout.

Komz a ra d'an holl dud-se diwar-benn Jezuz.  
Lavarout a rae dezho :

*«Ret eo en em brientiñ, emañ ar Salver o tont,  
kempennit ho kalonou, grit sakrifisoù, emañ Jezuz o tont !»*

Ha badeziñ a rae an dud e dour ar stêr Yordan.

Hag un deiz e teuas **Jezuz,**  
**a c'houlennas digantañ e vadeziñ ivez.**

Hag un dra souezhus  
a zo degouezhet neuze,  
gwelout a ri !...

### Gwirionezioù da c'houzout :

Gant Badeziant Jezuz eo bet diskuliet deomp mister an Drinded Santel : Doue a zo Tad, Mab ha Spered Santel. Pep Person eus an Drinded a zo Doue, hogen o zri a-gevret a zo unan, un Doue hepken.

Evit an trede gwech abaoe e c'hanedigezh ez eo diskuliet deomp ez eo Jezuz Doue.


### Emzalc'h :

AKT A FEIZ ez eo Jezuz Doue. «Krediñ a ran ez oc'h Mab Doue hag hor Salver.»

Kuzulioù :

Gant Badeziant Jezuz en em gavomp gant Tri Ferson an Drinded, Jezuz ar Mab, Doue an Tad o komz, hag ar Spered Santel e stumm ar goulm. Bep tro ma reomp sin ar groaz ec'h eñvoromp mister an Drinded Santel, Tad, Mab ha Spered.

Nezue eo mat ober e vad eus ar gentel evit deskiñ ober sin ar groaz a zoare, o kemer amzer da ober goustad sin ar groaz o soñjal ervat er pezh a reomp, en enor da dri Ferson an Drinded Santel.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Un den a welan, ur vazh hir-mat gantañ, e-kichen an dour.

Erwan : Ha me a wel tud o tont davetañ, ha Jezuz o tostaat ivez.

Mamm : Ya, aze, tost d'an dour, ez eo Yann-Vadezour. Lavarout a ra d'an dud en em brientiñ p'emañ ar Salver o tont.

## BADEZIANZ JEZUZ (kendalc'h)

E-keit ha ma oa Yann-Badezour **o vadeziñ Jezuz**  
eo bet gwelet a-greiz-holl, a-us da benn Jezuz,  
evel ul labous gwenn kaer anvet **ar goulm**.  
**Ar Spered Santel an hini e oa.**

Ha war an hevelep tro, eo bet klevet ur vouezh o tont eus an oabl :  
mouezh Doue an Tad an hini 'oa, hag e lavaras :  
**« Hemañ eo va Mab karet, va bugel a garan dreist,  
selaouit anezhañ ! »**

Pa reer sin ar Groaz, e lavarer da gentañ :  
**« En anv an Tad »**, e vouezh eo a glevet,  
ha goude-se e lavarer :  
**« Hag ar Mab »**, Jezuz eo ar Mab,  
ha neuze e lavarer :  
**« Hag ar Spered Santel »**,  
hennezh eo a skeudenner e stumm ur goulm.

An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel, **an Aotrou Doue ez eo**.  
An Aotrou Doue, **a zo an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel**.

Neuze e lavarer : **un Doue hepken e tri Ferson**.

### Goulennoù :

- Petra a lavare Yann-Vadezour d'an dud a zeue d'e gaout ?
- Petra a c'hortoze ?
- Petra en deus goulennet Jezuz digantañ p'eo deuet ?
- Kontit ar pezh a zo c'hoarvezet p'edo Yann-Vadezour o vadeziñ Jezuz ?
- Piv eo ar goulm ?
- Ober sin ar groaz.





**Pedomp :**

Va Doue, karout a rafen bezañ jentil, evel ma oa Jezuz er gêr. Va sikourit me ho ped.

**Deskiñ ober mat Sin ar Groaz.**

**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : En dour emañ Jezuz, hag un den a skuilh dour war e benn.

Erwan : Hag ul labous a weler a-us dezho.

Mamm : Yann-Vadezour ez eo a vadez Jezuz. Selaouit mat ar pezh a zo c'hoarvezet.

## Kentel 24 EURED KANA

Kuitaet en deus Jezuz Nazared, n'eo ket mui kalvez.

Bremañ e krog da lavarout d'an holl dud ez eo Mab Doue,  
evit ma c'hellfe an dud e anavezout hag e selaou.

Un deiz ez eo bet pedet Jezuz, ar Werc'hez Vari e vamm,  
ha mignoned, d'un eured bras en ur gêr vihan anvet Kana.

Ha petra a zo c'hoarvezet e-pad ar pred ?

Kement a dud a oa ma ne oa ket tra-walc'h a win.  
Ne chome nemet dour da evañ !

Ar Werc'hez Vari hen gwelas ha dont a reas soñj mat dezhi ;  
Gouzout a ouie ez eo Jezuz Doue, bez e c'hell ober  
kement tra a fell dezhañ. Aet eo da lavarout dezhañ :

**« N'o deus mui a win. »**

Ha gouzout a rit ar pezh a reas Jezuz ?

Gwirionezioù da c'houzout :

N'eus nemet **Jezuz, dre  
ma'z eo Doue, a c'hell  
ober burzhudoù.**

Ar Werc'hez Vari a zo  
hollec'halloudek war galon  
Jezuz.

Emzalc'h :

FEIZ e Jezuz-Doue dirak ar  
burzhud kentañ-mañ.

Kuzulioù :

Gant ar gentel-mañ e krog un heuliad mat a vurzhudou. N'eo ket mat chom re bell war doare «marzhus» ar burzhud, hogen kentoc'h war ar fed ma tiskouez aze Jezuz e c'halloud, e c'hloar, e natur a Zoue. Un den eo ar C'hrist, hogen Doue ez eo, an dra-se eo a zle kompren ar bugel. Ouzhpenn-se e tiskouez ar burzhud madelezh Jezuz ouzh an dud hag e garantez evit an dud a fell dezhañ salviñ, hogen ivez madelezh ar Werc'hez. Merzout a reer aze he levezon war galon Jezuz evel hanterourez. Ober d'ar bugel deskiñ pediñ dre hanterouriezh Mari 'zo d'ober, hag en em dreiñ outi en holl diaesterioù, zoken ar re danvezel, evel amañ.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Kalz a dud a zo ouzh taol.

Erwan : Jezuz hag ar Werc'hez Vari a welomp ivez.

Mamm : Ya, pedet int bet d'an eured, gant mignoned.

## EURED KANA (kendalc'h)

Gervel a reas Jezuz ar servijerien hag lavarout a reas dezho :

**« Kargit a zour ar jarloù bras-se a zo aze ouzh ar voger. »**

Dillo e sentas ar servijerien, evel m'he doa ar Werc'hez lavaret dezho hag e leuniañ a rejont ar jarloù betek ar barr.

Ha neuze e lavaras Jezuz :

*«Kemerit eus an dour-se ha leugnit gantañ gwer an ostizien»*

Ha neuze, petra 'zo c'hoarvezet ?

**Troet eo bet an dour e gwin**, ur gwin dispar evit an eured.  
Ur burzhud en deus graet Jezuz aze.

Ha gouest omp, ni ivez, d'ober burzhudoù ?

N'omp ket, n'eus nemet an Aotrou Doue a c'hell ober burzhudoù.

**Ar burzhud kentañ-mañ a zo bet graet gant Jezuz  
evit diskouez ez eo Doue.**

Goulennoù :

- E peseurt kêr e oa bet pedet Jezuz d'un eured ?
- Piv a oa bet pedet ivez ?
- Petra a zo c'hoarvezet e-kreiz ar pred-eured ?
- Ha petra he deus graet ar Werc'hez ?
- Penaos e vez anvet ar pezh en deus graet Jezuz ?  
*(ur burzhud)*
- Kontañ penaos ez eo c'hoarvezet.
- Ha gouest omp, ni ivez da ober burzhudoù ?
- Perak en deus graet Jezuz burzhudoù ? *(evit diskouez ez eo Doue)*



Sellomp ouzh ar skeudenn

**Pedomp :**

**Aotrou Jezuz,**

**gouzout a ran ez  
oc’h Mab Doue.**

Onenn : Ar servijerien a sent ouzh Jezuz a lavar dezho leuniañ ar jarloù gant dour.

Erwan : Ar Werc’hez Vari a sell ouzh an traoù gant evezh.

Mamm : Ya, lavaret he doa ar Werc’hez Vari d’ar servijerien : «Grit kement-tra a lavaro deoc’h ober».

## Kentel 25 PAREIDIGEZH UR BUGEL

Ur wech e oa klañv-bras ur paotrig. Trist-tre e oa e dud.  
War e wele edo hag a-vec'h e c'helle digeriñ e zaoulagad.

Ar mezeg a oa bet galvet gant e vamm,  
en deus selaouet anezhañ.

Kalz en deus graet war e dro, o reiñ  
kalz a louzeier d'e bareañ.

Ar paotrig ne blije ket al louzeier dezhañ,  
ha nebeutoc'h c'hoazh ar pikadennoù !

War-lerc'h un nebeud sizhunvezhioù  
ez eas gwelloc'h e yec'hed gantañ  
ha kregiñ a reas da sevel diouzh e wele.

Emaomp bremañ o vont da welout istor ur paotrig bihan all,  
**klañv-bras** eñ ivez, a veve en amzer Jezuz.

Klevet en doa e dad komz eus Jezuz,  
gouzout a rae e c'helle Jezuz ober burzhudoù.

Neuze ez eo aet en hent...

### Gwirionezioù da c'houzout :

Kement tra a fell dezhañ a  
c'hell Jezuz ober dre ma'z  
eo Doue.

**Un akt a feiz** emañ Jezuz o  
c'hortoz diganeomp.

### Emzalc'h :

Pa vez diaesterioù, en em  
droomp ouzh Jezuz, evel  
men deus graet tad ar bugel  
en istor-se. «*Dont a reas da  
gaout Jezuz evit goulenn  
digantañ parañ e vab.*»  
(Yann 4, 47) . Ra gredimp e  
komzoù Jezuz. Ha Jezuz a  
lavaras dezhañ : «*Kae, bev  
eo da vab.*». Hag **an den a  
gredas** e komzoù Jezuz.  
(Yann 4, 50).

Kuzulioù :

Ret eo d'ar gerent gouzout ez anavez o bugel a bep seurt amprouadurioù, bras ha bihan.

Hiziv hoc'h eus da gelenn dezhañ e ranko en em dreñ ouzh Doue en degouezhioù-se, dre ma-z eo hollc'halloudek. Ar gentelmañ eta a dalvezo evit e holl vuhez.

Kalz a grennarded a vez digalonekaet pa gavont diaesterioù war o hent ; a-wechoù ez int dic'hoanaget-naet, dre ma n'eo ket bet gwriziennet don ar feiz pa oant bihan.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Ur paotrig klañv zo war e wele.

Erwan : Emañ ar mezeg en e vete.

Mamm : Trist eo an tad hag ar vamm dre ma-z eo klañv o bugel.

## PAREADUR UR BUGEL (kendalc'h)

War benn e zaoulin ez a an tad dirak Jezuz hag e lavar dezhañ :  
« *Aotrou, deuit du-mañ a-raok na varfe va bugel.* »

Daoust hag eñ e nac'ho Jezuz ouzh an tad-se pareañ e vugel.  
Ne raio ket ! Lavarout a ra dezhañ :

« ***Kae, distro d'az ti : pareet eo da vugel !*** »

Laouen-holl, an tad en deus kredet ar pezh en deus lavaret Jezuz dezhañ. Buan ez eo distroet d'e di ha pa dostae e amezeien a zo aet en arbenn dezhañ da lavarout dezhañ e oa pareet e vab.  
Hag e oa c'hoarvezet d'an ampoent m'en devoa Jezuz lavaret :

« ***Pareet eo da vab.*** »

Ha gellet en dije ar mezeg pareañ ar paotrig, eus a bell ha diouzhtu,  
diwar netra nemet lavarout : « Fellout a ra din, bez pareet ! »

N'en dije ket gellet, nann, n'eus nemet Jezuz a c'hell  
ober kement-se.

**Ur burzhud** a vez graet eus se.

**O ! Bennozh deoc'h Jezuz,  
da vezañ bet ken mat !**

Goulennoù :

- Perak en deus redet an tad war-zu Jezuz ?
- Aet eo Jezuz da di ar paotrig evit pareañ anezhañ ?
- Petra en deus lavaret Jezuz ?
- Ha kredet en deus an tad ar pezh en doa lavaret Jezuz dezhañ ?
- P'eo distroet an tad d'e di, ha pareet e oa ar mab ?
- Hag ur mezeg en dije gellet ober ar pezh en deus graet Jezuz ?





**Pedomp :**  
**Aotrou Jezuz,**  
**krediñ a ran ez oc’h**  
**Mab Doue. Mar plij**  
**ganeoc’h, pareit ar**  
**vugaligoù glañv.**

Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz a welomp aze.

Erwan : Ur soudard a zo dirazañ war e c’hlin, o komz gantañ.

Mamm : Tad ur paotrig bihan klañv eo. Deuet eo da c’houlenn ar pare digant Jezuz.

## Kentel 26 UR PESKETAEREZH BURZHUDUS

Un devezh edo Jezuz o pourmen war ribl ul lenn vras. Div vag a oa eno, ha pesketaerien a oa o walc'hiñ o rouedoù. Goulenn a reas Jezuz digant ur pesketaer prestañ e vag dezhañ, hag e savas er vag hag en em lakaas da gomz ouzh an dud a oa war ribl al lenn.

Ha petra a lavar dezho ?

Lavarout a ra ar pezh a ranker ober evit mont d'ar Baradoz,  
hag an holl a selaou anezhañ !

Pe anv eo ar besketaerien a oa eno ?

Pêr, Andreu, Jakez ha Yann eo o anv.

Lavarout a ra Jezuz dezho :

**«Deomp e-kreiz al lenn  
hag e taolot ho rouedoù evit pakañ pesked»**

Met Pêr a respont :

**« Aotrou, a-hed an noz hon eus poaniet ha n'hon eus paket  
netra, met dre ma lavarit din hen ober e taolin va roued.»**

Daoust hag eñ emañ ar gwir gant Pêr ?

**Ya, atav eo ret krediñ ar pezh a lavar Jezuz,  
ha sentiñ outañ.**

Gwirionezioù da c'houzout :

Prezeg a rae Jezuz. Komz  
Doue a ro d'an dud a zeu  
davetañ, ha drezo d'an holl  
dud eus an douar ha deomp-  
ni a zeuio diwezhatoc'h.  
Urzhioù a rae da Bêr, hag  
eñ a sente, rak aotrouniezh  
Jezuz a zeue a Zoue. Doue  
ez eo. Ar Mestr ez eo.

Emzalc'h :

AKT     A     FEIZ     e  
hollc'halloudegezh Jezuz.  
Un     emzalc'h     a  
SUJIDIGEZH     hag  
AMZALC'H

Kuzulioù :

Ret eo diskouez mat n'en deus ket lavaret Pêr : *E-pad an nozvezh penn-da-benn em eus klasket pesketa ha n'em eus paket netra : tra-walc'h 'm eus graet*».

Nann, taolet en deus e rouedoù **dre m'en doa lavaret Jezuz dezhañ hen ober**. Dre sentidigezh eo en deus graet se, n'en deus ket grozmolet.

Ur galon glan hag eun a selaou mouezh Jezuz ur wech hepken a c'hell gwelout e vuhez o kemm penn-da-benn, oc'h en em lakaat e servij an aotrou Doue.

Un dra nemetken a c'houlenn Jezuz : ma vo kredet ennañ, ma fiziimp ennañ, en e gomzoù ken fur, madelezhus, ha gwirion.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz eo.

Erwan : Komz a ra ouzh an dud.

Mamm : Lod a selaou da vat, rak komz a ra gant aotrouniezh, ha sentiñ a ra Pêr hag an ebestel.

## UR PESKETAEREZH BURZHUDUS (kendalc'h)

Teurel a ra Pêr e roued ha diouzhtu **e pak ur bern bras a besked**,  
kement ha kement ma oa tost ar roued da regiñ.

Deuet eo buan gwazed ar vag all da sikourit  
ur bern pesked a voe karget en div vag.

Piv en deus graet se ? **Jezuz an hini eo.**

**Kement tra a fell dezhañ a c'hell Jezuz. Holic'halloudek eo.**  
**Burzhudoù a c'hell ober pa gar.**

P'en doa Pêr gwelet ar burzhud-se, war e zaoulin ez a e-tal Jezuz  
hag e galon a zo bet kemmet a-grenn.

Neuze e lavaras Jezuz dezhañ :

**«Bremañ, Pêr, ne vi ket mui pesketaer pesked,  
met sikour a ri di da gas an dud d'ar Baradoz.»**

Pa ziskennjont diouzh ar bagoù, Pêr, Andreu, Jakez ha Yann a lezas  
o bagoù hag o rouedoù **hag ez ejont da heul Jezuz.**

Deuet 'int da vezañ e vignoned :

**O envel a reer an Ebestel.**

Ar pevar abostol kentañ ez int, ha daouzek e vint prestik.

### Goulennoù :

- Anavezout a rez anvioù  
ar pevar gwaz o deus  
pesketaet e-pad an noz  
hep tapout netra ? (*Pêr,  
Andreu, Jakez, ha Yann  
ez int*)

- Petra en deus lavaret  
Jezuz dezho ? (taolit ho  
rouedoù)

- Ha petra en deus  
lavaret Pêr ?

- Ha sentet en deus  
memestra ?

- Neuze, petra a zo  
c'hoarvezet ?

- Perak e oa aet Pêr war e  
zaoulin e-tal Jezuz ?

- Petra en deus lavaret  
Jezuz dezhañ ?

- Petra eo ar ger evit  
envel migoned Jezuz ?

(*an ebestel*)



**Pedomp :**

**Aotrou Jezuz, dre  
m'en doa sentet Pêr  
ouzhoc'h eo en doa  
paket kalz a besked.  
Deskit din sentiñ  
ouzhoc'h bepred.**

**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Ur vag a welomp, ha gwazed o sachañ war ur roued.

Erwan : Sell ! Ur bern pesked 'zo er vag, unan all a dosta da sikour ! !

Mamm : Ha Jezuz a zo aze ganto.

## Kentel 27 AN DEK DEN LOVR

Un deiz edo Jezuz o pourmen war un hent gant an Ebestel e vignoned.  
Ha setu ma kejjont gant **tud lovr**, da lavarout eo gant tud o deus  
ur c'hleñved spontus na c'heller ket pareañ dioutañ.

Den ne fell dezhañ ober war o zro. Aon o doa an dud e vefe  
tapet kleñved al lorgnez.

Al lovreien gaezh a welas Jezuz, redek a rejont en arbenn dezhañ  
hag e lavarjont dezhañ :

**«Aotrou Jezuz, ho pet truez ouzhomp !»**

Se a dalveze :

**«Hor pareit !»**

Jezuz a lavaras dezho :

**«Kit da welout ar beleg.»**

War an hent o vont da welout ar beleg, **setu int holl paret.**

Na laouen e rankent bezañ !

Gwirionezioù da c'houzout :

Dre ur burzhud en deus  
Jezuz paret al lovreion.  
Mat eo bet outo, pa lavarent  
dezhañ : «*Aotrou, ho pet  
truez ouzhomp !*»

Hogen d'e garantez n'eus  
nemet unan en deus  
respontet gant anaoudegezh  
vat, nemet unan.

Emzalc'h :

Ober ur sell a-dreñv ouzh  
an holl zonezonoù en deus  
graet an Aotrou evidomp.  
Ha trugarekaat. Goulenn  
ouzh an Aotrou Doue d'hor  
sikour da CHOM HEP  
BEZAÑ DIANAOUDEK  
pe DIGAR.

### Kuzulioù :

Ar skeudenn-mañ a gaver ivez er gentel a-raok : Jezuz a zo adarre o prezeg. Hen ober a raio e-pad tri bloaz. Gant feiz eo ret goulenn. Trugarekaat a zo ret deskiñ ivez. Ober e vad eus ar gentel-mañ evit boazañ ar bugel da drugarekaat Jezuz. Trugarekaat evit an heol, ar stered, ar glav a zoura al liorzhoù ar bleuñv hag al legumaj, evit al laboused, evit Tadig ha Mammig. C'hoarvezout a ra gant kerent 'zo chom hep goulenn digant o bugale na «mar plij» na «trugarez», en anv ar sevended. Ra ziwallint, rak diwar-se e tisoñj ar vugale da drugarekaat an Aotrou Doue.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz eo, en e sav emañ. O prezeg emañ adarre.

Erwan : Ar wazed a zo en o sav ivez, daou a zo war o daoulin.

Mamm : Klañv int. Deuet int da c'houlenn ar pare digant Jezuz.

## AN DEK DEN LOVR (kendalc'h)

An dek den lovr-se a oa ken **laouen da vezañ pareet** ma'z ejont  
d'ar gêr hep soñjal trugarekaat Jezuz.

Unan anezho hepken a yeas war e c'hiz.

Lavaret en deus «**Trugarez deoc'h Jezuz**» a-greiz e galon.

An nav all n'o deus ket trugarekaet Jezuz.

Ha ni, daoust hag eñ e teu da soñj deomp trugarekaat Jezuz ?  
... evit an holl draoù a ra evidomp evit ma c'hellimp  
mont d'ar Baradoz ?

Na zisoñjomp ket ez eo deuet war an Douar evidomp  
ez eo marvet ouzh ar groaz evidomp  
en deus goulennet pardon ouzh Doue e Dad  
en abeg d'hor pec'hedoù  
hag en deus digoret a-nevez  
dor an Neñvoù deomp !

Ne raimp ket evel al lovreien n'o deus ket trugarekaet an Aotrou Doue

Lavarout a raimp :

**«Trugarez deoc'h, Jezuz, evit kement-tra hoc'h eus graet evidon.»**

### Goulennoù :

- Gant piv en deus kejet Jezuz war an hent ?
- Pet e oant ?
- Petra o deus goulennet digant Jezuz ?
- Ha diouzhtu en deus Jezuz al lovreien ? (*n'en deus ket, c'hoant en doa gwelout ha krediñ a rafent en e gomzoù*)
- Ha sentet en deus memestra ?
- Pegoulz e oa bet pareet al lovreien ?
- Daoust hag eñ o deus trugarekaet Jezuz ?



**Pedomp :**

**Jezuz karet, poaniet oc'h bet o welout n'eo ket deuet d'ho trugarekaat al lovreion ho poa pareet. Me n'on ket evit bezañ digar evelto. Gouzout a ran ar pezh hoc'h eus graet evidon hag an holl dud hag e fell din ho trugarekaat.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

**Onenn :** An holl wazed a ya kuit. Laouen int rak sevel a reont o divrec'h !

**Erwan :** Unan a chom war e zaoulin dirak Jezuz.

**Mamm :** Holl ez int bet pareet gant Jezuz, met n'eus nemet unan a zo aet war e c'hiz d'e drugarekaat p'en deus merzet e oa bet pareet.

## Kentel 28 AR VADEZIAN

Eürus-tre e oa Adam hag Eva e liorzha kaer Baradoz a Douar.

Kaer-holl e oa o eneoù, glan-holl.

Bugale Doue e oant, hag e oa merket dezho  
mont d'ar Baradoz gant Doue.

Met disantet o doa Adam hag Eva ouzha Doue,  
rak debret o doa eus ar frouezh difennet.

Piv o deus selaouet ? An Diaoul.

Kastizet ez int bet.

Kaset ez int bet er-maez diouzh Baradoz an Douar.

Ha neuze, tu a oa dezho mont d'ar Baradoz ?

N'hellent ket, rak **o eneoù ne oant ket mui na kaer na glan.**

**N'hellent ket mui lavarout e oant bugale an Aotrou Doue.**

Ha ni, daoust hag eñ hor bije gellet mont d'ar Baradoz ?

N'hor bije ket gellet dre ma'z omp holl bugale Adam hag Eva.

Pa vezer ganet hon eus war hon ene mastar pec'hed orin Adam  
hag Eva, ha n'omp ket bugale an Aotrou Doue eta.

**Diverkañ a c'heller ar mastar-se war hon eneoù ha dont en-dro  
da vezañ bugale da Zoue.**

Gwirioneziou

da c'houzout :

Genel a reomp gant hon  
ene merket gant ar  
mastar-orin, ha n'hon  
eus ket ar gwir da vezañ  
anvet «bugel da Zoue».  
Setu aze perak eo ret  
**rehev ar vadeziant dre  
ma tiverk mastar ar  
pec'hed orin ha ma ra  
ac'hanomp bugale da  
Zoue ha d'an Iliz.**

Emzalc'h :

LEVENEZ ha FOUGE  
da zougen an anv a  
vugel da Zoue dre ar  
Vadeziant. C'hoantaat ar  
c'hras-se evit an holl  
dud.

Kuzulioù :

Anavezet eo ar skeudenn-mañ, hini ar gentel 13 ez eo. Lakaet eo bet amañ evit reiñ da gompren ez eo dre Jezuz, dre ar vadeziant ec'h adkaver ar c'hras kollet dre an disentidigezh. Adlavarout hep skuizhañ : «En da galon emañ an Aotrou Doue».

E korfig bihan ar bugel badezet emañ an Aotrou Doue o chom, emañ an Drinded santel o chom. Doue o chom ennañ a labour en e ene, hag e laka ar pezh a ra hag a lavar ar gerent da frouezhaat.

Anezhañ e unan n'hell ket ar bugel kreskiñ e ene. Ar gerent a rank sikour dezhañ da greskiñ e feiz bet degemeret gant ar vadeziant.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Oh : Adam hag Eva eo, e Baradoz an Douar.

Erwan : Klevout a reont an Aotrou Doue o komz outo.

Mamm : Selaouet o doa an Diaoul ha disentet o deus ouzh Doue.

## AR VADEZIAN (kendalc'h)

Deuet eo Jezuz war an Douar evit digeriñ deomp dor ar Baradoz.  
Ha **bremañ e c'hellomp dont en-dro da vezañ bugale da Zoue !**  
Evit mont d'ar Baradoz eo ret diverkañ mastar pec'hed Adam  
hag Eva a vez anvet ar «pec'hed orin».

Ha penaos e vez diverket ar mastar-se ?  
**Gant ar vadeziant eo e vez diverket.**

Jezuz eo en doa lavaret d'an Ebestel ha d'ar veleien  
**badeziñ ar vugale vihan.**  
Ur gouel vras eo ar Vadeziant evit an tiegezh a-bezh !  
Da gentañ e kas kuit ar beleg an Diaoul en ur lavarout :  
**«Kae kuit, ro ar plas d'an Aotrou Doue !»**

Neuze e skuilh dour war benn ar babig en ur lavarout :  
**«Da vadeziñ a ran en anv  
an Tad hag ar Mab, hag ar Spered Santel.»**

Diouzhtu-souden ez eo diverket ar mastar :  
**neuze e teu an ene da vezañ kaer-holl, glan-holl,  
hag an Aotrou Doue a zeu da chom ennañ.**

**Dre ar vadeziant e teu ar babig da vezañ Bugel da Zoue.**

### Goulennoù :

- Soñj ac'h eus eus disentidigezh Adam hag Eva ?
- Ur mastar o deus graet Adam ha Eva war o ene. Daoust hag eñ o deus holl ur mastar war o ene ar vugale a vez ganet ? Perak ?
- Penaos e ranker diverkañ ar mastar-se a zo war ene ar vugale vihan ?
- Piv a vadez ar vugale ?
- Displegañ penaos e ra ar beleg evit badeziñ ? Petra eo ar c'homzoù a zistag ?
- Goude al lid-se, daoust hag eñ ez eo deuet ar bugel da vezañ Bugel a Aotrou Doue ?

**Pedomp :**

**Va Doue, laouen-holl ez on da vezañ badezet, da vezañ ho pugel ha da c'hellout evel-se mont un deiz d'ar Baradoz. Karout a rafen e vefe badezet holl bugale an holl broioù.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Sellit, an tad hag ar vamm o deus ur babig bihan.

Erwan : Hag ar beleg a skuilh dour war e dal.

Mamm : An dour-se a walc'h ar mastar a zo war ene ar babig : emañ o vont da vezañ Bugel da Zoue.

## Kentel 29 JEZUZ A VENNIG AR VUGALE

Un deiz e komze Jezuz eus ar Baradoz.

Kalz a dud a oa en-dro dezhañ.

Ha setu ma tosta ar vugale vihan ouzh Jezuz.

**Evit bezañ tost-tre outañ.**

Dont a ra ivez ar mammoù o babigoù ganto en o divrec'h.

Evit m'ò gwelfe Jezuz ha m'ò bennigfe.

Bountañ an dud a rae ar vugale ha e oa ket laouen an Ebestel.

Lavaret o deus ar re-se :

**«Kit kuit ! Direnkañ a rit Jezuz, skarzhit kuit buan !»**

Jezuz en doa gwelet anezho avat, a lavaras dezho :

**«Lezit a vugale vihan da zont betek ennon  
na virit ket outo da dostaat !»**

Ha perak e kar Jezuz ar vugale vihan kement ?

Dre m'ò deus ur galon glan,

bugale an Aotrou Doue, ha Jezuz a fell dezhañ

e teufent da vezañ e vignoned.

**Aotrou Jezuz, fellout a ra din mirout glan-mat va ene  
evit chom atav ho mignon deoc'h.**

Gwirionezioù da c'houzout :

Dre ma'z eo glan ar vugale a drugarez d'ar vadeziant ez int karet gant Jezuz.

Fellout a ra dezhañ e vezfent degaset davetañ :  
«*Lezit ar vugaligoù da zont davedon, ha na virit ket outo*» (Lk 18, 16).

Kinnig a ra Jezuz deomp bezañ evel ar vugale : « *An neb na zegemer ket Rouantelezh Doue evel ur bugel, nann, ned aio ket e-barzh.*»

Emzalc'h :

Respont da c'halvadenn Jezuz. Respont dezhañ ouzh e garout hag ouzh hen lavarout dezhañ en hor c'halon, ha pa'z eomp d'an iliz-parrez.

Kuzulioù :

Lavarout a reomp e kar Jezuz ar vugaligoù : dija e wel drezo an engroez bras a vugale badezet a resevo gras ar vadeziant.

Alies e vez strobot an dud gour gant ar vugale. Soñjal a ra dezho ez int re vihan evit kompren, hag o lakaont a gostez. Amañ e welomp Jezuz gant bugale en-dro dezhañ, o komz d'o c'halonoù.

Ar gentel-mañ a ro ar mammoù-se a zo da zerc'hel pa ne ouzomp ket ezteurel a zoare ar misterioù : kinnigomp hor bugale da Jezuz evit m'ò sklerijenno gant e c'hras, ar c'hras-se hag a zo dija garanet e don ar c'halonoù dre ar vadeziant.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : O ! Ur bern bugale a welan !

Erwan : Ha mammoù a zegas o bugaligoù.

Mamm : Ya, kalz e kare Jezuz ar vugaligoù, hag ar vugaligoù a gare kalz Jezuz.

## JEZUZ A VENNIG AR VUGALE (kendalc'h)

Gwelet hon eus ar pezh a c'hoarvez da zeiz hor badeziant :  
Dont a reomp da vezañ bugale da Zoue

### **ha Jezuz hor c'har**

evel ma kare ar vugaligoù a zeue d'e vete p'edo war an douar.  
Ha bremañ, ha gellout a c'hellomp komz ouzh Doue ni ivez ?

Ya, evel-just ! Diouzh ar beure ha diouzh an noz, pa reomp hor pedennoù. Ne welomp ket anezhañ met eñ hor gwel hag hor c'hlev.

Daoust hag eñ e c'hellomp tostaat outañ ?

Ya, **pa 'z eomp d'an iliz**, neuze e vez laouen-tre pa soñjomp ober ur weladenn vihan dezhañ.

Petra a c'hellomp lavarout dezhañ ?

**Demat deoc'h Jezuz, ho karout a ran a-greiz va c'halon,  
gouzout a ran ez oc'h Mab Doue,  
e c'hellit ober kement tra a garit.**

**Karout kalz a ran ivez va zad ha va mamm, va breudeur  
ha c'hoarezed, benniget anezho ha mirit anezho me ho ped,  
evit m'ho karint ha ma vezint eürus.**

Laouen bras eo Jezuz pa glev ac'hanomp

**rak karout a ra kalz ar vugaligoù**

### Goulennoù :

- Ha karout a ra Jezuz ar vugale ?

- Pa veve war an Douar, ha lezel a rae ar vugale da dostaat outañ ? (*Ya, o c'hemer a rae etre e zivrec'h, war e varlenn, pokañ a rae dezho hag e komze outo*).

- Ha perak e kar Jezuz kement ar vugale ? (*Dre ma-z eo glan o c'halonoù ha dre ar vadeziant e vezint Bugale da Zoue*).

- Peur e c'heller komz da Jezuz ?

- Tostaat outañ a c'hellomp ? Pelec'h ?

- Ha laouen eo Jezuz pa 'z eomp d'ober ur weladenn dezhañ ?



**Pedomp :**

**Va Jezuz, laouen-tre  
on pa ouzon am  
c'harit. Gouzout a  
ran eo plijus deoc'h  
pa 'z an d'ho  
kweladenniñ. Neuze  
ez in d'ho kwelout.**

**Mar plij ganeoc'h,  
va sikourit da virout  
bepred va ene glan,  
ha kaer.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Amañ eo ur paotrig a zo oc'h ober e bedennoù.

Erwan : A-zehou emañ en iliz o pediñ ivez.

Mamm : Ya, pediñ a ra da Jezuz a zo en Tabernakl.

### Kentel 30 AR MAB DISPIGNER

An Aotrou Doue 'zo un Tad a gar e holl vugale. Selaouit ar gontadenn gaer en doa Jezuz lavaret d'e Ebestel.

Un den en doa daou vab. An hini yaouankañ a lavaras d'e dad :

« *Ro din an arc'hant a zegouezho din pa vin bras.*»

Pa oa mat an tad, e roas pep tra dezhañ.

#### **Hag ar paotr da vont kuit da bell vro**

hag eno e foetas e zanvez oc'h oc'h evañ, o tebriñ

hag oc'h ebatal. **hag ankouaet e dad gantañ !**

Ken ne vanas netra, tamm arc'hant ebet !

Neuze e klaskas labour. **Den ebet ne roe labour dezhañ avat.**

Ne gavas nemet da vesa moc'h, ne oa ket gwall blijus !

Er fank e vezent, lous e oant, c'hwezh fall ganto, hag er c'hraou ganto ez ae ar paotr da gousket.

Da zebriñ n'en doa nemet tammoù boued ar moc'h.

Deuet da soñj dezhañ eus e dad hag eus e di, e hirvoude :

**«Na brav e oa din e ti va zad,  
ha bremañ on troet da reuzeudik !»**

**Hag en em roas da ouelañ !...**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Madelezhus eo an aotrou Doue. Pardonñ a ra** atav pa vez dismegañset, gant ma vo keuziet ar pec'hed.

Emzalc'h :

Goude ar pech'ed eo ret  
GOULENN PARDON  
digant an Aotrou Doue.  
DONT EN-DRO DEZHAÑ  
; hor gortoz a ra atav.

Kuzulioù :

Ar barabolenñ-mañ a ro un dro dispar evit prientiñ d'ar Pask kentañ a zo pal pennañ al levr-mañ. Gwelet hon eus penaos ez eo deuet-tre ar pec'hed er bed, penaos ez eo bet diverket gant ar vadeziant. Bep tro ma ra deomp kouezhañ an droug 'zo ennomp, e pardon an Aotrou Doue.

Pebezh levez e eo pardiñ evit an Tad hag adkavout e Dad evit ar bugel ! Bemnoz, d'ar bedenn, goulenn digant ar bugel klask ar pezh en deus graet displijadur da Jezuz da ziskleriañ dezhañ e azrec'h (pe e geuz).



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Pemp pemoc'h 'zo o tebriñ.

Erwan : Hag ur paotrig a zo ouzh o diwall.

Mamm : Ar paotrig-mañ en deus kuitaet e dad ; trist-tre eo ; diwall a ra moc'h.

## AR MAB DISPIGNER (kendalc'h)

Pell-pell e oa bet o ouelañ. Ha neuze e lavaras outañ e-unan :

**«Emaon o vont da zistreiñ da di va zad :  
sur a-walc'h ez asanto pardonñ ac'hanon !»**

Petra eo pardonñ ? **Disoñjal an droug** a zo bet graet gant ar paotrig.

Neuze e kerzh pell amzer war an hent war-zu ti e dad, e-unan-penn.  
Skuizh-tre eo, roget-holl eo e zilhac'h.  
En diwezh e wel ti e dad, hag e dad war an hent ouzh e c'hortoz.

Sell ouzh ar skeudenn :

war e zaoulin ez a ar mab da c'houlenn pardon digantañ  
en ur ouelañ,  
rak gouzout a rae en doa poaniet-bras e dad o kuitaat ar gêr.  
Grataat a ra dezhañ ne raio ket mui ken.

### **Laouen-holl eo e dad ouzh e welout en-dro**

ma kemer anezhañ etre e zivrec'h, hag e pok dezhañ,  
**hag e ro e bardon dezhañ.**

Ur pezh dilhad kaer ha nevez a ro dezhañ hag e ro urzhioù evit ma vo  
aezet ur pred mat. Evit diskouez d'e vab yaouankañ e kar atav anezhañ.

### Goulennoù :

- Perak en deus kuitaat ar mab dispigner e dad ?
  - Ha laouen e oa, pell diouzh e dad ?
  - Petra en deus graet p'en deus dispignet e arc'hant e holl hêrezh ?
  - Ha tapet kruz en deus p'eo distroet da di e dad ?
- Kontañ penaos eo bet degemeret gant e dad.

**Pedomp :**

**Va doue, goulenn a  
ran pardon  
diganeoc’h evit ar  
boan a ran deoc’h  
pa zisentan, pa  
vezan lontrek,  
gaouiat, pa fuloran,  
pa skoan gant va  
breudeur pe va  
c’hamaladed.  
Sikourit din evit na  
rafen mui en-dro.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Gwelout a ran ur paotrig war bell e c’hlin. Piv eo ar gwaz ?

Erwan : E dad eo marteze, ha du-hont e di !

Mamm : Ya, ar paotrig a zistro davet e dad.

## Kentel 31 KRESK AR BARA

War ribl al lenn edo Jezuz gant e Ebestel.

Hag ur maread tud a oa deredet d'e selaou.

**Den ne gave hir gant Jezuz pa gomze eus an Neñv hag eus Doue e Dad.**

Deuet e oa an abardaez, erru tost an noz...

Gant ar re all e vez prederiet Jezuz atav ;

kompren a reas e oa savet naon d'an dud-se,

**n'o doa ket debret a-hed an devezh !**

*«Pelec'h e c'hellfemp, eme an ebestel, reiñ da zebriñ da gement-all a dud,ouzhpenn pemp mil a zo anezho.»*

Kalz eo pemp mil a dud !

**«Amañ, eme Andrev, unan eus an ebestel,**

**ez eus ur c'hrennard a zo gantañ pemp baraenn ha daou besk, met petra eo se evit kement-all a dud ?»**

Ha Jezuz da lavarout :

**«Grit dezho mont en o c'hoazez**

**ha degasit din ar baraennoù hag ar pesked.»**

Graet an traoù gant an ebestel ha lakaet an dud da azezañ

hag Andrev da gerc'hat ar c'hrennard.

Hollc'halloudek eo Jezuz hag e ouie petra 'z ae da ober !

Gwirionezioù da c'houzout :

**Madelezhus eo Jezuz.**

Soñjal en hor c'horf kenkoulz hag en hon ene. Prezeg a rae. Komz a rae diwar-benn an Aotrou Doue e Dad. E ziskuliañ a rae deomp, hogen soñjal a reas ivez en engroez-se he doa naon. Setu aze perak **e kreskas ar bara.**

Emzalc'h :

RENTAÑ GRAS : e pep tra e soñj Jezuz dre ma kar ac'hanomp. Kement tra a fell dezhañ a ra.

### Kuzulioù :

Bez e c'heller goulenñ : «Ha te, laouen e vijes bet da vezañ e plas ar paotrig en deus kinniget e bemp baraenn hag e zaou besk ? Gwelout a rez n'en deus ket miret pep tra evitañ, roet en deus, laouen, pep tra da Jezuz a oa ken mat e gomzoù...»

Merzout a c'heller ivez e ra Jezuz kement tra a fell dezhañ dre ma 'z eo Doue, ar pezh na vir ket outañ da gaout evezh ouzh an holl dud gweitbunan, da skouer an dud-se a oa deuet davetañ hep kas boued ganto.

Amañ e taol evezh ouzh magadurezh ar c'horfoù ha diwezhatoc'h e roio e Gorf e-unan evel magadurezh evit hon eneoù.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Gwelout a ran Jezuz a zo o komz.

Erwan : Ha kalz a dud a selaou outañ.

Mamm : Ya, miliadoù a dud, laouen bras int da zont da selaou Jezuz o komz dezho !

## KRESK AR BARA (kendalc'h)

Petra 'reas Jezuz ?

Kemeret gantañ ar baraennoù, e savas e zaoulagad ouzh an Neñv.

Komprenet ec'h eus perak ? **Pediñ e Dad a reas.**

Hag o vezañ benniget ar bara, e rannas anezhañ

hag e roas an tammoù d'an ebestel d'o reiñ d'an holl.

Heñvel a reas gant ar pesked.

**Hag a holl a zebras o gwalc'h.**

Pebezh burzhud bras !

Ha ne oa ket echu : menel a rae tammoù !

*«Dastumit an tammoù, a lavaras Jezuz,  
evit nad aio netra da goll».*

**Daouzek panerad a voe karget eus an tammoù !**

**Un dra dreist en doa graet Jezuz :  
hemañ a oa burzhud kreskadur ar bara.**

Doue eo Jezuz,

**da lavarout eo e c'hell ober kement a fell dezhañ !**

Goulennoù :

- Ha kalz a dud a oa deuet da selaou Jezuz ?
- Kontañ petra en deus graet da reiñ da zebriñ d'an holl.
- Hag eus ar pred-se e chome restajoù ?
- Peanos e vez anvet ar pezh en deus graet Jezuz ? (*Ur burzhud*)





**Pedomp :**  
**Jezuz, va Aotrou,**  
**krediñ a ran ez oc’h**  
**Doue ha e c’hellit**  
**ober kement tra a**  
**fell deoc’h.**

Sellomp ouzh ar skeudenn :

Onenn : Emañ Jezuz o komz gant ar paotr.

Erwan : Bara ‘zo en e baner.

Mamm : Emañ Jezuz o vont da ziskouez ez eo Doue.

## Kentel 32 AR GOAN DIWEZHAÑ

**Gouzout a rae Jezuz edo o vont da vervel.**

Evit ar wech diwezhañ e tebras koan gant e Ebestel.

Ar Goan diwezhañ eo houmañ.

Adarre e komzas eus Doue e Dad hag eus  
ar pezh a zo d'ober evit mont d'ar Baradoz.

E-kerz ar pred, Jezuz a gemeras bara, e vennigas, e rannas  
anezhañ e tammoù hag hen roas d'e Ebestel en ur lavarout :

**«Kemerit ha debrit, kement-mañ a zo va C'horf.»**

Dre gomz **Jezuz e teu ar bara da vezañ Jezuz.**

Krediñ a reomp ez eo Jezuz Doue,

gouzout a reomp e teu ar bara da vezañ Korf Jezuz.

**An ebestel, o tebriñ ar bara-mañ, a zegemer Jezuz e o c'halon.**

Evit Jezuz n'eo ket diaes treiñ ar bara en e Gorf,

peogwir e c'hell ober ar pezh a gar,

**pa 'z eo Doue, ez eo hollc'halloudek.**

Burzhud bras an Eukaristiezh en deus graet Jezuz  
**d'ar Yaou Gamblid**, derc'hent e varv.

Gwirionezioù da c'houzout :

**An Eukaristiezh, pe sakramant an Aoter, 'zo e gwirionez hor Salver Jezuz Krist, gwir doue ha gwir Den, dindan spesoù ar bara hag ar gwin.**

Ensavet en deus an eukaristiezh evit kenderc'hel d'en em ginnig d'e Dad e sakrifis, evit en em ginig evel magadur an eneoù, hag evit chom ganeomp bepred gant e gorf, evel p'edo ganeomp war an Douar.

Emzalc'h :

FEIZ LEUN e efedusted komzoù Jezuz. P'en deus Jezuz en deus lavaret, e kredan ennañ. A-walc'h eo. Peurvat eo, n'hell ket hon tromplañ.

### Kuzulioù :

Amañ n'eo ket dav klask displegañ rak emaoamp gant unan eus misterioù brasañ hor Feiz. Krediñ a ranker. Evel p'en doa Jezuz lavaret d'un tad e oa pareet e vab klañv : «*pareet eo da vab*», e lavar amañ «*Kement-mañ a zo va c'horf*» ha raktal e teu da vezañ gwir.

Doare diavaez ar bara a chom hogen n'eo ket mui bara, Korf Jezuz ez eo. Diouzhtu e raker reiñ d'ar bugel ar c'hoant da resev Jezuz en e galon dre ar gomunion.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

**Onenn :** Emañ Jezuz o tiskouez un dra bennak d'e ebestel.

**Erwan :** Tro-dro dezhañ emaint.

**Mamm :** Emañ Jezuz o koaniañ ganto evit ar wech diwezhañ a-raok e varv. Hen gouzout a ra. Ur burzhud bras-tre emañ o vont d'ober evit chom ganto zoken ma ne vo mui ganto gant e gorf-kig.

## AR GOAN DIWEZHAÑ (kendalc'h)

Goulennoù :

Goude e kemeras Jezuz ar **C'halir** (ur werenn vras). Gwin a oa ennañ. E vennigañ a reas, hag hen roas d'e Ebestel en ur lavarout :

**«Kemerit hag evit eus hemañ, kement-mañ a zo va Gwad,  
a vo skuilhet – a vero war ar groaz – evidoc'h  
hag evit an dud da zilemel o fec'hedoù».**

Raktal, ned eo ket gwin ken, hogen **Gwad Jezuz**.

Lavaret e vije ez eo gwin c'hoazh,  
padal, ned eo ket gwin ken, hogen Gwad Jezuz.

En ur evañ ar gwin-mañ, an ebestel a zegemeras Jezuz e o c'halon.  
Burzhud an Eukaristiezh eo.

An oferenn gentañ 'zo bet lidet gant Jezuz, o fask kentañ o deus  
graet an ebestel. Komuniañ, ober e Bask,  
**'zo degemer Jezuz en e galon.**

Noz ar Yaou Gamblid, goude bezañ bet graet ar burzhud-mañ,  
treiñ ar bara en e Gorf, e vanas pell Jezuz gant e ebestel.  
Erbediñ a rae outo bevañ e peoc'h etrezo goude e varv,  
bezañ gwir vreudeur an eil gant egile.

- Pe hini eo ar burzhud  
bras a reas Jezuz e  
derc'hent e varv ? (*Troet  
en deus ar bara en e  
Gorf hag ar gwin en e  
Wad*)

- Peseurt komzoù en doa  
distaget Jezuz ?

- Ha degemeret o deus an  
ebestel en o c'halon  
Jezuz e gwirionez ?

- Petra eo degemer Jezuz  
? (*Komuniañ eo*)

- Petra o doa graet an  
ebestel e deiz-hont ? (*O  
Fask bras, pe o fask  
kentañ*)

- Ha laouen e vezer pa  
resever Jezuz en e  
galon ?

- Petra en doa lavaret  
Jezuz war-lerc'h burzhud  
an Euaristiezh, o venel  
pell ganto ?

**Pedomp :**

Jezuz, krediñ a ran ez eo gwir kement-tra a lavarit. Pa lavarit «Kement-mañ ‘zo va C’horf» ez on sur ez eo ho Korf, ha pa gomunnier ez ho tegemerer en hor c’halon. Roet hoc’h eus deomp Bara hon eneoù, a zo ho Korf. Roit deomp kaout naon dezhañ, evel m’en deus va c’horf naon da vara an douar. Ma n’hellan ket degemer ho korf bemdez, e fell din kaout ar soñj em gortozit bemdez.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn hag Erwan : Ar skeudenn-mañ a zo hini ar bajenn a-raok.

Mamm : Ya, burzhud an Oferenn gentañ eo, nemet aze ez eus ur c’haliriad gwinn gentañ etre e zaouarn.

## Kentel 33 ARRESTADUR JEZUZ HAG E BASION

Hag an holl a gar Jezuz ?

Kalz ne reont ket, nann siwazh. Tud fall ha drouk a gasa Jezuz, hag eñ hen goar.

Goude ar Goan, da noz ar Yaou Gamblid, ez eas Jezuz da liorzh an Olived gant e ebestel.

**En e unan e oa aet Jezuz hag e pede e Dad.**

Holl bec'hedoù ar bed a wele,  
reoù ar bed-holl, reoù Adam hag hon re.

Kement a boan en doa Jezuz ma kouezhas war e zaoulin,  
**kinnig a reas e holl boanioù evit daspren hor pec'hedoù.**

Erru e oa hanternoz.

Gant ar re zrouk edo Judaz, unan eus an ebestel.

Klezier ha bizhier ha oa ganto ;

Dastum a rejont Jezuz ha **Jezuz n'en em zifennas ket.**

Gant kerdin e voe staget Jezuz

ha kaset dirak ar barner Pons-Pilat

daoust ma oa un den mat ha n'en doa graet droug ebet !

Gwirionezioù da c'houzout :

Evit hon daspren en deus Jezuz gouzañvet un tremvan kriz : gwerzhet eo bet gant Judaz, skourjezet eo bet, kurunet gant spenn, roet gant Pons-Pilat da vezañ staget ouzh ar groaz ma varvas warni.

Emzalc'h :

Ni ivez hon eus lakaet Jezuz da c'houzañv gant hor pec'hedoù.  
GOULENNOMP PARDON  
OUTAÑ a-greiz hor  
c'halon.

Kuzulioù :

Mat eo lavarout sklaer d'ar bugel «*gouzañvet kalz en deus Jezuz gant spern ar gurunenn !*» Na karout a rae an dud evit gouzañv kement en ur gaout ar galloud da lakaat pep tra da chom a sav. Evidomp eo en deus diwasket poan evel-se : evit ma c'hellimp mont d' e gaout d'ar Baradoz pa varvimp.

Arabat termal da lakaat ar bugel dirak ar groaz, ha lezel anezhañ da sellout, ma c'hellint lavarout o c'harantez evit Hor Salver., abalamour m'en deus gouzañvet kement evidomp evel den.

Bugale vihan a zo gouest da ziwaskañ poanioù bras-tre.

Lavaarout ivez en deus pardonet Jezuz an holl bec'hedoù p'edo ouzh ar groaz.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Kalz a dud 'zo.

Erwan : Aze edo Jezuz o pediñ.

Mamm : Ya, tud drouk o deus kaset soudarded d'e arrestiñ.

## ARRESTADUR JEZUZ HAG E BASION (kendalc'h)

Eno e krogas ar pezh a anver «**Hent ar groaz** ».

Gwallgaset e voe Jezuz gant ur bobl dirollet ha kivioul.  
Deomp da heul Jezuz en ur c'houzañv gantañ, p'en deus mennet  
gouzañv ganeomp evit digeriñ deomp an Neñvou.

Goap a ra ar soudarded anezhañ,  
**skourjezet** eo, **kurunet** e benn gant spern  
**ha poan vras en deus. Kignet-holl e oa korf Jezuz**  
Mouchet eo e zaoulagad, dornataet eo, skopet outañ ivez,  
ha dismegañset e kement stumm a zo.

E-keit-se, petra 'rae Judaz ? **Morc'hed** a oa ennañ  
evit bezañ bet gwerzhed Jezuz.

War bennoù e zaoulin **e rankfe mont da c'houenn pardon**.  
Ne reas ket. Mont a reas d'en em grougañ !

Pediñ a rae Jezuz en ur lavarout d'e Dad :  
«Va Doue, evit an dud eo, pardon evit o fec'hedoù».

**O Jezuz, ho karout a ran, evidon hoc'h eus gouzañvet, P'hon devo  
poan e lavarimp ivez, eveltañ : «Evidoc'h, Aotrou Doue, evel Jezuz  
ha gant Jezuz e kinnigan va foan, evit pardon ar pec'hedoù».**

Goulennoù :

- Daoust hag an holl a gare Jezuz ?
- Petra o doa c'hoant ar re zrouk na garent ket Jezuz ?
- Piv a oa deuet da zastum anezhañ ?
- Perak n'en em zifenne ket Jezuz ? (*Dre m'hor c'har, ha fellout a rae dezhañ goulenn pardon da Zoue en hor plas evit ma c'hellimp mont d'ar Baradoz gantañ*)
- Petra oa doa graet ar soudarded da Jezuz ?
- Ha Jezuz a asant gouzañv ? (*Evit reiñ klod d'e Dad en deus asantet Jezuz da c'houzañv, evit diskouez e garantez hag hon lakaat da spontañ rak ar pec'hed*)



**Pedomp :**

**Jezuz, n'oc'h ket  
deuet war an douar  
evit ober ho  
plijadur gant traoù  
ar bed, hogen evit  
bezañ keneil an dud  
keizh, an dud er  
boan. Evit bezañ  
heñvel ouzhoc'h, ne  
lakain ket va  
c'halon gant  
traoùigoù a blij di ;  
gant ho skoazell ha  
dre garantez  
evidoc'h e  
tegemerin laouen ar  
poanioù a gavin war  
va hent.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

**Onenn : Mouchet eo bet e zaoulagad da Jezuz ! Staget eo bet gant kerdin !**

**Erwan : Skeiñ a ra unan taolioù troad dezhañ, ober a reont goap outañ !**

**Mamm : Ya, goap a reont outañ. Ha padal ez eo Jezuz mat ouzh an holl hag hor c'har kement !**

## Kentel 34 HENT AR GROAZ HA KROAZSTAGADUR

Heuliomp Hent ar Groaz gant Jezuz.

**Barnet e oa d'ar marv.**

E-maez kêr edo da vezañ **staget ouzh ar groaz**  
graet gant daou damm koad.

Skuizh, leun a wad hag a skop, **e touge e groaz** war e skoaz.

Sellomp outañ :

emañ o paouez kouezhañ ha pa n'eo ket gouest ken,  
eo bet galvet un den, Simon eus Kurena,  
evit kendougen ar groaz.

**Adsevel a ra Jezuz** ha derc'hel da vont.

En desped d'ar soudarded, ur vaouez santel, Veronika, a sec'has  
e zremm da Jezuz hag **e zremm a voe louc'het war al lien.**

War ar C'halvar, Jezuz a voe staget e zaouarn hag e dreid  
ouzh ar groaz, ha neuze savet ar groaz. Kreisteiz bennak e oa.  
Gouzañv a rae hor Salver. Poan en doa !

**E aberzh a ginnige d'e Dad.** Perak ?

Evit diskouez deomp pegement hor c'har ha goulenn pardon  
d'e Dad evidomp ha digeriñ deomp an Neñvoù  
Na karet omp gant Jezuz !

Gwirionezioù da c'houzout :

**E groaz en deus douget Jezuz.** Lezet en deus ar soudarded e dachañ war ar groaz. **Kinniget en deus e Wad hag e Vuhez da ziskouez ez eo karantez : karet en deus betek reiñ e vuhez.**

Emzalc'h :

C'HOANTAAT REPARIÑ  
AN DROUG, KAROUT  
JEZUZ MUIOC'H, eñ hag  
en deus hor c'haret kement  
betek reiñ e vuhez.

Kuzulioù :

Implij a reomp an droienn «Doue e Dad» da ober mat ar c'hemm gant «Jezuz, Mab Doue».

Diouzh an degouezh, ha mar bez troet mat ar bugel d'hen ober, kinnigomp dezhañ ober greadoù brokus a sakrifisoù bihan evit kemer perzh e poanioù Jezuz : kinnig traoùigoù bihan en e vuhez pemdeziek. Grasoù kaer a resevo ar bugel evel-se. Ar c'halonoù brokus a blij da Jezuz, hag e ro dezho kant evit unan.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Un den a zoug ur groaz tev a welan.

Erwan : Kouezhet eo Jezuz d'an douar, rak re bounner eo.

Mamm : Ya, kouezhet eo, skourjezañ a ra an den a-dreñv dezhañ, hag ur vaouez a dosta, santez Veronika, da glask naetaat dremm Jezuz, a zo lous gant ar gwad hag ar boultrenn.

## HENT AR C'HALVAR HA KROAZSTAGADUR (kendalc'h)

Daou dorfedour a oa bet staget war groazioù e-kichen Jezuz. Unan a skoe kunujennoù gantañ, egile avat a c'houlenne pardon evit e dorfedoù.

**«Hiziv e vi ganin er Baradoz» a lavaras Jezuz dezhañ.**

Gwelout a reomp penaos e pardon Jezuz atav pa anzaver e bec'hedoù.

### Teir eurvezh-pad e voe Jezuz war ar groaz.

E-kichen kroaz Jezuz, edo mari, gant sant Yann, an abostol karet ha feleun, leun a feiz.

O welout e vamm, e lavaras Jezuz en ur ziskouez sant Yann :

**«Setu da vab.»**

Hag o tiskouez an Itron Varia, e lavaras da sant Yann :

**«Setu da vamm.»**

Hag adalek neuze re ro deuet an Itron Varia da vezañ mamm an holl dud. Pep tra en deu Jezuz roet deomp, betek e vamm.

**A-benn ar fin e laoskas Jezuz ur griadenn**

**hag o soublañ e benn, e varvas.**

**Gwener ar Groaz** e oa, da deir eur goude kreisteiz.

### Goulennoù :

- Petra o doa lakaet ar soudarded war ziskoaz Jezuz ?

- Pelec'h e oa bet kroazstaget Jezuz ? (*War ar Menez Kalvar*)

- Gant petra o doa staget Jezuz ouzh ar groaz ? (*Gant tachoù tev*)

- Petra 'lavare ar laeron da Jezuz ?

- Petra 'respontas Jezuz d'an hini a c'houlennas pardon ?


- Piv a oa e-kichen ar groaz ?

- Ha gouzañvet kalz en deus Jezuz en devezh-se ?

- Evit piv ez eo marvet ? (*Evidomp-ni an dud, evit digeriñ deomp dor ar Baradoz*)

**Pedomp :**

**Jezuz, n'oc'h ket  
deuet war an douar  
evit azezañ war un  
tron en ur palez :  
roue ez oc'h, ya,  
hogen ho tron eo ar  
groaz. Pa sellan  
ouzh ho kroaz, e  
pellait an  
temptadurioù hag e  
roit nerzh din da  
drec'hiñ warno. Me  
ho ped, o Jezuz,  
renit ennon dre ho  
kroaz.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

**Onenn : Teir c'hroaz 'zo.**

**Erwan : Er c'hreiz emañ Jezuz.**

**Mamm : E-kichen Jezuz e-harz ar groaz, e welomp Jezuz ha Sant Yann**

## Kentel 35 AN OFERENN

War ar Groaz ez eo marvet Jezuz.

Soñj hon eus eus ar pezh a reas d'ar Yaou Gamblid, e derc'hent e varv, evit menel ganeomp da viken ?

Ensevel a reas Sakramant an Aoter.

An Oferenn gentañ e oa.

Jezuz en doa kemeret bara hag en doa benniget anezhañ en ur lavarout :

**«Kement-mañ a zo va C'horf».**

*Goude-se en doa kemeret gwin hag en doa lavaret :*

**«Kement-mañ a zo kaliriad va Gwad,  
grit an kement-mañ evit ober eñvor ac'hanon.»**

Evel Jezuz neuze e ra ar beleg e pep Oferenn.

Un ostiv (un tamm bara, krenn e stumm alies) a zegas war an Aoter hag e-kerz ar Gorreoù, e-kreiz an Oferenn, e lavar evel Jezuz :

**«Kement-mañ a zo va C'horf.»**

Ha raktal, ned eo ket bara ken, **hogen Jezuz, bev eno, e ostiv.**

Lavaret e vije ez eo bara c'hoazh,

padal, **ned eo ket bara ken, hogen Jezuz e-unan.**

Gwirionezioù da c'houzout :

Fellet ez eus bet dezhañ ma kemero pep hini perzh e e Basion. Setu aze perak, **dre an Oferenn, e kendalc'h hag e nevesa e sakrifis en doa kinniget d'e Dad war ar groaz.** Da forzh peseurt mare ha forzh pelec'h e vezomp e c'hellomp en em unaniñ ouzh Jezuz, evel d'ar mare m'edo Jezuz war ar Menez Kalvar.

Emzalc'h :

AKT A FEIZ e bezañs Jezuz e sakramant an Aoter.

TRUGAREKAAT. Dre m'hor c'har eo, pep hini gwitibunan, ez eus bet fellet dezhañ ma kemerimp perzh en e sakrifis dre an Oferenn.

Kuzulioù :

A-bouez eo reiñ d'ar vugaligoù skiant ar sakrifis. Chom hep trezkas dezho ar geennadurezh a ro an Iliz war-se n'eo ket mat.

Lavarout : «**Re vihan ez int evit kompren**» ne zalc'h ket kont a-walc'h ez eo gouest an eneoù glan d'en em zigeriñ, ganto e verzer gras ar vadeziant o reiñ frouezh hag o tegeriñ spered ar bugel war ar gwirioneziou uhelañ.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn hag Erwan : Gwelout a reomp Jezuz hag e vignoned.

Mamm : A zehou e z anavezit Jezuz hag e ebestel d'a Yaou Gamblit. Ar beleg a ra heñvel : «Kement-mañ a zo va C'horf».

## AN OFERENN (kendalc'h)

### Sakrifis an Oferenn 'zo sakrifis ar Groaz.

War an aoter emañ ar groaz evit hen degas da soñj deomp.

E-kerz ar gorreoù, goude bezañ lavaret komzoù Jezuz,  
e c'horre ar beleg an ostiv  
evit d'an holl azeuliñ Jezuz.

Bara a welomp atav ;

gouzout a reomp avat emañ Jezuz eno, p'en deus hen lavaret.

Petra 'ra Jezuz war an Aoter ?

Ar pezh a rae war ar Groaz :

**pediñ** evidomp,

**en em ginnig** en aberzh d'e Dad,

evel m'en doa en em ginniget war ar groaz,

ha **goulenn** digant Doue pardoniñ deomp.

Pa vezomp en Oferenn, n'omp ket hon-unan, **en ostiv e teu Jezuz.**

**Pa gomuniomp, en hor c'halon e tegemeromp Jezuz.**

Laouen e c'hellomp bezañ o soñjal e teu Jezuz en hor c'halon.

Goulennoù :

- Penaos en deus mennet Jezuz menel ganeomp ?

- Petra en doa lavaret d'e ebestel ober ?

- Petra eo an Oferenn ?

*(Ar sakrifis ma en em ginnig hor Salver da Zoue e Dad evel aberzhiad evidomp ha dre waziadezh ar beleg, eo an oferenn)*

- Petra 'ra ar beleg en Oferenn ?

- Petra a zeu ar bara hag ar gwin da vezañ ?

- Piv a zeu en hor c'halon pa gomuniomp ?

- Petra eo sakramant an Aoter ? *(Sakramant an Aoter 'zo hor salver Jezuz Krist, Doue ha den, dindan spesoù ar bara hag ar gwin)*



## EN EM GINNIG A RA JEZUZ



### Pedomp :

Jezuz, en Oferenn e kredan e nevezit sakrifik bras ar Groaz. C’hwi a zo bet kroazstaget evidon hag evidomp, ha bev oc’h e ostiv. Ouzh e zegemer e fell din kinnig ganeoc’h va holl buhez d’am Zad eus an Neñv, evit ma vo salvet an holl dud. Jezuz, deskit din en em aberzhiñ em buhez pemdez evit ar re a garit.

### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Gwelout a ran Jezuz ouzh ar groaz.

Erwan : An Ostiv vras a welan, hag ar C’haliriad dindan.

Mamm : An Oferenn eo, da vare ar Gorreoù ez azeulomp Jezuz a zo bezant dindan spesoù ar bara hag ar gwin kensakret.

## Kentel 36 JEZUZ EN TABERNAKL

Un doare taol a zo en ilizoù hag er chapelioù.

An aoter eo.

Warni e lid ar beleg an Oferenn.

En he c'hichen, pe en ur chapel-gostez

ez eus un doare armelig, an tabernakl eo.

Enni e virer Jezuz en ostiv.

### En tabernakl emañ Jezuz. En Ostiv ez eo bev.

Ne vez ket gwelet ; padal, **emañ ennañ**, sur ha n'eo ket marteze, **p'en deus Jezuz hen lavaret.**

Hor gwelout a ra, hor c'hlevout a ra pa gomzomp outañ.

### Eno emañ Jezuz, deomp da zont d'e welout ha d'e bediñ, da lavarout eo da gomz outañ.

Hon anaout a ra, soñjal ennomp a ra, hor gortoz a ra.

Hor c'harout a ra ha laouen eo

pa zeuomp d'an iliz e-tal a tabernakl

d'e azeuliñ ha da gomz outañ.

Gwirionezioù da c'houzout :

**Fellet ez eus bet gantañ bezañ bezant en tabernakl evit bezañ ganeomp. Ur merk a garantez eo.** Evel-se eo aes deomp e gavout, e azeuliñ, pa garomp.

Emzalc'h :

FEIZ e bezañs Jezuz en tabernakl.

TRUGAREKAAT (rentañ Gras) : Dre m'hor c'har eo ez eus bet fellet gantañ bezañ bezant en Ostiv.

Kuzulioù :

Dibaouez e rankomp lavarout e c'hell Jezuz ober kement a fell dezhañ dre ma'z eo Doue. Amañ, gant burzhud an Eukaristiezh emañ bezant en Tabernakl.

Unan eus misterioù hor feiz eo krediñ e bezañs gwerc'hel

Jezuz dindan spes an ostiv kensakret a zo en Tabernakl.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Ur paotrig a zo o pediñ.

Erwan : Piledoù koar a zo war elum da ziskouez emañ Jezuz eno.

Mamm : Ya, en Tabernakl emañ Jezuz-Ostiv. A doare-mañda vezañ ganeomp en deus ijinet.

## JEZUZ EN TABERNAKL (kendalc'h)

Petra a c'hellomp lavarout da Jezuz pa 'z eomp d'e welout d'an Tabernakl ?

Lavarout a reomp dezhañ :

**«Aotrou Jezuz, dont a ran d'ho pete abalamour e fell din ober plijadur deoc'h. Dont a ran e plas ar re eus va c'hamaladed n'eont ket d'an iliz pe o deus disoñjet ac'hanoc'h.»**

Pe neuze :

**Aotrou Jezuz, ho karout a ran a-greiz va c'halon.  
Kinnig a ran deoc'h va sakrifisoù bihan, ha va labour.»**

Goude-se e lavaromp dezhañ an traoù a gavomp en hor c'halon  
**dre ma karomp anezhañ.**

A-us d'an Tabernakl e vez ur grusifi peurvuiañ.

Evit degas deomp da soñj ez eo marvet Jezuz evidomp  
ouzh ar groaz goude bezañ bet gouzañvet kalz da zigeriñ  
an Neñvoù deomp.

Fellout a ra dezhañ ma aimp d'ar Baradoz.

Na karet omp gant Jezuz !

**Bennozh deoc'h, Aotrou Jezuz !**

Goulennoù :

- Penaos ez anver an  
armelig a zo en iliz-  
parrez a zo evit Jezuz-  
Ostiv ?

- Ha gortozet omp gant  
Jezuz pa 'z eomp d'e  
weladenniñ ?

- Hor selaou a ra ? Hor  
gwelout a ra ?

- Petra a c'hellomp  
lavarout dezhañ pa dosta  
ouzh an Tabernakl ?



**Pedomp :**

**Va Doue, bennozh  
deoc'h a greiz-kalon  
da vezañ bet roet  
Jezuz deomp evit  
hon heñchañ war-zu  
ennoc'h.**

## Kentel 37 DASORC'HIDIGEZH JEZUZ

Ha pa voe marv Jezuz e voe diskennet e Gorf diwar ar groaz.  
Paket e voe en ul liñsel vras  
ha lakaet en ur bez maen.

Pa vezer marv, na fiñval na komz ne c'heller ober.  
Korf Jezuz hepken a zo er bez.  
Pelec'h emañ e ene ? Rak un ene ne varv ket...  
Pa varvas Jezuz e oa aet e ene eus e Gorf da welout  
eneoù an holl dud aet da Anaon abaoe Adam  
da zigeriñ dezho an Neñvoù.

Er bez e oa manet Korf Jezuz eus ar Gwener noz d'ar Sul beure.  
O tiwall ar bez e oa soudarded.

**Ar pezh a gar avat a ra an Aotrou Doue !**

D'ar Sul beure, d'an trede deiz goude e dremenvan,  
**e tiskaras Jezuz ar maen a gloze ar bez.**

**Bev eo da viken, dasorc'het eo !**

**Pask eo, Allelouia !**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Bev eo aet er-maez Jezuz  
eus ar bez. Dasorc'het eo.**

Anat eo bremañ ez eo  
Doue.

Emzalc'h :

LEVENEZ o c'houzout ez  
eo savet Jezuz a varv da  
vev.

AKT A FEIZ en e  
hollc'halloudegezh.

ESPERAÑS e levenez ar  
Baradoz, a zo digor bras  
deomp gant Jezuz.



Kuzulioù :

A Oferenn a zo bet studiet a-youl-gaer dres goude ar Goan diwezhañ hag ar sakrifis ouzh ar groaz. Bremañ ez adkrogomp gant buhez Jezuz marv da Wener ar Groaz ha dasorc'het da zeiz Pask, Sul Fask.

Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Bev eo Jezuz a-nevez !

Erwan : An daou soudard a seblant seizet.

Mamm : Ya. Marv e oa Jezuz, ha deuet eo en-dro d'ar vuhez : dasorc'het eo.

## DASORC'HIDIGEZH JEZUZ (kendalc'h)

Daoust ha mervel a raimp-ni ?

Ya, evel just, mervel a raimp holl.

Daoust ha dasorc'hiñ a raimp-ni ivez, evel Jezuz ?

Ya **Dasorc'hiñ a raimp**. Ha gant hor c'horf nevez,  
klodus, na varvo biken, ez aimp d'a Neñv  
da vevañ gant Jezuz. Da viken !

An holl ?

Nann, siwazh ! **Lod n'aint ket gant Jezuz.**

Ar re zrouk,

ar re na garont ket Jezuz (ar re heñvel ouzh Judaz)  
ne adkavint ket Jezuz. Pell dioutañ ez aint, d'an Ifern !

Ur vered a weler war ar skeudenn.

E-kichen ar beziou ez eus bet treset **korf dasorc'het tud o vont  
da sevel d'an Neñv !**

O gwir gorf, kemmet dre **hollec'halloudegezh Doue**,  
ne c'houzañvo ket biken ken.

### Goulennoù :

- Pelec'h e oa bet lakaet  
Korf Jezuz ?

- Pa vezer marv, ha  
fiñval ha komz a c'heller  
ober ?

- Pelec'h edo r ene ?

- Petra a c'hoarvezas  
d'an trede deiz ?

- Ha ni, pa varvimp, da  
belec'h ez aio ho ene hag  
hor c'horf ?

- Daoust ha dasorc'hiñ a  
raimp-ni ?

- Piv hon dasorc'ho ?  
(*An Aotrou Doue*)

- Da belec'h ez aimp ?  
(*D'ar Baradoz, hag eno  
e vimp eürus-tre da  
viken*)



**Pedomp :**

**Jezuz, bev ez oc'h  
savet eus ar bez.  
Allelouia ! Krediñ a  
ran ez oc'h Mab  
Doue. Gortoz a ran  
an deiz ma  
tasorc'hin ganeoc'h  
evit bevañ ganeoc'h.  
Roit din gortoz an  
deiz-hont el levenez.  
Roit hevelep levenez  
d'an holl re a vez o  
c'houzañv, ha war o  
zremenvan.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Gwelout a ran tud skedus dirak pep kroaz.

Erwan : Ur vered eo. Eno e vez lakaet an dud e beziou.

Mamm : Emaon o vont da zisplegañ e vo dasorc'het an holl dud un deiz gant an Aotrou Doue.



## **Trede trimiziad**

Diskouezet e vo bremañ d'ar bugel penaos e vever evel bugel da Zoue :

Gant Jezuz - a c'heller adkavout atav en e galon, hag en Tabernakl – ha gant ar Werc'hez Vari e rank hor spered treiñ bemdez war-zu traoù an Aotrou Doue.

Emziskouezioù Hor Salver a raio d'ar bugel karout Jezuz muioc'h c'hoazh, ha kreskiñ ennañ ar c'hoant d'e glask, d'e gavout, d'e virout. E feiz e doueelezh Jezuz a gresko war-un-dro.

Ar vuhez diabarzh a gresko ivez, hag e vo stad er bugel da vezañ bugel da Zoue, bugel eus an Iliz, ha laouen e vo o tougen an anv a gristen.

Gant an Iliz, ar gouelioù a vo lidet en dibenn-bloaz-mañ a vo studiet. Kement-se a startaio o levezeg hag ho feiz, hag o c'haritez a vo kresket.

E-pad an trimiziad-mañ, ar gerent hag ar gatekizerien a daolo pizh evezh ouzh ar bugel evit diverzhout sinoù a ziskouezo m'emañ ar bugel o c'hortoz degemer Jezuz en e galon dre ar gomunion gentañ, pe e ranker gortoz un tamm c'hoazh.

## Kentel 38 AR MERC’HED SANTEL D’AR BEZ

Trist-tre e oa ar merc’hed santel gant marv Jezuz.

D’ar Sul ez eont d’ar bez, ha petra a welont ?

**Digor eo ar bez !!**

Dilec’hiet eo bet ar maen bras a stanke toull-dor ar bez.

Dont a reont-tre : **korf Jezuz n’emañ ket mui eno !**

Gwelout a reont u ael, skedus-holl gant gouloù.

Aon a sav enno, met lavarout a ra an ael dezho :

*«N’ho pet ket aon ! Gouzout a ran emaoch o klask Jezuz,  
a oa bet kroazstaget. N’emañ ket amañ : Dasorc’het eo.  
Kit d’hen lavarout d’e vignoned, an ebestel !»*

Neuze, laouen-holl, ez int aet da gaout an ebestel  
**evit lavarout dezho ar c’heloù mat-se.**

Gwirionezioù da c’houzout :

Ne ouie ket ar merc’hed santel e oa dasorc’het Jezuz. Dre m’e garent kalz **o doa bet c’hoant mont d’ar bez da ober mat war-dro e gorf** marv, e gempenn.

Emzalc’h :

LEVENEZ o c’houzout ez eo aet Jezuz er-maez eus ar bez, bev-mat !

### Kuzulioù :

E-pad ar gentel-mañ e vo klasket chom dilavar meur a wech.

Tu a vo da lavarout :

Trist-tre e oa ar merc'hed.  
Marv e oa Jezuz, hag e gorf  
n'emañ ket mui er bez zoken  
...

**An ael, avat, a ro dezho da  
c'houzout ur c'heloù a-  
bouez-tre, ha neuze e  
vezont laouen-holl...**

Ma vez tro d'hen ober,  
distreiñ d'ar soñjezonù-se  
meur a wech e-pad an  
devezh... An Iliz a-bezh a zo  
gant ar soñjezonù-se e-pad  
amzer Fask.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Un ael a welan.

Erwan : Teir maouez 'zo

Mamm : Ya, deuet eo ar merc'hed-se da vez Jezuz.

## AR MERC'HED SANTEL ER BEZ (kendalc'h)

Goulennoù :

War hent an distro da Jeruzalem en em ziskouez Jezuz dezho !

Ya, eñ an hini eo !

E-barr al levez, ez eont war o daoulin dirak Jezuz sav a varv da vev.

Hag e azeuliñ a reont.

Neuze e lavaras Jezuz dezho :

**«Dalc'hit gant ho hent,  
kit da lavarout d'am mignoned, an ebestel,  
ez in d'o gwelout ivez.»**

Gwelet mat o deus ar merc'hed santel e oa dasorc'het Jezuz,  
peogwir e welent anezhañ o komz hag o kerzhout.

**Madelezhus ken-ken eo Jezuz :**

**Diouzhtu** eo en em ziskouezet d'ar merc'hed-se,

**...evit frealziñ anezho .**

- Pegoulz e oa en em gavet ar merc'hed santel dirak ar bez ?

- Petra o doa gwelet ?

- Hag er bez edo c'hoazh korf Jezuz ?

- Petra en doa lavaret en ael dezho ? (*N'edo ket mui eno, dasorc'het e oa*).

- Ha kredet eo bet gant ar merc'hed santel ? (*Ya, kredet o deus rak diouzhtu ez int en em lakaet en hent, laouen-holl da gaout an ebestel e Jeruzalem.*)

- Gant piv o deus kejet war an hent ?

- Ha diouzhtu o deus anavezet Jezuz ? (*Ya, hag ez int kouezhet d'an daoulin, pa'z eo Jezuz Mab Doue.*)

**Pedomp :**

**Jezuz, va Aotrou,  
laouen on, me ivez,  
peogwir oc'h eus  
dasorc'het. Bev ez  
oc'h a-nevez,  
diskouezet hoc'h  
eus splan, aze ez  
oc'h Mab Doue e  
gwirionez.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Aze e welan Jezuz adarre.

Erwan : Hag an teir maouez ivez c'hoazh.

Mamm : Ya, Jezuz eo a en em ziskouez dezho.

## Kentel 39 JEZUZ EN EM ZISKOUEZ DA VARI-MADALEN

Mari-Madalen, a oa e-kichen ar groaz  
gant Mari ha sant Yann, a gare kalz Jezuz.

Da veure ar Pask e teuas d'ar bez  
hag o kavout goullo ar bez, e chome da ouelañ.

Daou ael a welas hag int o c'houlenn diganti :  
**«Perak e ouelez ?»**

Hag e respontas dezho :  
**«Va Jezuz o deus douget kuit  
ha n'ouzon ket pelec'h o deus e lakaet.»**

O treiñ war-dreñv, e welas un den.

**Jezuz e oa, met krediñ a reas e oa al liorzhour !**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Klask Jezuz a rae Mari-Madalen.** En em ziskouezet e oa dezhi.

Emzalc'h :

KREDIÑ A REOMP.  
Gouzout a reomp e welimp Jezuz er Baradoz. Da c'hortoz e c'hellomp e gavout en iliz en tabernakl, ha gant ar gomuion e teu en hor c'halonoù.



Kuzulioù:

Ur bec'herez vras e oa Mari-Madalen. Hogen, dre m'he deus karet kalz goude-se, e oa bet pardonet gant Jezuz. An test kentañ eus dasorc'hidigezh Jezuz eo hi. Klask lakaat ar bugel da vuheziñ da vat an darvoud-se.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Un aotrou a zo o tostaat ouzh ar bez.

Erwan : Aze e weler un itron war benn he daoulin.

Mamm : Mari-Madalen an hini eo. Edo o klask Jezuz, ha setu m'eo en em ziskouezet Jezuz dezhi, hogen da gentañ-holl e kavas dezhi e oa al liorzhour !

## JEZUZ EN EM ZISKOUEZ DA VARI-MADALEN (kendalc'h)

Jezuz e oa, met Mari-Madalen ne ouie ket e oa eñ.

Jezuz he galvas neuze dre hec'h anv :

**«Mari !»**

Anaout a reas mouezh Jezuz ha hi d'he daoulin o lavarout :

**«Mestr !»**

Stad a oa enni oc'h adwelout Jezuz !

Ha gwelout a raimp-ni anezhañ ivez ?

Ya, **pa 'z aimp d'ar Baradoz e welimp Jezuz** bev,  
gant e Gorf dasorc'het.


Evit mont d'ar Baradoz avat, e ranker **karout kalz Jezuz**,  
sentiñ outañ,  
ha **bezañ glan a galon**.

Goulennoù :

- Perak e ouele Mari-Madalen ?
- Petra he deus gwelet e diabarzh ar bez ? (*Daou ael*)
- Hag o treiñ he c'hein, piv he deus gwelet ?
- Penaos he deus anavezet e oa Jezuz ? (*Pa glevas anezhañ o tistagañ hec'h anv.*)
- Ha ni, gwelout a raimp Jezuz un deiz ?

**Pedomp :**

Ni ivez, Jezuz, ho  
kwelimp un deiz pa  
'zaimp d'ar  
Baradoz. Hor  
sikourit d'ho karout  
atav, rak c'hoant-  
bras hon eus da  
vont d'ar Baradoz  
ganeoc'h.



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Jezuz a zo aze.

Erwan : Ha gant Mari-Madalen emañ o komz.

## Kentel 40 DISKIBIEN EMMAUS

Davet ur gêr he anv Emmaus e oa daou geneil da Jezuz o vont.  
War an hent e kerzhent, teñval o fenn ganto.

Jezuz a oa marv a gomzent diwar e benn.

Ha setu un den war o lerc'h o tegouezhout ganto.

Ha hemañ a oa Jezuz e-unan !

An daou geneil avat ne oant ket evit e anaout.

O welout e oant melkoniet e lavaras Jezuz dezho :

***« Ret e oa d'ar C'hrist gouzañv ha mervel  
evit d'an dud mont d'ar Baradoz  
ha da Zoue pardonñ  
dezho o fec'hedoù !»***

Ouzh e selaou e verve o c'halon en o c'hreiz ha sederaat a raent.

Ha gouzout a rez perak ?

**Dre ma oa Jezuz ganto !**

**Eürus e vezer pa vezer gant Jezuz.**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Madelezhus eo Jezuz.** Pa c'houlenn digantañ e ziskibien chom ganto, e ra.

Emzalc'h :

Evel an diskibien a glaske Jezuz, NI IVEZ A GLASK ANEZHAÑ. Fellout a ra deomp e gavout, E ANAVEZOUT gwelloc'h-gwellañ, ha dreist-holl e fell deomp bezañ gantañ da viken.



Kuzulioù :

Klask reiñ buhez d'an tamm aviel-mañ, a zo eeun-tre ha kaer-tre a ziskouez Jezuz gant daou waz, mignoned dezhañ.

Jezuz, dre ma 'z eo Doue n'helle ket mervel da viken : laouen bras e vez pa vez gant ar re a gar anezhañ hag a zo ouzh e glask.

Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz a zo er c'hreiz.

Erwan : Daou waz 'zo, ur vazh 'zo gant unan anezho.

Mamm : Ya, met it ne ouzont ket c'hoazh ez eo Jezuz eo a zo ganto.

## DISKIBIEN EMMAUS (kendalc'h)

Da serr-noz edont en Emmaus.

**«Chom ganeomp»** eme an daou ziskibl.

Ganto e chomas Jezuz hag int ouzh taol.

Neuze Jezuz a gemeras bara, e vennigas hag hen rannas  
hag hen roas d'an daou ziskibl.

E anaout a rejont neuze : Jezuz eo !

An hini a gredent e oa marv a welent bev.

Eñ avat a guzhas diouto, hag int ha distreiñ da Jeruzalem :

**« Jezuz hon eus gwelet ! »** emezo.

Ni ivez a c'hall lavarout : **« Chomit ganeomp Aotrou ! »**

Ret eo deomp derc'hel hon ene glan, avat,  
evit da Jezuz chom ganeomp.

### Goulennoù :

- Da belec'h edo o vont an daou vignon-se da Jezuz ?

- Perak e oant ken trist ? Eus petra e oa kaoz kenetrezo ?

- Kontañ ar pezh a zo c'hoarvezet (*un den en deus en em gavet ganto, hag a gomzas ganto war an hent*).

- Anavezet o deus Jezuz ?

- Petra a lavare Jezuz dezho ? (*E oa ret-mat e varvfe ar Mesiaz ouzh ar groaz evit salviñ an holl dud*)

- Ha pa zegouezhjont e Emmaus o deus kimiadet ?

- Kontañ penaos o deus komprenet e oa Jezuz ? (*P'en deus rannet ar bara goude bezañ benniget anezhañ*)

- Ha goude ar pred, da belec'h eo aet diskibien Jezuz ? (*Da Jeruzalem ez int distroet da gas ar c'heloù d'an diskibien all*)



**Pedomp :**  
**Chomit ganin**  
**aotrou, me ho ped.**  
**Grit ma n'ho kasin**  
**ket kuit diouzh va**  
**c'halon dre ober**  
**pec'hedoù.**

Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Jezuz a zo ouzh taol gant e zaou ziskibl.

Erwan : Savet eo o daouarn ganto...

Mamm : Emaint oc'h anavezout ez eo Jezuz.

## Kentel 41 JEZUZ EN EM ZISKOUEZ D'AN EBESTEL (Tomaz ne oa ket ganto)

Goude dasorc'h Jezuz edo an ebestel holl en ur sal vras, serret an dorioù warno.

Hep digeriñ an nor, e voe Jezuz en o c'hreiz !

**«Ar peoc'h ra vo ganeoc'h !»** emezañ.

Pegen brav e oa d'an ebestel adwelout Jezuz !

Rak eñ a oa e gwirionez dirazo.

Hogen Tomaz, unan eus an ebestel, ne oa ket ganto.

Pa zeuas en-dro e lavaras ar re all dezhañ :

**«An Aotrou hon eus gwelet,  
gwir eo : bev eo, dasorc'het eo !»**

Diskredik, ne gred ket Tomaz :

*«N'hell ket bezañ, ne gredan ket ac'hanoc'h,  
ma ne welan ket an tachoù en e zaouarn hag en e dreid  
ne gredin ket.»*

Gwirioneziou da c'houzout :

P'en deus lavaret Jezuz  
**«Eürus ar re o deus kredet  
hep gwelout»** e talvez en  
deus soñjet ennomp, e pep  
hini ac'hanomp, a **gred hep  
e welout.**

Emzalc'h :

GOULENN donezon ar  
Feiz 'zo d'ober. Skoazell an  
Aotrou 'zo ezhomm evit  
krediñ. «Aotrou Jezuz, va  
sikourit, me ho ped, da  
grediñ ennoc'h e pep amzer,  
zoken pa ne welan ket ha pa  
ne gomprenan ket».



### Kuzulioù :

Skeudenn gentañ : Displegañ d'ar bugel ne dalvez ket emzalc'h Tomaz ne grede ket, met kentoc'h e c'houlenne prouennoù. Gant madelezh e roas Jezuz anezho da Domaz oc'h en em ziskouez dezhañ.

Eil skeudenn, pajenn da heul : Tu 'zo da c'hoari» pezh gant ar vugale. Deskiñ dezho pedenn sant Tomaz : «Va Aotrou ha va Doue !». Lavarout a raint ar bedenn-se en o c'halonoù da vare ar Gorreoù e-pad an Oferenn, pa zikenn Jezuz en ostiv kensakret



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Aze emañ Jezuz.

Erwan : Gant an ebestel emañ.

Mamm : Ya, alies eo deuet Jezuz da welout e ebestel goude e zasorc'hidigezh.

## JEZUZ EN EM ZISKOUEZ D'AN EBESTEL (Tomaz a oa ganto)

Eizh dezi war-lerc'h, edo adarre an ebestel er sal, ha Tomaz a oa ganto.  
Jezuz a zeuas tre, an dorioù kloz.

**« Ar peoc'h ra vo ganeoc'h ! »** emezañ.

Ha da c'houde e lavaras da Domaz :

**« Tomaz, sell va daouarn ha va zreid...  
Laka da viz e toulloù graet gant an tachou. »**

Skoet neuze e kouezhas Tomaz d'an daoulin da lavarout :

**« Va Aotrou ha va Doue.»**

evel pa lavarfe « Me 'gred ez oc'h dasorc'het e gwirionez,  
sur eo din ez oc'h Mab Doue !»

Respont a reas Jezuz dezhañ :

**« Dre m'ac'h eus gwelet ,Tomaz, e kredez.  
Gwelloc'h eo krediñ hep gwelout.»**

En Oferenn, pa welomp an ostiv, ne welomp ket Jezuz a zo en ostiv,  
gouzout a reomp emañ eno avat. Evel Tomaz e c'hellomp lavarout :

**« Va Aotrou ha va Doue !»**

### Goulennoù :

- Pelec'h e oa an ebestel pa 'n em gavas Jezuz ganto ?
- Petra a lavaras Jezuz dezho ?
- Pa zeuas Tomaz da noz, hag e kredas ar pezh a voe lavaret dezhañ ?
- Eizh deiz goude, petra a c'hoarvezas ?
- Petra a respontas Jezuz ?
- E-pad an Oferenn eo mat adlavarout lavarenn sant Tomaz : pegoulz ?  
(D'ar Gorreoù)

**Pedomp :**

**Va Aotrou ha va Doue, komzoù hoc'h Abostol sant Tomaz ouzh ho kwelout a lavaran deoc'h bremañ, peogwir e kredan ez oc'h bev ha tost din en Ostiv. Evel ur c'heneil ez oc'h en em ziskouezet d'an ebestel o doa ho tilezet e-kerz ho Pasion.**

**Grit din bezañ mat gant ar re a ra droug din.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Jezuz a welan.

Erwan : O ! Unan eus an ebestel a astenn e zorn, Tomaz eo marteze.

Mamm : Divinet mat peus. Tomaz eo, a wel ez eo bev Jezuz.

## Kentel 42 AN EIL PESKETAEREZH BURZHUDUS

D'un abardaez, Pêr, Tomaz, Jakez hag ebestel all a sav en o bag hag a ya da besketa war al lenn.

A-hed an noz e taolont o roued, met ne dapont pesk ebet.

Ne dapont netra, netra ebet !

Mintin abred, setu Jezuz war an aod.

An ebestel ne welont ket e oa eñ.

Krial a ra dezho :

**«Mignoned, peadra hoc'h eus da zebriñ ?»**

Hag an ebestel, trist-tre, da respont :

**«N'hon eus ket !»**

Neuze e lavar Jezuz dezho :

**«Taolit ho rouedoù war an tu dehou !»**

Hag an ebestel, daoust ma oant skuizh, ne vreutaont ket.

Diouzhtu-dak e sentont war ar ger o teurel o roued.

Kement-ha-kement a besked a zo ma n'hellont ket sachañ ar roued er vag, pa oa re bounner !

Pa wel Yann ar burzhud-se e kri da Bêr : **«Jezuz eo !»**

Kerkent en em daol Pêr en dour hag e neuï ar buanañ ma c'hell d'en em gavout gantañ.

**Gwelout a reomp pegen karet e oa Jezuz gant sant Pêr !**

Gwirionezioù da c'houzout :

En em ziskouezet e oa an Aotrou Jezuz d'e ebestel. Alies en doa diskouezet dezho prouennoù ez eo Doue.

Eñ hag a oa marv, ha setu eñ bev. Gourc'hemenn a ra d'ar pesked : pesketaet o deus 153 pesk (Yann 21, 4).

Ha **Jezuz-Doue, eñ hag a zo savet da vev**, a zo en em izelaet betek prientiñ e-unan ar pred evit e ebestel, war an aod. Na **madelezhus eo Jezuz !**

Ha Jezuz a c'houlenn ouzh Pêr daoust hag eñ e kare anezhañ. Fellout a ra dezhañ e glevout o lavarout an dra-se.

Emzalc'h :

AKT A FEIZ e hollc'halloudegezh an Jezuz-Doue. Evel sant Pêr, lavaromp da Jezuz, **a oar pep tra**, e karfemp E GAROUT kalz atav.

### Kuzulioù :

Ar skeudenn-mañ a blij d'ar vugale, kenañ. Tenn eo al labour, hogen Jezuz eo a zigoll.

An eil skeudenn eus ar gentel a ziskouez ez eo ar sentidigezh prim ur merk anat eus hor c'harantez evit an Aotrou Doue.

Pouezañ war tristedigezh Pêr, en deus soñj en doa renaviet Jezuz dre deir gwech. P'en doa goulennet Jezuz evit an trede gwech en doa soñjet ez arvare Jezuz war e garantez evitañ. E gwirionez e oa evit amprouiñ e feiz, resev e bromesa hag ober anezhañ penn an esbestel.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : O, ur vag...

Erwan : O pesketa emañ an ebestel.

Mamm : Ya ur pesketaerezh dreist-par, burzhudus !

## AN EIL PESKETAEREZH BURZHUDUS (kendalc'h)

D'an aod e tistroas an ebestel all gant ar vag.

Saludiñ a rejont Jezuz, kontañ ar pesked.

Kant tri fesk hag hanter-kant a oa ! Kalz eo !

En ur c'hortoz anezho en doa Jezuz graet tan  
evit poazhañ ar pesked.

An ebestel a zebras ar pred a oa bet aozet gant Jezuz.

Goude ar pred, e c'houlennas Jezuz ouzh Pêr :

**«Pêr, va c'harout a rez ?»**

Pêr a respontas :

**«Aotrou, gouzout mat a rit ho karan.»**

Un eil gwech e c'houlennas Jezuz outañ :

**«Pêr, va c'harout a rez ?»**

Ha Pêr a respontas heñvel.

Hag un trede gwech e c'houlennas Jezuz outañ adarre :

**«Pêr, va c'harout a rez ?»**

Neuze e respontas Pêr, a-greiz e galon :

**«Aotrou, gouzout a rit pep tra, gouzout a rit mat ho karan.»**

Jezuz a lavaras neuze dezhañ : **«Bez Pastor va deñved.»**

Ar pezh a dalvez da lavarout :

**«Bez e vi e penn an ebestel hag an holl dud a gredo ennon.»**

### Goulennoù :

- Daoust hag eñ o doa tapet an ebestel pesked e-pad an noz ?

- Piv a oa war vord an aod ?

- Petra en doa goulennet Jezuz outo ? (*M'o doa peadra da zebriñ*)

- Ha petra o dao respontet ?

- Kontañ ar pezh a oa degouezhet neuze. (*Lavaret en doa dezho teurel o roued a-zehou hag e tapjont e-leizh a besked*)

- Pet pesk a oa ?

- Perak en doa Pêr en em daolet buan en dour ? (*Evit en em gavout buan gant Jezuz*)

- Petra en deus goulennet Jezuz ouzh Pêr ? Ha perak teir gwech ?

- Petra a dalvez 'Bez Pastor va deñved' ?



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Ur vag all 'zo.

Erwan : Ha Jezuz a zo aze war an draezhenn.

Mamm : Ya, emañ Jezuz a gomz gant Pêr hag e lavar dezhañ : «Ar penn e vi».

**Pedomp :**

**Aotrou, gouzout a rit pep tra. Gouzout a rit ho karan.**

## Kentel 43 AR BIGNIDIGEZH : AR YAOU-BASK

Meur a wech en doa Jezuz lavaret d'e ebestel :

**« Da aozañ plas deoc'h e tistroin d'an Neñvoù  
ha va Zad ha Me a zegaso deoc'h ar SPERED GLAN  
Gantañ e komprenot gwelloc'h  
ar pezh am eus lavaret deoc'h,  
ha kalonek e viot. »**

Neuze Jezuz a zegasas gantañ an ebestel hag an diskibien  
war ur menez e-kichen Jeruzalem.

O bennigañ a reas hag e savas davet an Neñvoù.

Ur goabrenn e guzhas diouzh o daoulagad  
ha n'hen gweljont ket ken !

**Savet e oa Jezuz d'an Neñv, gouel ar Yaou-Bask eo.**

Aet eo Jezuz en-dro gant e Dad,  
azezet eo a-zehou dezhañ  
hag emañ ouzh hor gortoz !

Gwirionezioù da c'houzout :

**D'an Neñvoù ez eo pignet  
Jezuz en-dro gant gloar  
gant e Gorf dasorc'het.**  
Jezuz-den ne c'houzañv ket  
mui, echu eo e Basion, ne  
chom nemet gloar e  
Zasorc'hidigezh hag e  
Bignidigezh. An dra-se ne  
vir ket outañ da soursial  
ouzh pep den : chom a ra en  
hor c'halonoù dre a  
Eukaristiezh hag ar  
gomunion.

Emzalc'h :

LEVENEZ o c'houzout  
emañ Jezuz eürus en  
Neñvoù a viskoazh ha da  
viken.

TRUGAREKAAT : gant  
istor ar Silvidigezh eo  
digoret deomp an Neñvoù,  
ur plas en deus kempennet  
eno evit hon hon degemer.



### Kuzulioù :

Skeudenn gentañ : Er gentel-mañ hon eus ar pezh a rank bezañ mammenn buhez diabarzh ar buhez. Hor gortoz a ra Jezuz en tabernakl, hag en Neñvoù goude.

Mat eo ober e vad eus ar gentel-se evit ober un dro d'an iliz-parrez, evit adlavarout ar pezh a zo bet lavaret dija : Jezuz n'hen gweler ket hogen krediñ a reomp emañ en tabernakl hag e c'hortoz ac'hanomp en Neñvoù.

Eil skeudenn : div lodenn 'zo, ar Bignidigezh hag an Oferenn. Savet eo Jezuz d'an Neñvoù hogen ne fell ket dezhañ e tiouerfemp e vezañs, setu aze perak ez eo bezant en ostiv kensakret a vez miret en tabernakl.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : O ! Sell 'ta ! Emañ korf Jezuz en aer !

Erwan : Hag an dud a seblant estlammet o sellout.

Mamm : Ya, emañ Jezuz o tistreiñ d'an Neñvoù. Deiz ar bignidigezh eo, Yaou-Bas.

## AR BIGNIDIGEZH : AR YAOU-BASK (kendalc'h)

Souezhet, sebezet, e chome keneiled Jezuz eno, o sellout ouzh an oabl. Daou ael en em ziskouezas neuze.

**« Perak e chomit o sellout ouzh a oabl ?**

***Jezuz, hoc'h eus gwelet o sevel d'an Neñvoù,  
a zeuio en-dro en hevelep doare.»***

Pegoulz ? E fin ar bed.

Laouen eo keneiled Jezuz pa ziskennont eus ar Menez rak gouzout a reont emañ Jezuz o c'hortoz anezho er Baradoz.

Ur plas a vo evito, holl gwitibunan, er Baradoz.

En Neñvoù emañ Jezuz gant e ene hag e gorf.

Petra en deus graet avat evit chom ganeomp evelkent ?

**Ostiv eo en em c'hraet !** Pebezh ijinadenn dispar eus e berzh !

En Oferenn e sav ar beleg Jezuz-ostiv d'ar Gorreoù

hag e lavaromp gant sant Tomaz : **«Va Aotrou ha va Doue !»**

War-lerc'h an Oferenn, pelec'h emañ Jezuz-Ostiv ?

En iliz-parrez emañ, en armel-sakr, a vez anvet an tabernakl.

Eo e c'hallomp dont da gomz outañ da c'hortoz mont d'e welout

er Baradoz da viken.

Goulennoù :

- Petra a lavaras Jezuz d'e ebestel a-raok mont d'an Neñvoù ?

- Pelec'h e oa aet Jezuz gant e ebestel ?

- Penaos e vez anvet an deiz ma savas Jezuz d'an Neñvoù ? Peseurt ger a reer gantañ c'hoazh evit ar gouel-se ?

- Perak ez eo Jezuz savet d'an Neñvoù ? (*Evit degas deomp ar Spered Glan hag aozañ ur plas deomp gantañ hag e Dad*)

- Ha dont a raio Jezuz en-dro ?

- Petra en deus graet Jezuz evit chom ganeomp ?

- Pegoulz en em ra Jezuz ostiv en Oferenn ?

**Pedomp :**

**Jezuz, ha c’hwi o  
kuitaat an Douar, e  
rit din c’hoantaat  
an Neñvoù.**

**Gouzout a ran  
n’emaoc’h ket en  
oabl met er  
Garantez en  
Neñvoù gant an Tad  
hag ar Spered Glan.  
Degasit me ho ped  
hevelep Karantez e  
kalon an dud, dezho  
d’en em garout war  
an Douar evel en  
Neñv.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Jezuz a sav d’an Neñvoù.

Erwan : !hag aze e-kichen ez eo mare ar Gorreoù : an Oferenn.

Mamm : Ya, savet eo en-dro Jezuz d’an Neñvoù, hogen en Ostiv en deus lavaret e chomfe ganeomp. E Neñvoù ha war an Douar emañ.

## Kentel 44 AR PANTEKOST

Savet eo Jezuz d'an Neñvoù.

**Eno e veilh ouzhomp hag e c'hortoz ac'hanomp.**

Adkavet en deus e Dad hag ar Spered Santel.

A-raok dezhañ sevel d'an Neñvoù e doa lavaret Jezuz d'an ebestel  
e rankent chom e Jeruzalem  
betek ma vefe kaset dezho ar Spered Santel.

Neuze e chomas an ebestel e Jeruzalem, sentet o deus.  
Ha dre m'eo devoa aon rak an dud drouk o doa lakaet Jezuz  
ouzh ar Groaz, n'en em ziskouezjont ket.

Chom a reont en o zi, gant ar Werc'hez Vari.  
Hag e pedont Jezuz a-un galon.

Lavarout a reont dezhañ :  
**«Kasit deomp ar Spered Santel.»**

Met ur spered n'hen gweler ket.  
Penaos 'ta e welo an ebestel ar Spered Santel o tont enno ?

Gwirionezioù da c'houzout :

**Prometet en doa Jezuz kas e spered Santel** evit ma vefe kreñv an ebestel evit bezañ testoù anezhañ dre holl dre ar bed. « *Resev a reot nerzh ar Spered Santel o tiskenn warnoc'h, hag e vezot testoù din e Jeruzalem, e Judea a-bezh, hag e Samaria, ha betek penn pellañ an douar*». (Oberoù an ebestel 1, 8)

Emzalc'h :

Evit mont betek penn an hent a gas d'an Neñvoù eo ret **BEZAÑ KADARN** : kreñv ha kalonek. Setu aze perak e **PEDOMP AR SPERED SANTEL**.

### Kuzulioù:

Tu 'zo da gomz diwar-benn ar bedenn en degouezh-mañ. Gwelout emañ ar werc'hez e kreiz pedenn an Iliz. Hi a oar pediñ he mab ar gwellañ. Roll ar spered Santel a zo abouez bras. Eñ eo a ro lusk d'an Iliz. Anv a zo bet anezhañ er gentel 2» war ar Vadeziant.

Dija e c'heller deskiñ ober sin ar Groaz, gorrek-tre. E dibenn Sin ar Groaz, p'en em gav ar bugel gant «...hag ar Spered Santel...», lakaat ar bugel dan hevelep Spered Santel a oa deuet da zeiz ar Pantekost war an ebestel.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Ar werc'hez Vari a welan, azezet er c'hreiz.

Erwan : An ebestel a zo en-dro dezhi.

Mamm : Pediñ a-gevret a reont.

## AR PANTEKOST (kendalc'h)

Ar Spered Santel (pe : ar Spered Glan) n'en deus korf ebet.

Dindan stumm flammennoù bihan eo en em ziskouezet  
a-us da bennoù an ebestel hag ar Werc'hez Vari  
ez int aet, evit mont en o eneoù.

**Ar PANTEKOST eo,  
ur gouel bras eo en Iliz.**

N'o deus ket padet pell ar flammennoù,  
met ar Spered Santel a zo chomet, 'eo ket aet kuit.

**Chomet eo e eneoù an ebestel.**

Dezho en deus roet da gompren  
**holl ar pezh en doa lavaret Jezuz.**

Ivez, e ro ar Spered Santel nerzh da vezañ **kreñv ha kalonek-tre.**

Raktal eo steuziet an aon o devoa ouzh enebourien Jezuz.

Leun ez int gant al levenez. Mont a reont er(maez eus o zi  
**evit komz eus Jezuz** d'an dud a zo e Jeruzalem.

**Ar Spered Santel eo a heñch anezho, hag o laka en o spered ar  
pezh a zo da lavarout ha da ober evit gounid an dud da Jezuz.**

### Goulennoù :

- Petra en doa prometet Jezuz  
d'an ebestel a-raok dezhañ  
mont d'an Neñvoù ? (*promete  
en doa kas ar Spered Santel*)

- Pelec'h e oa bodet an  
ebestel ?

- Piv a oa ganto ?

- Penaos o deus gouezet an  
ebestel e oa ar spered Santel o  
tont enno.

- Ha chomet eo ar spered  
Santel pa ne oa mui  
flammenn ebet ? (*Ya, chomet  
eo en o eneoù*)

- Petra en deus graet ar spered  
Santel e eneoù an ebestel ?  
(*Deuet int a-greiz holl da  
vezañ kreñv ha kalonek*)

- Aon o doa c'hoazh rak  
enebourien Jezuz ? (*N'o doa  
ket, aet int er-maez da gomz  
eus Jezuz d'an holl dud eus  
Jeruzalem*)

- Petra eo anv an deiz-se ?



**Pedomp :**  
**Spered Santel, grit**  
**deomp kompren ar**  
**pezh en deus lavaret**  
**Jezuz, ha dreist-holl**  
**m’e garimp**  
**muioc’h-mui.**

Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : flammennoù a zo a us d’ar pennoù.

Erwan : Lod a astenn o divrec’h.

Mamm : Emañ ar Spered Santel o tiskenn war an ebestel hag ar Werc’hez Vari.

## Kentel 45 AN EBESTEL A GOMZ EUS JEZUZ HAG A RA BURZHUDOÙ

Goude ar Pantekost, emañ **ar Spered Santel** e eneoù an ebestel.  
**Gantañ, e vo burzhudoù, evel da vare Jezuz !**

Ar Penn eo sant Pêr. En em lakaat a ra da brezeg diwar-benn Jezuz dirak an holl dud, daoust ma oa pesketaer lent ha dizek.  
Eus a bep lec'h e teuer da selaou,  
hag ur burzhud bras a c'hoarvezas :

Eno e oa tud eus holl broioù ar bed roman, estrenien, na gomzent ket holl yezh sant-Pêr ha Jezuz, an arameeg, a oa ur yezh dister e-keñver al latin, evel ar brezhoneg e-keñver ar yezhoù bras. **Ha setu ma kompren an holl, en o yezh-vamm, ar pezh a lavar sant Pêr ! Ur burzhud eo !**

Tri mil den a gredas ar pezh a zisplegas sant Pêr dezho :  
**ez eo marvet Jezuz evit daspren hor pec'hedoù  
hag ez eo savet a varv da vev :  
Doue eo Jezuz, ha Doue 'zo Karantez !**

Neuze e c'houlennas digant an dud  
**diskouez keuz evit o fec'hedoù ha goulenn bezañ badezet.**

### Gwirionezioù da c'houzout :

Cheñchet o deus an ebestel a-drugarez d'ar Spered Santel. Aonik e oant ha deut int da vezañ kalonek. Testoù Hor salver Jezuz ez int deuet da vezañ.

### Emzalc'h :

Ni ivez hon eus ezhommm da vezañ kreñv ha kalonek. Ne garer ket an Aotrou Doue e gwirionez ma ne brouomp ket dezhañ E KAROMP ANEZHAÑ. Pediñ a reomp ar Spered Santel evit-se.



### Kuzulioù :

Merzherien eo an holl ebestel. Sant Pêr ha sant Andreu a zo bet staget ouzh ur groaz ; sant Paol a zo bet troc'het e benn dezhañ. Ar Spered Santel eo e deus roet kalon ha nerzh dezho da vont dre holl da gomz eus Jezuz ha da vervel evel testoù eus e garantez. Hep ar Spered Santel e oant aonik ha lent.

Degas da soñj d'ar bugel e c'halv ar spered Santel pa vez oc'h ober Sin ar Groaz. Dre ar vadeziant en deus resevet anezhañ, ha resev a raio donezonoù bras eus e berzh gant sakramant ar gouzoumenn.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Emañ a dud o selaou.

Erwan : Lavaret e vije ez eo Jezuz...

Mamm : N'hell ket bezañ, gouzout a rit ez eo distroet d'an Neñvoù. Sant Pêr an hini eo, emañ o komz d'an dud-se diwar-benn Jezuz.

## AN EBESTEL A GOMZ EUS JEZUZ HAG A RA BURZHUDOÙ (kendalc'h)

Un deiz edo Pêr ha Yann o vont en Templ.

Gwelout a rejont un den paour azezet war an douar.

Ne oa ket gouest da gerzhout rak **seizet e oa e c'har**.

O welout Pêr ha Yann e savas an den kamm e zorn  
da c'houlenn aluzon.

Pêr ha Yann ne oa arc'hant ebet ganto !

Neuze e tostaas Pêr outañ hag e lavaras dezhañ :

**«N'em eus gwenneg ebet,**

**met un dra bennak a brofin dit evelkent :**

**dre c'halloud Jezuz, sav ha kerzh !»**

Hag an den a sav en e sav : a-greiz-holl ez eo **pare e c'har klañv !**

**Ur burzhud eo, graet gant sant Pêr a-berzh Jezuz.**

Gant ar Spered Santel en o c'halonoù,

**an ebestel n'o devez aon ebet mui.**

Emaint o vont dre bevar c'horn ar bed da gomz eus Jezuz.

Meur a wech e vint toullbac'het, ha kannet gant tud drouk.

**Ha lazhet e vint, holl gwitibunan ganto !**

### Goulennoù :

- Ha komz a rae an hevelep yezh an dud a yae da Jeruzalem ?

- Neuze, penaos o deus gellet kompren ar pezh a lavare dezho an ebestel ?  
(*Ur burzhus eo*)

- Ha kalz a dud o deus kredet o c'homzoù ? (*Ya, tri mil den !*)

- Kontañ eil burzhud sant Pêr, p'en doa pareet an den kamm.

- Da bell e o aet an ebestel evit komz eus Jezuz ? (*Ya, d'an holl vroioù*)

**Pedomp :**

**Salver Jezuz, kaset  
deomp ar Spered  
Santel evit ma vimp  
kalonek ha ma  
n'hor bezo ket aon  
d'ho karout ha da  
sentiñ ouzhoc'h, ha  
pa vefe graet goap  
ouzhomp.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Sant Pêr eo an den a zo gant an den paour.

Erwan : Ur vranell 'zo gant an den, goulenn a ra skoazell.

Mamm : Un den kamm eo. Emañ sant Pêr o vont d'e bareañ.

## Kentel 46 GALVIDIGEZH AR BELEG

Hen gouzout a rez, distroet eo Jezuz d'an Neñvoù.

Evit kenderc'hel da c'hounid an dud da Zoue en doa  
karget ebestel da ober eveltañ, ha lazhet int bet.

Ha neuze, piv a gomzo eus Jezuz, hag a lavaro ar pezh  
a zo da ober evit mont d'ar Baradoz ?

**An eskibien eo a zo warlerc'hidi an ebestel.**

Ar veleien a sikour an eskibien.

Lavarout a reont deomp ar pezh a zo ret ober  
evit sentiñ da Zoue ha mont d'ar Baradoz.

Forzh piv a c'hell bezañ beleg ?

N'hell ket, ret eo bezañ dibabet gant Jezuz.

Ha pa c'halv Jezuz,

ez eo **er galon eo e vez klevet.**

Lavarout a ra d'an ebestel :

**« Deuit d'am heul. »**

Reiñ a ra deomp c'hoant kuitaat pep tra evit mont d'e heul.

N'eur ket rediet, nann. Ne ra ken 'met gortoz e lavarfemp :

**« Ya, Jezuz, fellout a ra din mont d'ho heul. »**

War ar skeudenn e weler un eskob azezet dirak an aoter ;

gervel ha bennigañ a ra ar re a fell dezho bezañ **beleien.**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Dibabet en deus dibabet ebestel** evit ma vo kendalc'het e labour war an douar. **C'hoazh e kendalc'h Jezuz da c'hervel e** veleien, a zo ebestel an amzer-vremañ. Int ivez a guita pep tra «evit heuliañ Jezuz» hag hon heñchañ d'an Neñvoù.

Emzalc'h :

Pedomp evit ma roio deomp an Aotrou Doue beleien atav ha m'o devo ar vugale a vez galvet gantañ kalon a-walc'h da respont «Ya !» d'e c'halvadenn.

Kuzulioù :

Kentañ skeudenn : amañ emaoimp gant ur c'hevrin bras, hini galvadenn Doue ouzh ar re a zibab e-unan da vezañ e veleien.

Ar c'halvadenn n'hell dont nemet eus Doue, hag e c'hell diwan diouzh ur c'hoant a vez lakaet Doue e-unan e kalon ar vugale, alies adalek o oad tenerañ...

Doujañ d'ar c'hoant-se a rank ar gerent. Egin ar c'halvidigezh eo. Pep tra a rankont ober, ha en em aberzhiñ o-unan zoken evit ma c'hellfe ar bugel he c'has da benn mat. Un enor bras eo a ra aze an Aotrou Doue dezho, un eienenn a c'hrasoù hag a levez don.

Eil skeudenn : N'o deus ket ar gerent, en o c'harg emaint, da resev evit o bugale ur gelennerzh na vije ket hervez kelennadurezh an Iliz katolik, ha pa vije roet gant katekizierien, ha beleien zoken.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : En un iliz emaomp aze.

Erwan : Gwazed a zo o tostaat, peb a gamz ganto.

Mamm : Ya, an eskob, a zo azezet, a zo o vont d'ober anezho beleien da Jezuz

## GALVIDIGEZH AR BELEG (kendalc'h)

Sur a-walc'h ec'h eus gwelet beleien dija  
o komz ouzh ur mikro en iliz.

Ret eo selaou anezho aketus.

Rak lavarout a reont deomp petra 'zo d'ober  
**evit sentiñ ouzh Doue ha mont d'ar Baradoz.**

Ar beleg a gomz deomp **evel m'en deus komzet Jezuz,**  
ha ret eo krediñ anezhañ  
**rak drezañ e komz Jezuz.**

War ar skeudenn emañ gant penn-kentañ an Oferenn :  
o paouez lenn an Aviel emañ ar beleg, hag e tispleg anezhañ.

En Aviel e kaver **holl danevelloù buhez Jezuz**  
**ha kement a lavare d'an engroez**  
**a veze selaouet gantañ.**

**Ar Werc'hez Vari, e vamm, a selaoue anezhañ.** Gouzout a rae  
pegen a-bouez eo komzoù Jezuz evit mont d'ar Baradoz  
ha gouzout a ra **hon eus ezhomm beleien**  
**evit komz deomp eus Jezuz.**

### Goulennoù :

- Bremañ m'eo marv an  
ebestel, piv a zo en o  
lec'h ? (*An ebestel hag  
ar veleien*)

- Hag e c'hell forzh piv  
bezañ beleg ?

- Penaos e ra Jezuz evit  
dibab beleien ?  
(*Lavarout a ra dezhañ en  
e galon : «Deus d'am  
heul.»*)

- Ha rediañ a ra Jezuz ?  
(*Ne rak ket, gortoz a ra  
ma vo respontet dezhañ :  
«Ya, Jezuz, fellout a ra  
din.»*)

- A-bouez eo selaou  
aketus ar veleien ?

- Perak ? (*Peogwir e  
lavaront deomp kement  
tra a zo da ober evit  
plijadur an Aotrou Doue  
ha mont d'ar Baradoz.*)

**Pedomp :**

**Itron Varia, Mamm ar C'hrist-beleg, Mamm beleien ar bed a-bezh, karout a rit kalz ar veleien, dre ma skeudennont ez-vev ho Mab-unganet.**

**Sikouret hoc'h eus Jezuz dre ho puhez a-bezh war an Douar.**

**Hoc'h aspediñ a reomp : pedit evit ar Veleien !**

**"Pedit an Tad a zo en Neñvoù evit ma kaso labourerien war e eost"  
(Mazh 9, 37).**

**Pedit evit m'hor bezo bepred beleien da reiñ deomp ar Sakramantoù, da zisplegañ deomp Keloù Mat ar C'hrist, ma teuimp da vezañ Gwir vugale da Zoue.**

**Gwerc'hez Vari, goulennit hoc'h-unan ar veleien hon eus ezhomm kement anezho, ha peogwir he deus ho kalon pep galloud warnañ, grit m'hor bezo, A Vari, beleien santel, ha sent war-un-dro. Amen.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Ar beleg a zo aze ouzh ar mikro.

Erwan : An dud a selaou anezhañ aketus.

## Kentel 47 AR BEDENN HAG AR SAKRAMANTOÙ

Petra 'ra ar beleg ? Un abostol eo. **Kelenn a ra evel ma rae Jezuz** war an douar, ha **reiñ ar sakramantoù**.

1- War-dro ar vugale vihan e ra, oc'h ober **skol-gatekiz** dezho ha deskiñ dezho karout hag anaout Jezuz.

2- **Ar Familhoù ez a da welout** hag o degemer a ra en iliz-parrez.

3- **Ar re glañv ez a da welout** en o zi. D'an ospital pe d'ar glinikenn ez a ivez d'o gwelout evit o frealziñ ha degas dezho Jezuz-Ostiv. Pa vezont klañv da vervel, e vezont prientet gant ar beleg evit **mont da welout an Aotrou Doue** en Neñvoù.

### **Keneil ar familh a-bezh eo ar beleg.**

War ar pevare skeudenn **emañ ar beleg o pediñ dirak an tabernakl**. Emzalc'h :

**Pediñ 'zo komz ouzh Doue**, soñjal ennañ, e garout evit ar pezh ez eo, evit ar pezh a ra : an Natur, ar bed-holl, an traoù a c'hoarvez en eneoù, ar burzhudoù...

**Pediñ 'zo ivez lavarout trugarez** dezhañ, goulenn e skoazell evit bezañ mat. Doue 'zo hon Tad hor c'har ; p'e bedomp e selaou ouzhomp, hag e fell dezhañ ivez ma selaouimp outañ pa gomz ouzhomp e sioulded hor c'halon.

Gwirionezioù da c'houzout :

Ober a ra ar beleg ar pezh a rae Jezuz e-pad e vuhez war an douar.

Ober a ra war-dro ar beorien, ar glañvourien. **En Oferenn e vez eno en anv Jezuz** evit treuzkemm ar bara en e gorf hag ar gwin en e wad.

TRUGAREKAAT : An Aotrou Doue a zo madelezhus, reiñ a ra deomp beleien evit hon heñchañ war-zu ar Baradoz. Pedomp evit ar veleien, ma vezint harpet gant an Aotrou Doue en o labour-beleg.



### Kuzulioù :

En hon amzer-ni, a zo danvezelour ha digristenaet, en deus kollet ar beleg ar plas a oa e hini gwechall en tiegezhioù. Peditañ 'zo ret, ha kinnig d'ar re all peditañ evitañ hag evit adunaniñ an tadoù hag ar veleien, a zo evel div golonenn ar gevredigezh.. Hep ar gerent, ar beleg n'hell netra. Hep skoazell ha kuzulioù ar beleg, n'hell ket ar gerent desevel o bugale.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Ur beleg a weler war an holl skeudennoù.

Erwan : War ar pevare skeudenn emañ o peditañ.

Mamm : Ya evel-se eo buhez ur beleg.

## AR BEDENN HAG AR SAKRAMANTOÙ (kendalc'h)

Petra 'ra c'hoazh ar beleg ?

Reiñ ar sakramantoù a ra.

1- **Oferenniñ** a ra ar beleg, n'eus nemetañ a c'hall hen ober.

Pa 'lavar war an Ostiv : «**Kement-mañ 'zo va C'horf**» emañ Jezuz kerkent en Ostiv.

Ne vije ket brav deomp ma n'ho dije ket a veleien :

ne vije oferenn ebet ken, ne vije ket Jezuz en tabernakl.

2- **Reiñ Jezuz-ostiv** a ra ar beleg d'ar vugale vihan a ra o Fask-kentañ, ha d'an holl dud dindan degemer Jezuz en o c'halon (Sakramant an Aoter)

3- **Pardoniñ ar pec'hedoù** a ra ar beleg a-berzh Jezuz pa 'z eer da gofes. (Sakramant an Adunaniñ pe ar Binijenn)

4- **Bennigañ a ra ar priedoù** ; eñ eo a vennig an tadoù hag ar mammoù a zimez dirak a c'houlenn skoazell an Aotrou Doue evit sevel o ziegezh (Sakramant ar Briedelezh)

Karout ar veleien a ranker, selaou anezho ha pediñ evito, ha goulenn digant Doue ma vo beleien atav.

### Goulennoù :

- Gouzout a rez ez eo ar beleg un abostol, ur mignon da Jezuz. Petra a ra ar beleg en e labour ? (*Katekizañ a ra, gweladenniñ a ra an tiegezhioù, ha pa vezer klañv da vervel e sikour da vont da welout an Aotrou Doue.*)

- Ha pediñ a ra ar beleg ivez ? (*Ya, dirak armel-sakr an tabernakl dreist-holl.*)

- Ha petra a ra ar beleg c'hoazh ? (*Lidañ a ra an Oferenn, pardoniñ a ra ar pec'hedoù, eurediñ a ra ar priedoù.*)

- Ha ret eo doujañ ha karout ar veleien ? (*Ya, ret eo goulenn digant an Aotrou Doue beleien santel ha niverus.*)

### Goulennoù :

-

**Pedomp :**

**Salver Jezuz,  
bennozh deoc'h da  
vezañ bet roet  
deomp beleien da  
labourat en hoc'h  
anv evit hon  
heñchañ war-zu ar  
Baradoz. Bennigit  
ho peleien, sikourit  
anezho. Grit m'ò  
c'haro ha m'ò  
selaouo an holl  
dud !**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : O ! Emañ ar beleg o reiñ ar gomuion !

Erwan : Aze emañ o kofes ur paotr.

Mamm : Ya, e plas hag en anv Jezuz emañ en ho touez

## Kentel 48 EN OFERENN EN EM UNANAN OUZH JEZUZ

Ur plac'h bihan a ro he arc'hant d'un den paour e-lec'h prenañ  
madigoù. Ar madigoù a blij dezhi koulskoude...

Laouen eo evelkent da ober ur sakrifiks **evit plijout da Jezuz.**

Daou baotr 'zo o c'hoari vell...

Gwenhael a garfe mont da c'hoari ganto.

**Evit plijout d'e vamm ha da Jezuz** avat,  
ez eo aet d'ober he prenaennoù.

A galon laouen ha **hep imoriñ e ra ur sakrifiks.**

Ha Jezuz, petra en deus mennet ober evidomp ?

**Reiñ e vuhez** en deus graet.

Asantet en deus bezañ staget ouzh ar groaz ;  
**ur sakrifiks bras en deus graet.**

War ar groaz, **e c'houlenne Jezuz pardon** evidomp,  
e kinnige e aberzh bras da Zoue evidomp  
da c'hallout mont d'an Neñvoù.

Bremañe ra heñvel. Bemdez, **en Oferenn**, evel gwechall  
war ar groaz, **e kinnig e aberzh da Zoue e Dad.**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Ouzh ar groaz en em ginnige Jezuz e sakrifiks d'e dad. Da geñver pep Oferenn hen gra anevéz.** En em unaniñ outañ a c'hellomp evit en em ginnig, ni ivez d'hon Tad a zo en Neñv : ur sakrifiks a garantez, dre ginnig hon holl buhez, hon oberoù, pergen ar poanioù a gorf pe a spered.

Emzalc'h :

AKT A GARITEZ : marvet eo Jezuz ouzh ar groaz dre garantez evit pep den. Fellout a ra deomp respont d'e garantez, fellout a ra deomp ober, ni ivez, ur sakrifiks da brouiñ hor c'harantez dezhañ. En em unaniñ a reomp outañ en ur ginnig anezho dezhañ.

Kuzulioù :

E kreiz hor relijion emañ an Oferenn. Dre zoareoù ar bugel eo e weler m'eo digor d'ar misterioù eus ar relijion : e evezh, e emzalc'h, e sioulder, e strivoù. Amañ e rank sellout aketus ouzh ar skeudenn : ne vo ket komzet, sellet e vo ouzh ar jestroù, selaouet e vo ar c'homzoù, en em unaniñ ouzh ar beleg evit azeuliñ ha karout.

Lakaat ar bugel da zivizout ober sakrifisoù bihan e-pad ar sizhun, evit m'en devo al levenez d'o c'hinnig da Jezuz pa zeuio d'an Oferenn.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Gwelout a ran ur plac'hig o reiñ un dra bennak d'un den kozh.

Erwan : E-kichen ez eus ur paotr o kas prenaennoù gantañ.

Mamm : Ya, o-daou a ra sakrifisoù bihan evit bezañ evel Jezuz, en deus graet ur sakrifis bras a garantez.

## EN OFERENN EN EM UNANAN OUZH JEZUZ (kendalc'h)

Goulennoù :

D'an Oferenn, da vare lid ar C'hinnig, e kinnig ar beleg da Zoue ar bara, a zeuio da vezañ

Korf Jezuz da vare lid ar C'hensakradur,  
pa lavaro ar beleg :

**«Kement-mañ a zo va C'horf».**

Hag en hevelep koulz e kinnig da Zoue, ouzhpenn e sakrifisoù -dezhañ, sakrifisoù an holl fideled a zo gantañ o pediñ, hag a lavar en o c'halonoù :

**«Ma Doue, sakrifisoù am eus graet ar sizhun-mañ,  
o c'hinnig a ran deoc'h.»**

Plijout a ra kenañ d'an Aotrou Doue  
ar sakrifisoù-se a vez kinniget  
da vare an Oferenn,

rak kinniget e vezont gant **hini e Vab Jezuz.**

Ar vugale a gar kalz Jezuz a vez alies troet da ober sakrifisoù bihan ha pa-z eont d'an Oferenn **d'ar Sul e roont anezho  
d'an Aotrou Doue, a-unan gant sakrifis Jezuz.**

- Petra eo 'ober sakrifisoù' ?  
- Petra eo sakrifis bras Jezuz ? (*E varv ouzh ar groaz evit ma c'hellimp mont d'ar Baradoz.*)

- Daoust hag eñ e kinnig c'hoazh Jezuz e sakrifis bras ? Penaos ? (*Bemdez e-pad an Oferenn e kinnig Jezuz, evidomp, e sakrifis da Zoue.*)

- D'an Oferenn, pa ginnig ar beleg da Zoue ar bara a zeuio da vezañ korf Jezuz, petra a ginnig war-un-dro ? (*Kinnig a ra e sakrifisoù-dezhañ, hag sakrifisoù an holl re a gemer perzh e Oferenn.*)

- Daoust hag eñ e plij hon holl sakrifisoù d'an Aotrou Doue ? (*Ya, rak Jezuz an hini eo o c'hinnig da Zoue gant e hini.*)

**Pedomp :**

**Salver Jezuz, ur  
sakrifis bras hoc'h  
eus graet evidon dre  
ma karit kalz  
ac'hanon. Me ivez e  
fell din ho karout  
kalz, ha peogwir ez  
eo mat ha ma plij  
deoc'h e rin  
hiviziken sakrifisoù  
bihan hag o  
c'hinnigin a-unan  
gant hoc'h hini, evit  
m'o c'hinnigot d'ho  
Tad eus an Neñv.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Gwelout a ran Jezuz o kensakrañ ar bara.

Erwan : An ebestel a zo en-dro da Jezuz oc'h en em unaniñ gantañ.

Mamm : Ya, evit en em unaniñ outañ e kinnigomp da Jezuz hor sakrifisoù bihan.

## Kentel 49 EN OFERENN E RESEVAN JEZUZ

E-doug an Oferenn e c'hellomp resev Jezuz en hor c'halon.

War an aoter emañ Jezuz-Ostiv,  
p'en deus lavaret ar beleg :

**«Kement-mañ a zo va C'horf»**

M'hon eus graet hor Pask kentañ  
e c'hellomp tostaat ouzh an aoter,  
ha neuze **e ro ar beleg Jezuz-Ostiv**  
**hag e teu Jezuz en hon ene.**

Pegoulz e c'hell ar vugaligoù resev Jezuz evel-se ?  
Adalek ar poent ma ouzont mat ez eo Jezuz  
an ostiv-vihan a vez kensakret e-pad an Oferenn.

Fellout a ra dezho plijout dezhañ dre o buhez  
hag o resev anezhañ en o ene.

Neuze ec'h aozont mat o c'halon evit ma vezo glan-mat.  
Evit-se e reont sakrifisoù bihan a ginnigont da Jezuz.  
Jezuz a zeuio hag a sikouro anezho da ober eveltañ.

Na pegen eürus e vimp da resev Jezuz ! Lavarout a raimp dezhañ  
e karomp anezhañ kalz, hag e fell deomp ober pep tra eveltañ.

Gwirionezioù da c'houzout :

Goude ar c'hensakradur,  
n'eo ket mui bara eo a zo  
etre daouarn ar beleg, bez  
ez eo Korf Jezuz e  
gwirionez. «*Ma ne zebrit  
ket eus ar bara-se, n'ho  
pezo ket ar vuhez ennoc'h.*»  
eme Jezuz.


Emzalc'h :

AZEULIÑ HA KAROUT.  
Respontomp da garantez  
Jezuz, en em ro deomp, ha  
lavaromp sklaer d'ar bugel  
al levenez vras en deus  
Jezuz pa ya en e ene.



**Pedomp :**

**O Jezuz, c'hoant am  
eus degemer  
ac'hanoc'h em  
c'halon, dre n'oc'h  
nemet karantez. Ret  
eo din dislabezañ  
va ene o kofes va  
fec'hedoù. Ivez, o  
rentañ sakrifisoù  
bihan e rin ar mad  
en-dro din,  
eveldoc'h.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Emañ poent ar Gorreoù en Oferenn : emañ ar beleg o tiskouez Jezuz-ostiv.

Erwan : Dindan e ro un ostiv kensakret da vugaligoù vihan.

Mamm : Ya, emaint oc'h ober o Fask kentañ.

## Kentel 52 AR PEC'HED

War ar skeudenn e c'haller gwelout Adam hag Eva bannet er-maez eus Baradoz an douar.

Disentet o doa ouzh Doue, **ur pec'hed bras o doa graet.**

An diaoul, e stumm un naer, en doa graet dezho disentiñ.

Goude-se o doa bet keuz d'o fec'hed

ha **pardon o doa goulennet** digant Doue.

Ha pec'hiñ a reomp-i ivez ?

Ya 'vat, **ken lies gwech ma selaouomp ouzh a diaoul**

ha ma reomp kement a zo fall.

War ar skeudenn e weler ur paotr bihan o winkal hag o selaou ouzh an diaoul e-lec'h ouzh e vamm.

Disentiñ 'zo ur pec'hed a ra poan da Zoue en ur stlabezañ hon ene.

Un akt a garantez market eo :

ober an droug pa c'helled ober ar vad.

Brasoc'h pec'hedoù a c'hallomp ober en ur c'houzout

ez eo fall un dra bennak hag ober memestra.

Mar dicheñs deomp mervel hep goulenn pardon

evit ur pec'hed bras, **n'omp ket evit mont d'ar Baradoz,**

**...hag en lfern e kouezhomp !**

Gwirioneziou da c'houzout :

Pa reomp pec'hedoù bras en em zisrannomp diouzh an Aotrou Doue.

Pa reomp ur pec'hed bihan ez eo teñvalaet hon ene, n'eo ket glan ken. Buhez an Aotrou Doue ennomp (da lavarout eo Gras Doue) n'eo ket ken oberiant.

**Dre sakramant ar Pardon pe an adunaniñ**, e vez diverket hor pec'hedoù, **hag e teu en-dro Gras Doue ennomp** ma oa kollet pe dinerzhet.

Emzalc'h :

GOULENN PARDON digant an Aotrou Doue evit hor pec'hedoù.

KAOUT FIZIAÑS EN AOTROU DOUE, a zo atav prest da bardoniñ deomp.

### Kuzulioù :

Skiant ar «Mad» hag ar «Fall» a zo da zeskiñ gant ar bugel adalek e oad tenerañ. E goustiañs a zo da stummañ eta. Diwar-benn ar pec'hed eo ret komz eta. Ur fazi bras e vije lezel ar bugel da grediñ e c'heller ober kement-tra a garer.

Adalek e vugaleaj e rank ar bugel gouzout eta ez eo an Aotrou Doue a ginnig dezhañ ober ar Mad, hag ez eo an Diaoul a sach anezhañ da ober ar pezh a zo fall : an Droug. Eno emañ dalc'h ar vuhez divezel evit ar c'hristen. Merket e vo e vuhez penn-da-benn gant ar stourm-se gant Doue hag a-enep an Droukspered.

Arabat krediñ e vo spontet. Ar gentel-mañ a rank reiñ kalon dezho evit respont c'hwek ha brokus da raktres an Aotrou Doue evit pep hini.

Ret e vo lavarout ivez dezhañ na ranker ket kaout aon ouzh Doue rak prest eo da bardoniñ bewech ma c'houlennomp digantañ gant ur galon eeun.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Adam hag Eva a guita Baradoz an Douar.

Erwan : Ur sarpant a gaver en div skeudenn.

Mamm : Ya, an droukspered eo en deus graet d'ar paotrig pec'hiñ.

## AR PEC'HED (kendalc'h)

«Nann !» en doa lavaret Nerin ouzh e vamm. Fall e oa bet !  
Da noz avat, en e gambr, e taoulinas **da c'houlenn**

**digarez digant Jezuz, en e galon.**

Neuze ez eas **da gaout e vamm da c'houlenn pardon diganti.**

**Pardoniñ a reas e vamm ha pokat dezhañ.**

Emberr ez aio da gofes. Anzav a raio ouzh ar beleg e bec'hedoù.

1. Klask a raio e bec'hedoù ;
2. Keuz dezho en devo ;
3. Goulenn a raio digarez ha pardon digant Doue ;
4. Ober a raio pinienn evito ha trugarekaat.
5. Klask a raio digoll a raio an dud o deus gouzañvet en abeg d'e bec'hedoù ;
6. Gouestlañ a raio poaniañ, gant gras Doue, da chom hep pec'hiñ ken.

Ar beleg neuze a raio **sin ar Groaz** warnañ  
evit pardoniñ dezhañ **a-berzh an Aotrou Doue.**

**Trugarez, va Doue, evit pardoniñ din pa vezan fall.**

### Goulennoù :

- Perak e oa bet kaset kuit Adam hag Eva diouzh Baradoz an Douar ? (*Dre 'o doa graet ur pec'hed grevus-kenañ*)

- Petra eo «ober ur pec'hed» ? (*Disentiñ ouzh an Aotrou Doue eo, mankout a garantez evitañ*)

- Pa reomp ur pec'hed e selaouomp an Diaoul, ha poaniet e vez an Aotrou Doue ? (*Ya, poaniet e vez. Saotrañ a ra hon ene ivez*)

- Petra 'zo d'ober evit ma teuio ho ene da vezañ glan a-nevez ? (*goulenn pardon a zo d'ober o vont da gofes*)

- Petra 'zo d'ober pa 'z aer da gofes ? (*Ret eo kaout keuz d'e bec'hedoù, da lavarout eo kaout glac'har en abeg dezho ha lavarout d'an Aotrou Doue dre ar beleg hor c'hoant gwirion da chom hep pec'hiñ ken*)

**Pedomp :**  
Hon Tad a zo en  
Neñv, madelezhus  
ez oc'h : me eo ar  
mab dispigner hiziv.  
Atav e pardonit  
deomp. Gouestlañ a  
ran kofes va  
fec'hedoù da  
c'houlenn ar  
pardon anezho.  
Mar kouezhan,  
va adsavit  
ha va skoazellit  
da chom hep  
pec'hiñ ken.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Emañ ar paotr war benn e zaoulin en e gambr.

Erwan : E-kichen ez eo aet da gaout e vamm.

Mamm : Ya, da gentañ e c'houlenn pardon digant Jezuz, ha goude digant e vamm.

## Kentel 53 D'AR BARADOZ E FELL DIN MONT

Tro hon eus bet da glevout komz eus tud aet da Anaon.

Bez' ez eus marvet diwar ur gwallzarvoud,  
re all a oa klañv a zo aet da Anaon.

Petra eo mont da Anaon ?

Pa vez marvet unan bennak, **ez a an ene digant e gorf.**  
Ne gomz ket ken, ne fiñv ket ken,  
**e gorf a vez beziet.**

Pa 'z a an ene digant ar c'horf,  
e wel Doue ar pezh a vad hag a fall en deus graet :  
**e varn a ra.**

Mar en deus karet bras an Aotrou doue, ez eo kaer ha glan holl,  
ha **Doue e zegemer diouzhtu en Neñvoù,**  
el lec'h m'emañ ar Werc'hez Vari,  
an aelez hag ar sent.

Erru en Neñvoù, e ti an Aotrou Doue, e chomer ennañ da viken.

Eno ez adkaver ar re o deus karet Doue p'edont  
war an Douar, hag **holl a-gevret,**  
**gant an Aotrou Doue,**  
**e vezer eürus DA VIKEN.**

Gwirionezioù da c'houzout :

**Goude ar marv e vez barnet an  
eneoù gant an Aotrou Doue.**

Ma vez kavet gantañ er stad a  
C'hras, e tegemer anezhañ war-  
eeun e e Varadoz el levezeg  
peurbadus.. Ma vez kavet gantañ  
er stad a c'hras hogen gant  
pec'hedoù n'int ket grevus, ez a  
an ene d'en em c'hlanaat er  
Purgator a-raok mont d'ar  
Baradoz da viken.

Ha ma vez kavet gantañ er stad a  
bec'hed marvel, hep bezañ bet  
goulennet e bardon digant an  
Aotrou Doue, neuze en em  
gondaon d'an ifern peurbadus.

**E dibenn ar bed-mañ e  
tasorc'ho ar c'horfoù hag e vint  
adunanet ouzh an eneoù.**

Emzalc'h :

C4HOANTAAT mont d'ar  
Baradoz evit bezañ unanet da  
viken ouzh an aotrou Doue.  
PEDIÑ evit ar re a zo er Purgator.

Kuzulioù :

Ar marv a zo, evit ur bugel,  
un dra a zo diaes-mat da  
empentiñ.

Mat e vo adwelout ar gentel  
6 war ar c'horf hag an ene.

Ar pep retañ da c'houzout  
d'an aod-se eo degas en-dro  
da soñj e oar pep tra an  
Aotrou Doue, gouzout a ra  
pep tra hag e paeo goude ar  
marv ar re o devo e garet hag  
o devo graet ar mad. Ar re o  
devo graet an droug a vo  
kastizet gantañ avat.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : Amañ ez eo an Aotrou Doue gant an Aelez.

Erwan : A-dreñv dezho emañ ar Sent : n'int ket bet treset gant eskell.

Mamm : Ya : ar sent a zo er Baradoz gant an Aotrou Doue hag an Aelez.

## D'AR BARADOZ E FELL DIN MONT (kendalc'h)

Ar braz eus an eneoù ne vezont ket kaer-holl,  
**peogwir o deus graet pec'hedoù bihan.**

**Da belec'h ez eont ?**

D'ar **Purgator** ez a ar re-mañ.

Ar Purgator 'zo ul lec'h ma vezer glac'haret  
peogwir ne weler ket Doue.

Gouzañv a reer ennañ evit dont da vezañ glan-holl.

Pa vez deuet kaer-holl, ez a an ene d'an Neñvoù.

**Ret eo pediñ alies** evit an eneoù kaezh-mañ,  
ma c'hallint mont buan d'an Neñvoù.

**D'an Ifern** ez a an eneoù sammet gant pec'hedoù bras-tre.

Eno e vezer glac'haret-bras, peogwir ne weler ket Doue ;  
eno e c'houzañver hag e chomer da viken.

**Na trist eo chom hep karout an Aotrou Doue !**

Goulennoù :

- Petra eo «mont da Anaon» ? (*an ene a ya kuit hag ar c'horf ne fiñv mui*)

- Da belec'h ez a hon ene mar en deus karet bras an Aotrou Doue ? (*d'ar baradoz, d'ar Purgator pe d'an Ifern*)

- Petra eo ar Purgator ?

- Ha chom a reer enno da viken ?

- Petra eo an Ifern ?

- Ha chom a reer enno da viken ?

- Petra a zo d'ober evit mont gant an Aotrou Doue ? (*Ret eo karout kalz an aotrou Doue ha mirout naet e ene*)

- Hag eürus e vezimp er Baradoz ?





**Pedomp :**

**Va Doue,  
va sikourit da vezañ  
ur paotr/plac'h mat,  
hegarat ha mat gant  
an holl. Evel-se ez in  
d'an Neñvoù er  
Baradoz.**

**Va Doue, kemerit  
buan ganeoc'h er  
Baradoz an eneoù a  
zo er Baradoz.**

**Sellomp ouzh ar skeudenn**

**Onenn : Ar Baradoz a welan, en Neñvoù.**

**Erwan : Hag en traoñ e welan diaouloù en Ifern.**

**Mamm : E-kreiz ez eo ar Purgator.**

## Kentel 54 AR PEZH A VO ER BARADOZ

Sellomp ar pezh a c'hoarvezo e fin ar bed-holl

Evel ma 'z eo dasorc'het Jezuz, e deiz Pask,  
e tasorc'himp ivez.

**An Aotrou Doue a adunano hon ene ouzh hor c'horf,  
ur c'horf-klod ha leun a c'houlou,**

Jezuz a zo en Neñvoù a zeuio en-dro war an Douar ;barn a raio  
ar bed ha lavarout d'ar re vat :

**« Deuit ganin, re venniget va Zad !»**  
ha d'ar re fall : **« It d'an tan peurbadel! »**

Neuze ez aimp d'an Neñvoù gant hor c'horf,  
tra ma 'z aio ar re fall d'an lfern gant o c'horf ivez.

E-keit ma 'z omp war an Douar,  
karomp bras Jezuz ha plijomp dezhañ.

Mennout a ra ma vo bodet er Baradoz gantañ e holl vugale  
eus an douar : ar re zu, ar re wenn, ar re velen, ar re binvidik  
hag ar re baour, en e c'houlou dispar evit **bezañ eürus DA VIKEN.**

Gwirionezioù da c'houzout :

Ar feiz en Dasorc'hidigezh a zo e diazez an esperañs hon eus da gaout ur plas en Neñvoù, prientet gant Jezuz. Hep ar wirionez-se ez eo aner hor feiz.

Emzalc'h :

KREDIÑ 'zo fiziañ ouzh karantez Jezuz Gwir Doue ha Gwir Den. «Kred e Jezuz hag e vi salvet», eme sant Paol (Ob. 16, 31).

### Kuzulioù :

Evit prientiñ hor Baradoz eo emañ war an Douar gant an Iliz. A-bouez eo komz eus an Iliz d'ar vugale, eus ar Pab a zo e garg skeudenniñ Jezuz war an Douar. Anvet e vez «Hon Tad Santel» ganeomp. Ret eo e garout ha sentiñ outañ pa gomz a-ziwar Kador Sant Pêr, rak neuze ez vez difazi. Peditiñ a ranker kalz evitañ rak ur garg pounner-tre a zo war e zivskoaz.

Dizale e vo mare an ehanou-skol, ar Vakañsoù. Kasit ganeoc'h al lev-mañ a garont rak gantañ o deus desket ar pep retañ a zo da c'houzout evit ar vuhez : e follennata a raint gant plijadur.

Dreist-holl eo ret derc'hel d'ar boazioù pemdeziek : kinnig e zevezh e pennkentañ an devezh, ha d'ar bedenn-noz sellout ouzh an devezh da glask ar pezh a zo bet mat hag ar pezh a zo bet falloc'h pe drouk zoken, ha trugarekaat.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : O ! Gwelout a ran tud o sevel !

Erwan : Hag a gleiz ez eus re all e-barzh an tan o soublañ o fenn.

Mamm : Ya, pa vo diwezh ar bed, ez adkavimp hor c'horfoù hag ez aimp d'ar Baradoz, pe d'an Ifern.

## **Kentel 55 HOR MAMM EO AR WERC'HEZ VARI**

Ur vamm hon eus war an douar a bled ganeomp hag hor c'har e-leizh.

**Ur vamm all hon eus en Neñvoù** ho kar muioc'h c'hoazh : houmañ eo ar Werc'hez Vari.

An hini gaerañ eus an holl mammoù eo ar Werc'hez Vari.

Perak ? Peogwir ne reas biskoazh an disterañ pec'hed.

An den nemetañ eo n'en defe ket bet ar pec'hed orin,

soñj hon eus eus pec'hed Adam hag Eva, ar re o doa disentet  
diouzh an Aotrou Doue en ur selaou ouzh an diaoul.

Hollc'hlan eo kalon an Itron Varia ; biskoazh n'he deus selaouet  
ouzh an diaoul.

Perak ? Peogwir e oa lakaet da vezañ Mamm da Jezuz.

An Aotrou Doue a venne ma vefe Mamm e Vab Jezuz an hini  
gaerañ eus an holl mammoù.

Noz-deiz, bepred, e pled an Itron Varia ganeomp.

Hor gwelout a ra,

hor selaou a ra p'he fedomp,

hor skoazellañ a ra.

**Fellout a ra dezhi ma 'z afemp d'ar Baradoz ganti, e-kichen Jezuz.**

### Gwirionezioù da c'houzout :

Skouer ar gristenien eo ar  
werc'hez Vari. Hor c'harout  
a ra evel ur Vamm. Ne  
gomz ket kalz met bras-tre  
eo he c'halloud war galon  
Jezuz.

### Emzalc'h :

KAROUT ar Werc'hez ar  
Werc'hez Glorius Vari, hor  
Mamm eus an Neñvoù.

### Kuzulioù :

An deoliezh d'ar Werc'hez Vari a zo diaes da gaout er mareoù-mañ en abeg ma skeudenn uhelvennad ar vamm a diegezh sioul ha diglod.

Arvestiñ ouzh Mari a zo arvestiñ ouzh Doue a-dreuz ar pep kaerañ a zo bet krouet gantañ. N'eo ket hepken ar c'hrouadur kaerañ, bez ez eo ivez an hini a garas ar muiañ dre ma oa leun gant ar spered Santel. Hor mamm speredel ez eo, kalz tostoc'h hag evezhiek ouzhomp eget mammoù an douar. Evel ma-z eo an Aotrou Doue hor gwir dad peogwir en deus hor c'hrouet, ez eo Mari hor gwir Vamm dre m'hor ren war-zu Doue, hor genel a ra da Zoue.



### Sellomp ouzh ar skeudenn

**Onenn :** Ar Werc'hez a welan o sevel d'an Neñvoù.

**Erwan :** Hag ur vamm er skeudenn all o veilhañ war he babig.

**Mamm :** Ya, div vamm hon eus, unan war an douar, hag unan all en Neñvoù.

## HOR MAMM EO AR WERC'HEZ VARI (kendalc'h)

Dirak delwenn ar Werc'hez Vari emañ an tiegezh war o daoulin.

An holl a bed :

### **Bev eo an Itron Varia en Neñvoù.**

Hor gwelout a ra, hor selaou a ra, evel m'eo bet lavaret dija.

Pa 'z eo marvet ar Werc'hez vari, an Aotrou Doue en deus mennet  
ma vefe unanet hec'h ene gant he c'horf ha ma-z afe  
d'ar baradoz korf hag ene, evel he Mab Jezuz.

Setu perak emañ er Baradoz gant he c'horf hag hec'h ene.

Da zeiz Gouel Maria Hanter-Eost eo e savas d'an Neñvoù.

An Itron Varia eo he deus al lec'h kaerañ e-kichen Jezuz,  
peogwir ez eo Mamm da Zoue.

### **Kaeroc'h eget an aelez ez eo, Rouanez an Neñv eo.**

Ret eo karout kalz an Itron Varia hag he fediñ :  
hor skoazellañ a raio da garout he Mab  
hag e roio deomp **grasoù a-berzh Jezuz.**

Ur c'hras 'zo ur prof digant Jezuz **evit hor skoazellañ** da vezañ  
heñvel outañ, **da vezañ mat gant ar re all**  
evit mont d'ar Baradoz un deiz.

### Goulennoù :


- Piv eo ar Werc'hez Vari ? (*Mamm Jezuz war an douar eo, hor Mamm eus an Neñvoù eo*)
- Ha pec'het he deus ar werc'hez Vari ? (*N'he deus ket, biskoazh*)
- Ha beilhañ a ra warnomp ?
- Petra a fell dezhi ?

**Pedomp :**

**Jezuz, Mari ha  
Jozef, Tiegzh  
Santel Nazared,  
gwarezit va ziegzh,  
e lec'h m'eo bet  
fellet deoc'h reiñ ar  
vuhez din. Bennigit  
ac'hanomp.**

**Garanit ennon ur  
garantez tener ouzh  
ar Werc'hez Vari, a  
veilh warnomp eus  
an Neñvoù.**

**Drezi e resevomp  
grasoù kaer hor  
sikour da ober ar  
mad e pep  
degouezh.**



**Sellomp ouzh ar skeudenn**

Onenn : Un tiegzh eo a zo troet ouzh ur groaz a zo ouzh ar voger.

Erwan : E-kichen ar groaz emañ delwenn ar Werc'hez Vari.

Mamm : Ya, o pediñ emaint holl a-gevret.

## **Kentel 56 PEDENN AR CHAPELED**

E Neñvoù emañ ar Werc'hez Vari o tronañ,  
alies e teu d'en emziskouez war an douar.

**Santez Bernadeta e Lourdez** he deus gwelet ar Werc'hez Vari,  
hag **e-leizh a vugale all a zo bet brav dezho he gwelout hag he c'hlevout.**

**An Iliz he deus anavezet e-leizh a lec'hioù** m'eo c'hoarvezet kement-se :

e **Guadalupe** er Meksik,  
e **Saleta**, e gevred Frañs, en Izer,  
e **Fatima** en hanternoz ar Portugal,  
e **Pont-Maen** war harzoù Breizh ha bro Vaen (Laval),  
e **Kerien** e biz bro Loudieg (I.V. Wir-Sikour)...

E lec'hioù e-leizh e pevar c'horn Breizh e vez enoret a gozh dindan meur a anvad.

**Pardonioù bras a vez a-wechoù:**

er Folgoad, e Josilin, ar C'hastell-Nevez (ar Porzhoù), Lanmeur (Kernitron)...

**Ha chapelioù diniver** a varell douar Breizh evel hini Kerio e Noal-Muzilheg, gouestlet da  
**Rouanez an Arvor.**

Lavarout a ra deomp ar Werc'hez eo ret pediñ evit derc'hel unanet-mat ouzh Doue,  
sentiñ ouzh e c'hourc'hemennoù 'zo d'ober ivez, a lavar deomp.



**Gant ar chapeled eo aes  
pediñ. Gant hor Mamm  
eus an Neñvoù emamp.**

Gant pep dizenez e vez pedet  
war unan eus darvoudoù  
buhez Jezuz ha Mari.

**Da gentañ, ar Bater :**

Hon Tad a zo en Neñv, hoc'h anv  
bezet santelaet, ho rouantelezh  
deuet deomp, ho polontez bezet  
graet war an douar evel en Neñv.  
Roit deomp hiziv hor bara  
pemdeziek, pardonit deomp hor  
pec'hedoù, evel ma pardonomp  
d'ar re o deus manket ouzhomp,  
ha n'hon lezit ket da gouezhañ en  
temptadur, met hon diwallit diouzh  
an droug, Amen (pe : Evel-se  
bezet graet).



**Goude ar Bater, dek  
Ave Maria :**

Me ho salud, Mari, Leun a  
c'hras, an Aotrou Doue 'zo  
ganeoc'h, benniget oc'h  
dreist an holl gwraez, ha  
benniget eo ar frouezh eus  
ho korf Jezuz. Santez Mari,  
Mamm da Zoue, pedit  
evidomp pec'h-erien,  
bremañ ha da eur hor marv,  
Amen

**Goude, ur Gloria Patri :**

Klod d'an Tad, ha d'ar  
Mab ha d'ar Spered  
Santel, evel ma oa ha  
bremañ ha da viken, a  
gantvedoù da gantvedoù.  
Amen.

**Plijet bras eo  
ar Werc'hez Vari pa  
bedomp ganti.**



Kuzulioù :

Pa zibunomp ar Greddo e kounaomp Jezuz a zo savet d'an Neñvoù, azezet eo en tu dehou da Zoue. «*ac'hano e teuio da varn ar re vev hag ar re varv*».

Ar pep retañ da c'houzout a zesk ar bugel, diwezhatoc'h e c'hello donaat e feiz a-drugarez d'ar pezh a zo bet displeget dezhañ.



Sellomp ouzh ar skeudenn

Onenn : O ! Un Iliz vras !

Erwan : Ha dirak, kalz a dud.

Mamm : Tiegezh bras an Aotrou Doue war an Douar.

## Kredo an Ebestel

**Me 'gred** e Doue, an Tad  
hollc'halloudek, krouer an Neñv  
hag an Douar,  
hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet hon  
Aotrou,  
a zo bet koñsevet dre nerzh ar  
Spered Santel,  
ganet gant ar Werc'hez Vari,  
en deus gouzañvet dindan Poñs-  
Pilat,  
a zo bet kroazstaget, marvet, ha  
sebeliet,  
a zo diskennet d'an ifernioù.

D'an trede deiz eo savet a varv da vev ;  
pignet d'an neñvoù  
emañ azezet en tu dehou  
da Zoue an Tad hollc'halloudek.  
Ac'hano e teuio da varn ar re vev  
hag ar re varv.  
Me 'gred er Spered Santel,  
en Iliz santel katolik,  
e komunion ar Sent,  
e pardon ar pec'hedoù,  
e dasorc'hidigezh ar c'hig,  
er vuhez peurbadus.  
Amen.

# **SAKRAMANT AN ADUNANIÑ**

## **D'ar Gerent**

Fellet ez eus bet deoc'h badeziñ ho pugel. Bremañ eo dav reiñ dezhañ sakramantoù all, a zo eienennoù a vuhez evit ma kresko ennañ ar vuhez speredel gant Doue.

Abred-tre e ranker reiñ d'ar bugel ar c'hoant da virout e ene digailhar. Karout a ra an Aotrou Doue an eneoù glan, da lavarout eo dibec'hed.

Evit ober dezhañ kofes, arabat gortoz m'en defe ar bugel pec'hedoù bras da c'houlenn pardon evito digant an Aotrou Doue. Kerkent ha m'en deus ar skiant eus ar Mad hag eus an Droug eo ret dezhañ dont da glask e sakramant an adunaniñ kuzul, nerzh ha startijenn en e vuhez speredel.

Skiant ar Pec'hed a ranker reiñ d'ar bugel evit ma vezo armet evit e vuhez penn-da-benn. Adalek o oad tenerañ eo ret engrañ en o spered ar wironez ez eo ar pec'hed ur c'hriñ-bev a lazh buhez Doue ennomp.

Ar Stad a c'hras : hon unaniñ a ra ouzh Doue.

Ar Stad a bec'hed : hon disrannañ a ra diouzh Doue.

Pa gomzomp eus an Aotrou Doue ganto, e kreskomp ivez enno skiant ar Pec'hed, rak an Aotrou Doue a blij dezhañ an eneoù glan. Ret eo lavarout splann ez omp holl temptet gant an Droukspered, an Diaoul, a c'hoanta hol lakaat da bec'hiñ evit hon disrannañ diouzh an Aotrou Doue.

Kement-se a vez komprenet aes-tre gant ar vugale. Ret eo displegañ dezho ez eo ret stourm – ya, ur stourm taer etre ar Mad hag an Droug eo ar vuhez – met an Aotrou Doue 'zo ennañ evit trec'hiñ war an Droug. Abouez-tre eo eo komprenfe e tisparti ar pec'hed ac'hanomp diouzh an Aotrou Doue.

Ret eo displegañ d'ar bugel ez eus daou dra e sakramant an Adunaniñ :

1. Dre ar c'hofezadur e resevomp grasoù a nerzh, a sklerijenn, evit gwellaat, hag evel-se e vezomp unanet gwelloc'h ouzh Doue hor gortoz en e Varadoz ;
2. Dre ar c'hofezadur e vez pardonet ha diverket hor pec'hedoù. Atav e pardon Doue dre ma-z eo mat ha dre m'hor c'har.

Ar c'homzoù a zistag ar beleg evit pardoniñ deomp hor pec'hedoù a ya war-eeun en hor c'halonoù. En ur glask e bec'hedoù e stumm ar bugel e goustiañs ha pa brierter ur bugelig, ar pep retañ ha pouezusañ eo prientadur ar galon.

Gantañ eo ret kemer amzer da gomz eus madelezh an Aotrou Doue : bepred e vez prest da bardoniñ. Lenn en-dro parabolenn ar mab dispigner : digeriñ bras a ra an tad e zivrec'h evit degemer e vab keuzidik.

A-bouez eo enklask war e bec'hedoù, met dreist-holl e ranker merkañ mat ez eo Doue un Tas madelezhus ha trugarezus : pardoniñ a ra. Ar bugel a rank sellout ouzh Doue muioc'h eget dic'hoanagiñ en abeg d'e bec'hedoù. Doue a salv : hor pardoniñ a ra. D'ar vamm eo, e kement ha ma c'heller, sikour he bugel da ober enklask e bec'hedoù, hogen heñchañ anezhañ 'zo d'ober, ha n'eo ket selaou e gofezadur.

Kent kregiñ, eo ret pediñ ar Spered Santel, a sikouro ac'hanomp da welout sklaer ha da greskiñ hor c'harantez. A-wechoù e vo dav digablusaat ar bugel : torret 'zo bet un dra bennak gantañ, hogen dre zievezh e oa, n'eo ket pec'hed, zoken ma oa bet grozmolet ha kastizet evit-se. Diouzh un tu all, m'eo bet tagnous pe avius ha ma n'eus bet rebech ebet a-berzh e dud, ez eo pec'hed memestra.

Goude an enklask eus ar pec'hedoù, diskouez ur grusifi d'ar bugel :

**« Jezuz, p'edoc'h ouzh ar groaz, hoc'h eus gwelet va holl bec'hedoù, en abeg d'am oberoù em eus graet poan d'ho kalon. Prometiñ a ran ober strivoù (war boent pe boent). Salver Jezuz, fellout a ra din ho karout, p'am c'harit kement ! »**

Goude e gofezadur kentañ e vo ret displegañ mat d'ar bugel eo ret kofesaat ingal evit bevañ e gras Doue ha kaout evel-se ar peoc'h hag al levenez vras da gaout ur galon glan, hag ivez an nerzh a zo ezhomm evit stourm a-enep an techoù fall.

## Penaos kofes

1- **Pediñ an Aotrou Doue** da c'houlenn ar c'hras da gaout keuz d'ho pec'hedoù, nerzh d'o disklêriañ holl, ha glac'har dezho ivez. Da vihanañ c'hoantaat ar c'hras-se, daoust maz eo posubl ne vefe ket merzet a geuz pe a c'hlac'har : goulenn a ranker e vije.

*« O Jezuz, lakait ho koulou em c'halon  
hag ar wirionez war va diweuz,  
din da anaout ha da anzav va holl fec'hedoù. »*

2- **Sellout pizh ouzh e goustiañs ha klask ar pec'hedoù a saotr hon ene.**

An doare aesañ eo ober enklask en ur gemer gourc'hemenoù Doue ha re an Iliz

### **Gourc'hemenoù Doue**

1- Un Doue hepken a adori,  
ha dreist pep tra holl a gari.  
2- Anv Doue na doui ket,  
da zoujañ anv mestr ar bed.  
3- Ar Sulioù santel a viri  
d'enoriñ Doue, d'e bediñ.  
4- Da dad, da vamm a enori  
evit pell amzer ma vevi.

5- Muntrer ne vi e nep feson,  
nag a efed nag a galon.

6- Diwall diouzh pep seurt dic'hlanez  
hag a gorf hag a volontez.

7- Laerez na mirout madoù den  
ne ri tamm taol-noaz ebet ken.

8- Na gevier na fals-testeni,  
mir birviken na lavari

9. Na c'hoanta dre vilder pec'hiñ,  
nag e soñj louz n'en em bliji.

10- Madoù re all na c'hoanta ket  
d'o c'hemerout hep gwir ebet.

### Gourc'hemennoù an Iliz

1- Ouzhpenn ar sul, a-hed ar bloaz, pevar gouel-berzh a viri c'hoazh.

2 - Klevout a ri mat penn-da-benn, sul ha gouel-berz an Oferenn.

3 -Ur wech, er bloaz da vihanañ e kofesai, hep nac'h netra.

4 - Ha da Salver a resevi, da Bask, deolañ ma c'helli.

5 -Yun a ri 'pad an Azvent, 'pad ar C'horaiz ivez hep klemm.

6 - Kig nemet gouel-berz a vefe, da wener ne zebri morse.

7 - Diner an Iliz a roi, 'vit ma raio he c'hefridi.

Tu 'zo ivez da enklask en e goustiañs gant roll, ar penn-pec'hedoù : an ourgouilh, ar bizhoni, an hudurniezh, an avi, al lontegezh, ar vuanegezh, al leziregezh.

Mankoù a garantez eo ar pec'hedoù : tu 'zo da ensellout e vankoù :

#### **MANKOÙ E-KEÑVER DOUE :**

– diaked 'm eus lavaret va fedennoù  
– devezhioù on bet hep pediñ Doue  
– anv Doue 'm eus lavaret

dizoujañs

– war va gwall n'on ket bet en oferenn

– aliesoc'h 'm dije ranket komuniañ

– hep soñjal e Jezuz 'm eus

komuniet

– gant pec'hedoù bras n'em boa ket kofesaet on aet da gomuniañ

– mezh 'm eus bet oc'h en em ziskouez evel kristen dirak ar re all...

#### **MANKOÙ E-KEÑVER**

##### **AR RE ALL :**

– disent on bet ;

– rok ha dirivil 'm eus respontet

– kasoni, gwarizi, droukrañs 'm eus bet

– tabut 'm eus klasket, taolioù 'm eus skoet

– n'eus ket fellet din pardonin ;

– truchet 'm eus

– pilpous on bet (en em ziskouez gwelloc'h eget na vezer).

– a-ratozh 'm eus graet poan d'ar re all

– n'eus ket fellet din skoazellañ,

plijout pe rannañ gant ar re all

– emgar on bet (da lavarout eo : pep tra evidon, hep sellout ouzh ar re all)

– skouer fall 'm eus roet



- gevier 'm eus livet evit en em zigareziñ, evit fougeal, evit tapout re all
- arc'hant 'm eus laeret (pe traoù all)
- (...)

**MANKOÙ EM C'HEÑVER :**

- lorc'hus on bet
- mouzhañ 'm eus graet
- e traoù fall 'm eus soñjet gant plijadur
- jestrou vil 'm eus graet, va-unan pe gant re all
- ne 'm eus ket respetet va c'horf
- komzoù lous 'm rannet gant re all
- lontek on bet
- kounnarek on bet
- diek on bet
- ne 'm eus graet striv ebet war va labour
- pec'hedoù all (mar teu da soñj)...

**« Jezuz, pardon a c'houlennan ouzhoc'h a-greiz va c'halon, peogwir 'm eus graet poan deoc'h. »**

**3- Disklêriañ e holl bec'hedoù.**

Evit kofes ez aer d'ar beleg gant ar c'homzoù-mañ :

**« Pardonit din va Zad, rak pec'het em eus ».**

Neuze e tistager **ar C'honfiteor** :

**Konfiteor :**

*Anzav a ran ouzh Doue hollc'halloudek, ouzh an Itron Varia bepred gwerc'hez, ouzh an Aotrou sant Mikael arc'hael, ouzh an Aotrou sant Yann Vadezour, ouzh an ebestel sant Pêr ha sant Paol, ouzh an holl sent, hag ouzhoc'h-c'hwi, va zad, em eus pec'het bras, dre soñj, dre gomz, dre ober, ha dre lezober, dre va gwall, dre va gwall, dre va brasañ gwall.*

Goude se e lavarer peur eur bet o kofes ar wech diwezhañ, ez anzavit an holl bec'hedoù a zo war ho koustiañs hep klask kuzhat hini ebet, ha pet gwech e oa bet graet ar pec'hedoù. Paz eo echu e kendalc'her gant ar C'honfiteor :

*Dre va faot, dre va faot, dre va brasañ faot, rak-se, e c'houlennan ouzh an Itron Varia bepred gwerc'hez, ouzh an Aotrou sant Mikael arc'hael, ouzh an Aotrou sant Yann Vadezour, ouzh an ebestel sant Pêr ha sant Paol, ouzh an holl sent, hag ouzhoc'h va zad, pediñ Doue evidon.*

#### **4- Disklêriañ e geuz ha prometiñ chom hep pec'hiñ gant sikour Gras Doue.**

Kement-se a vez graet en ur lavarout a galon an Akt a geuzidigezh, o soñjal e madelezh an Aotrou Doue, hep derc'hel tamm karantez ebet evit ar pec'hed.

##### **Akt a Geuzidigezh**

Va Doue, c'hwi hag am eus dismegañset kement, ho pediñ a ran da bardoniñ din va fec'hedoù, rak keuz bras am eus, abalamour ma'z oc'h peurvat ha din meurbet da vezañ karet.

Gant gras Doue, e prometan, d'en em virout diouzh pep pec'hed, Ispisial diouzh ar re ez on ar muiañ kustum outo, hag e rin pinijenn. Amen.

E-keit-se e lavar ar beleg komzoù sakramant an adunaniñ :

*An Aotrou Doue, Tad leun a drugarez,  
en deus dre varv ha dasorc'hidigezh e Vab  
adunvanet ar bed gantañ ha kaset ar Spered Santel evit ar pardon eus ar pec'hedoù,  
dezhañ, dre vinistrerezh an Iliz, da reiñ deoc'h ar pardon hag ar peoc'h.  
Ha me a ro deoc'h an distaol eus hoc'h holl bec'hedoù,  
en anv an Tad, hag ar Mab + + hag ar Spered Santel.*

Respont : *Amen.*

#### **5- Klask dic'haouiñ.**

- Ober ar binijenn roet gant ar beleg, kentañ ma c'heller gant aon da zisoñjal. Kement-se ne c'hello ket diverkañ an droug a zo bet graet hogen diskouez a reomp splann gant ar binijenn hor c'hoant da gerzhout war hent ar mad a-nevez. Setu aze perak e vez lesanvet alies « Sakramant an Binijenn » gant an dud e-lec'h e anv gwirion, a zo « Sakramant an Adunaniñ », hini an adunaniezh ouzh an Aotrou Doue.
- Ar bedenn, ar binijenn, ar yun, an aluzonoù, ar habaskted e-kreiz an trubuilhoù a zo doareoù all da lavarout hor c'harantez da Zoue, da gemer perzh e poanioù Hor Salver, d'en em santelaat da chom e Gras Doue ha da zic'haouiñ hor pec'hedoù.
- Klask ouzhpenn-se dic'haouiñ ar gaou a zo bet graet d'hon nesañ dre hor pec'hedoù.

## PEDENNOÙ

### **Akt a Feiz**

Krediñ a ran start, o va Doue,  
en holl bennadoù eus ar feiz.  
D'ho heul e kinnig an Iliz  
ar pennadoù-se da grediñ.  
O diskuliet hoc'h eus dezhi  
ha faziañ n'hellit ket,  
Nag hon lakaat da faziañ,  
Dre maz oc'h gwriion pa gomzit.

### **Akt a Garantez**

Va Doue, ho karout a ran a-greiz va c'halon  
ha dreist kement tra a zo,  
abalamour ma'z oc'h peurvat

### **Akt a Esperañs**

Va Doue, va holl esperañs,  
Ennoc'h emañ va holl fiziañs :  
Esperiñ a ran digant ho madelezh,  
Mirout ho kourc'hemennoù,  
Dre sikour Jezuz va Salver.  
Evel-se, dre m'hoc'h eus o grataet  
ha dre ma talc'hit atav d'ho ker,  
'mo gras d'ober va Silvidigezh,  
ha da vont d'ar Baradoz er bed all.

ha din meurbet da vezañ karet.  
Va nesañ a garan ivez  
eveldon va-unan  
abalamour deoc'h, va Doue.

**D'ar Sakramant** (war don an Tantum ergo)

Azeulomp holl, e Sakramant an Aoter  
Doue kuzhet, Jezuz hor mestr, Hor Salver  
Speredoù evurus, Aeled ar baradoz  
Gant karantez a dan, meulit-eñ deiz ha noz,  
Meulit-eñ deiz ha noz.

Gwir vab Doue, en em c'hraet den d'hor prenañ,  
En ostiv sakr, oc'h kuzhet 'vit hor magañ ;  
Plijet ganeoc'h skuilhañ, eus ho tron an aoter,  
Warnomp daoulinet amañ, ho pennozh va Salver,  
Ho pennozh va Salver.

Enor ha gloar, ha karantez da Zoue,  
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive(z),  
Ra vezo e pep lec'h, an holl grouadurien,  
Hiziv ha da viken.

## **Pedenn diouzh ar beure**

1. M'hoc'h azeul, Doue, va C'hrouer,  
M'hoc'h azeul, Jezuz, va Salver,  
Me 'zo amañ war va daoulin,  
'Vit ho pediñ diouzh ar mintin.

2. Mil bennozh deoc'h, O va Aotrou,  
Evit hoc'h holl vadoberoù;  
D'am bezañ graet, prenet, miret,  
Hag en hoc'h Iliz kemeret.

3. Kement a rin, ha lavarinn,  
A c'houzañvin, hag a soñjin,  
A ginnigan evit ho kloar,  
Keit ha ma vin war douar.

'4. Vit plijout deoc'h, Salver karet,  
Me a dec'ho diouzh ar pec'hed  
Hag a heulio a-benn-da-benn  
Kement a zo en ho Lezenn.

5. Sellit ouzhin, O va Jezuz,  
Skuilhit warnon grasoù nerzhus,  
Ha dreist pep tra grit ma vo don  
Ho karantez 'barzh va c'halon.

6. Gwerc'hez Vari, va Mamm dener,  
Bezit atav mat em c'heñver;  
Ha pa sono eur ar c'himiad,  
Deut da glozañ va daoulagad.

7. Jezuz, Mari ha Jozef, Itron Santez Anna,  
Sant Pêr ha Sant Kaourintin,  
(pe : Tugdual, Malo, Brieg, Padern, Paol a  
Leon, Samzun, pe ur sant all...)

sent ha santezed Keltia,  
Aelez ha sent an neñvoù,  
me ho ped d'am souten,  
Ma c'hellin gant ho sikour  
gounit va c'hurunenn.

### **Pedenn diouzh an noz**

1- Kent ho kuitaat, Jezuz hon Aotrou,  
E c'houlennomp holl ho pennozh ;  
Amañ e lezomp hor c'halonoù,  
Hon diwallit a-hed an noz.  
Kent ho kuitaat, Jezuz hon Aotrou,  
E c'houlennomp holl ho pennozh ;

2- O Mari, hor Mamm muiañ karet,  
Roit dimp ho pennozh ivez ;  
'Vit hon mirout diouzh an droukspered  
Chomit e-kichen hor gwele.  
O Mari, hor Mamm muiañ karet,  
Roit dimp ho pennozh ivez.

3- O Ael mat, keneil karantezus,  
Hon difennit ha deiz ha noz  
Pa zeuy hor marv, pedit Jezuz

D'hon degemer er Baradoz.  
O Ael mat, keneil karantezus,  
Hon difennit ha deiz ha noz.

## D'AR GERENT HA D'AR GATEKIZERIEN

Daou garded a c'heller pourchas da glokaat al levr-mañ : karnedoù tresadennoù eo, a zo da liveañ hag a glot gant pep kentel al levr-mañ. Ar c'harned kentañ a zo ennañ tresadennoù aesoc'h da liveañ (daveenn 087a e ti *Téqui*) ha re an eil a zo diaesoc'h un tamm (daveenn 088a). Aes eo o luc'heilañ hag o fegañ en ur c'haier katekiz war anv pep bugel, adalek 6 bloaz.

## LEVRIOÙ EVIT AR VUGALE

- **Bibl ar vugale**, levrig skeudennaouet 60 pajennad a ro un dibab eus testennoù pennañ eus ar Bibl. Evit anavezout an Istor Santel (Testamant Kozh), ha buhez Jezuz (Testamant Nevez) 60 p.
- **Levrig ar C'hristen**, levrig evit respont d'an Oferenn en he stumm ordinal, gant kalz kantikoù.
- **Stumm dreistordinal an Oferenn ha Pedennoù**, levrig evit an Oferenn en he stumm dreist-ordinal, pedennoù evit ar beure, an noz, evit kofes, Añjelusoù, himnoù latin anavezet aozet e brezhoneg..
- **Santez Tereza vihan**. Bannoù treset
- **Kevrin ar vuhez displeget d'ar vugale** gant Jil Ewan (Deskoniadur 'revel')
- **Pedomp an Aotrou hiziv** levrig pedennoù e stumm barzhonegoù gant skeudennoù da liveañ gant J. Brohan
- **Sant Frañsez a Asiz, mignon ar vugale**, gant an Tad Medar



## EMBANNENNOÙ ALL

- **Humanae Vitae** kelc'helenn war an doujañs d'ar vuhez, gant Sant Paol VI
- **Sklerijenn ar feiz** , kelc'helenn HTS ar pab Frañsez
- **Da lestr eo da vuhez**, emvuhezskrid Santez Tereza vihan
- **Priz an Daspren**, gant Erwan ar Menga
- **Karantez eo Doue**, gant Erwan ar Menga
- **Sin an Templ**, gant Jean Danielou
- **Trec'h an Aotrou Krist**, gant Dom Ansker Vonier
- **An nor d'ar vuhez deol**, gant Sant Frañsez a Sal
- **An Hent**, gant Sant Josemaria Escriva de Balaguer
- **Katekiz an Iliz katolik** (diverradur)
- **Ar Bibl Santel** : sellout ouzh al lec'hienn
- **Kannennoù santel**, gant Job Kergrist (Ar Salmoù rimet)
- **Notennoù a Batrologiezh**, gant Maodez Glanndour
- **Goueler ar Sent**, gant Tepod Gwilhmod (Deiziadur ar sent evit an Iliz e Breizh)
- **Pedenn an Iliz**. Levr-pediñ an Iliz hep ofis al lennadennoù . Liestennet stumm A4
- **Liderezh an Eurioù** (Levr-pediñ klok e talvoud en Iliz, troet diwar al latin) **1/4** Azvent ha Nedeleg 1307 p. Ha diwar al lec'hienn : **2/4** Koraiz hag Amzer Bask 1944 p. **3/4** War ober : Amzer Blaen 1-17-vet sizh.
- **Oberennoù all e katalog Imbourc'h, ti-embann Emglev An Tiegezhioù** [eat@orange.fr](mailto:eat@orange.fr).  
*Emglev an Tiegezhioù, kevredigezh a gatoliked brezhonegerien a glask kevrediñ an tiegezhioù, ar gloer hag an dud dizimez da skoulmañ darempredoù a vignoniezh etrezo, kinnig skoazell, kemer perzh e obererezhioù 'zo evel ar Bibl e brezhoneg, kas da benn ho raktresoù deoc'h, sikour deoc'h katekizañ ho pugale, kelc'hioù studi ha pediñ, hag all. Ur c'hannadig a zeu er-maez bep daou viz, «**Kannadig Imbourc'h**» da gas war-raok en hor yezh ur preder dieub, kristen ha brezhon, war bep tachenn, hag ivez da reiñ keleier a bep seurt, pergen war buhez hor c'hevredigezh.*

## TAOLENN

### **Rakskrid**

#### **Kentañ trimiziad**

Kantik d'ar Spered Santel

Rak-kentelioù :

I. Pegen kaer eo !

II. Doue a zo anezhañ a-holl viskoazh.

Kentelioù :

1. Kement tra 'zo a zo graet gant Doue.
2. Doue a grouas ar gwez hag ar plant.
3. Doue a grouas al loened
4. Doue a grouas an heol, al loar hag ar stered.
5. Adam hag Eva.
6. Ur spered hag ur c'horf a zo ganin.

7. An Aotrou Doue a grou an Aelez.
8. Kouezhadenn an aeled fall.
9. Un ael mat a zo ganin.
  10. Va gwelout a ra an Aotrou Doue, va gwelout a ran an Aelez.
11. Adam hag Eva e Baradoz an Douar.
12. Siwazh ! Disentet o deus Adam hag Eva.
13. Kastizet eo bet Adam hag Eva.
14. Jezuz a vo ar Salver.
15. Ar Gemennidigezh.
16. Mari ha Jozef a a da Vetleem.
17. Nedeleg : Jezuz a zeu d'hor salviñ.

18. Ar vesaerien a azeul Jezuz.

### **Eil Trimiziad**

Kentelioù :

19. Azeuliñ Jezuz a ra ar Vajed.
20. An dec'hadenn d'an Ejipt.
21. Jezuz e Nazared.
22. Jezuz kollet hag adkavet.
23. Badeziant Jezuz.
24. Eured Kana.
25. Preadur ur bugel.
26. Ur pesketaerezh burzhudus.
27. An dek den lovr.
28. Ar Vadeziant.
29. Jezuz a vennig ar vugale.
30. Ar mab dispigner.

- 31. Kresk ar bara.
- 32. Ar Goan diwezhañ.
- 33. Arrestadur Jezuz.  
Ar Basion.
- 34. Hent ar Groaz  
ha kroazstagadur.
- 35. An Oferenn.
- 36. Jezuz en Tabernakl.
- 37. Dasorc'hidigezh Jezuz.

### **Trede trimiziad**

#### Kentelioù :

- 38. Ar merc'hed santel  
d'ar bez.
- 39. Jezuz en em ziskouez da  
Vari-Madalen.
- 40. Diskibien Emmaus.
- 41. Jezuz en em ziskouez  
d'an ebestel.
- 42. An eil pesketaerezh

- burzhudus.
- 43. Ar Bignidigezh :  
ar Yaou-Bask.
- 44. Ar Pantekost..
- 45. An Ebestel a gomz eus  
Jezuz hag a ra  
burzhudoù.
- 46. Galvidigezh ar beleg.
- 47. Ar bedenn hag ar  
sakramantoù.
- 48. En Oferenn en em  
unan an ouzh Jezuz..
- 49. En Oferenn e resevan  
Jezuz.
- 50. Mamm Jezuz.
- 51. Hor mamm eo  
ar Werc'hez Vari.
- 52. Ar pec'hed.
- 53. D'ar Baradoz e fell din  
mont.

- 54. Ar pezh a vo  
er Baradoz.
- 55. Hor mamm eo  
ar Werc'hez Vari
- 56. Pedenn ar chapeled.
- 57. An Iliz : Tiegezh bras  
an Aotrou Doue.

#### **Stagadennoù :**

Kredo an Ebestel  
Sakramant an Adunaniñ  
D'ar gerent  
Penaos kofes  
Pedennoù  
D'ar gerent ha d'ar  
gatekizerien  
Levrioù evit ar vugale  
Embannennoù all  
Taolenn.